

N° 100

an

DOËRE

Priz: 4€

DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNEDE





**SKOL-UEHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE**

**E  
Kastell  
An Erminig**

[www.skoluhelaruro.org](http://www.skoluhelaruro.org)

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr



**RENE BRISACH  
SIMINALIOU**

**PA GAN AN TAN  
E KAN AR VUHE**

54, Bali Chazelles 56 100 An Oriant  
Pzg : 02 97 21 36 34 – Fax : 02 97 64 47 42



**KAMPING AR VEITERI VRAZ  
E KARNAG  
ho tigemer**

Digoret a viz Ebrel de greiz miz Gwenholon  
Brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg komzet  
Pzg : 02 97 52 24 01 – Fax : 02 97 52 83 58.

## ROLL AR PENNADOU

KENT-SKRID	P. 4
UR SPILHENNIG eid ar vrezhonegerion	P. 5
1 000 POST-LABOUR é brezhoneg	P. 5
E NORZ IWERZHON, un emgleù...	P. 6
ISTOER AN ARMORIG	P. 7 - 13
UN DRO BALE berr ha poéntuz	P. 14 - 18
KAN AR BOBL 2 007	P. 19
STAJOÙ E BREZHONEG	P. 20
DEGOUEZHIOU DE ZONED	P. 21
PAJENN AL LENNERION	P. 22
NEH AN TORIG RU	P. 23
HOARAM UN TAMMIG – LAREDOU	P. 24
SONENN : DALH SONJ	P. 25
GIRIOU – KROEZ	P. 26

\*

Kirieg é peb skrivagner aveid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéré

## Kentskrid

En niverenn devézh an orboé komzet ag an niverennman, niverenn 100 « An Doéré », ha laret é vehé bet kempennet un deùézh kaer a zeverrans é Bubri, heb gouied pé sul é vehé. Hama ne vo ket d' ur sul ! D'ar yaou an Asansion é vo, d'ar 17 a viz mae.

Penaos é vo an deùézh-sé ?

- De 9 eur ½ : tolp-blé ar gevredigezh « Bro-Ereg », groeit é « Ti-Parréz », àr Blasenn an Iliz.
- De 11 eur : Overenn-bred é brezhoneg, é iliz parréz.
- De 12 eur ½ : Pred é « Ti-ar-Goualleg » àr ar mem blasenn.
- De 3 eur d'enderù : a-badenn a zeverrans, ér vorh Bubri ar wézh man (ar blé paset é Sant-Iwan éh oé).

Oll àr un dro, a galon vad, é helleem kañein soñennoù

Bro-Gwénéd. Peb unan a hello lared ur sorbienn, ur fablenn, adal ma vo é brezhoneg, penn-dé-gwir éma aveidom Gouil ar brezhoneg an dé-sé.

Muioh mui é veem bourraploh é vo. Kouviet enta ho familh, ho amizion hag amied.

Priz ar pred é « Ti-ar-Goualleg » é vo 19 euro de beb unan. Kaset ho chekenn, merchet ged hanù an ti-pred, de :

Anicet Le Floc'h, Hent ar Gémené 56 310 Bubri

pé de « An Doéré », 8 Stred Jules Le Guen 56 260 An Arvor.

En ur hortoz ar blijadur d'en em wéled é kennigam deoh or gwellan gourhemennoù.

An Doéré.

## UR SPILHENNIG EID AR VREZHONEGERION

Ged più komz é brezhoneg ?



Ijinet en-des « Ofis ar Brezhoneg » ur spilhenn vihan, hanùet « **Spilhennig** », ur « pin's » mar karet, de stagein àr an dilhad. Ur merch eid rein de ouied é hellér komz é brezhoneg.

Boud a vehé 300 000 a vrezhonegerion, dré ar vro.

Ar ré a zo é teskein ar yézh a garehé diviz ged ar vrezhonegerion arall. Penaos-ta gouied éma un dén kavet àr an hent ur brezhonegour ?

Un dra vad é enta lakad ar spilhennig-sé.

Mez émenn hé haved ? Ged ar pemp bureù « Ofis ar Brezhoneg » é hell boud goulennet (Roazhon, An Naoned, Karaez, Kavan ha Planwour). Sellet eùé doh :

[www.ofis-bzh.org](http://www.ofis-bzh.org)

## 1 000 POST-LABOUR E BREZHONEG

Revé « Ofis ar Brezhoneg » é vo kinniget muioh mui a bostoù-labour aveid ar vrezhonegerion é Breizh. Hiniù-an-dé é hellér kontein ur mil bennag émesk ar ré-man impléet dré ar vro, un tri hart anehé èl kelennerion ér skolioù.

Goudé daoù pé tri blé é wêlér entreprizioù, kenwerzherion ha tiér-kér é sinein ar garta (*charte*) « Ya d'ar Brez-

honeg ». Heb arvar é hellér sonjal é kresko hoazh ar postoù-labour.

Revé un enklask kaset de benn ged « Ofis ar Brezhoneg » é vo étré 1 250 ha 1 650 é 2 010, de lared é édan tri blé.

An dra-man a senifi eùé é vo dobér a dud stummet (*formé*) de gelenn ar yézh, pé d'hé implé àr an dachennoù-labour.

## DOÉRÉIOÙ DRÉ AR BED

E Norz Iwerzhon, pé Ulster :

Un emgleù étre Ian Paisley ha Gerry Adams.



Revé an emgleù sinet d'an 26 a viz meurzh devézh an 8 a viz mae. Ian Paisley, éan-mem, ha Martin Mc Guinness (ezel Sinn Féin) a vo rénerion kentan an Norz Iwerzhon.

Petra sonjal ag an emgleù-sé àrlherh kement a vléioù en-des biüet an Iwerzhoned èl éneberion ken didruhé étre-zé ?

Neoazh é hellam kredein é vo breman ar péah kriüoh eid ar brezél. An Iwerzhoniz a houlenn ar peah. Skuizh (chuéh) int ag ar brezél. Dé-gaset en-des ar brezél nameid gouzañv ha peuranté épad ma kresk muioh mui pinuidigezh o breudér é Su Iwerzon, pé Eire.

Hir e vo hoazh an hent, mez an hent mad é ar wézhman, hent ar péah.....

A. Samson

## ISTOER AN ARMORIG

### 3- Maréad ar Mantaloù

- a / Maréad ar Houivr hag an Arem: cf niverenn 96 An Doéré.

- b / Maréad an Houarn

*E niverenn 96 An Doéré em-boé divizet deoh a-zivoud maréad ar Houivr hag an Arem, betag kreiz an eil milvéad kent donedigezh H. S.*

*Klasket em-boé, de getan penn, dizolein penaoz é kerzhé an traoù én Armorig hag ér hornadoù - bro hag a zelié, devézhatoh, doned de voud ar Gall.....*

Kornog Europa én tu déhoù d'ar Rhein a oé neuzé rannet - dré vraz - étre :

- al Liguéd, é kreiznoz al linenn tennet a-zebrü flandrenn al Liger (Loire) betag motennoù an Alp ha rid ar Rhône

- hag an Ibéred, é kreisté an hevelep linenn betag kreiznoz an Italia, hag én Ibéria a-kerzh.....

Keijet a oent ged tud ar Mégalitoù, ha deit a oent, me gred, de voud ur boblans hag a viüé é péah, oll àr un dro. Pelloh, goudé embegadur ar Rhône, éh oé an Illyred, betag ar Mor Adriatig hag ar Mor-Du, ha pelloh hoazh ar Skyted ha poblansou Azia.....

Al linenn disparti étre al Liguéd hag an Ibéred - hag a dreuzé kornadoù ar Gall - a dreuzé eüé an Armorig, poblet neuzé dré an Ossidemed, doh tu ar breiznoz ha Mor-Breizh, ha dré ar Vénéted, doh tu ar hreisté hag é kevé ar Mor-Atlantig. Pythéas, ur moraér grek a vMassilia (4vet kantvéad kent H.S.) a gomz ag an Ossidemed èl an « Ostoned », hag Avienus, ur skrivagnér latin ag an 6vet



kantvléad kent H.S., o anaù-  
éan èl an « Ostrymned ». Ar  
Vénèted a zo badéet « Ene-  
ted », pé « Kynesioi » ged  
an hen-skrivagnerion.....

Poblans an Armorig a oé  
enta, én amzér-hont, ur mes-  
kaj ag ar pobloù néolitig  
kozh, ged ré al Ligured hag  
an Ibéred...Hag ar gelloud  
brasan a yé, heb arvar, ged  
ar Vénèted, deit de voud - a-  
houdé gwerso - marhadizion  
ar stén hag an uèbr étre o

staladurioù :  
- é kosté ar Mor Baltig, ér  
hornadoù anaùet èl « Wens ».  
- àr aodoù inizens Albion  
(*Breizh-Veur*), a-zebri porzh-  
mor Kantion ( ar vro anaùet  
breman èl ar hKent ), betag  
inizi Bro-Gornow.....  
- hag é gourinaz an Armorig,  
é péléh o-devoé o forzh-mor  
brudetan, Korbilon.....

De gKorbilon éh oé déga-  
set ar marhadourezh deit a  
gostéioù ar Mor-Baltig (uè-

br, krohennoù loned goué),  
tolpet eùé ged ar stén deit a  
inizi Kornow hag a gorna-  
doù an Armorig. Hag a  
gKorbilon éh oent rah kaset  
dré vor betag Gadès (Tartes-  
sos) é sôl an Ibéria (Bro-  
Spagn breman), ha dispar-  
tiet, goudé, dré ar voraerion  
punig betag porzhioù-mor ar  
Mor-Medidouarel hag an  
Azia Tostan, ha ré kreiznoz  
Afrika.

Ne ouiam ket a bézh kor-  
nad éh oé bet tennet al Li-  
gured hag an Ibéred. Mez  
kérent a oent - me gred - de  
boblansoù kozh inizens  
Albion, ha d'ar ré hag a vo  
anaùet goudé èl pobloù  
Indo-Européat, ar Gelted, ar  
Germaned, ar Slaved, an  
Aryaned... Ar Gelted a oé  
neuzé stalet\* é kreiznoz ha  
Retér an Europa, étre ar stér  
Rhein hag an Donaù. Stréuet  
a oent eùé doh tor ar ma-  
néioù Balkan betag aodoù ar  
Mor-Du. Biùein a hrent ster-  
det mad étrézé, rag deit a  
oent de voud niveruz braz -  
ré niveruz, é gwirioné - ged  
an amzér é tremén. Deli a

hré enta o rénerion boud  
berped é klask douaroù ha  
parkeùier fresk aveid ma-  
gein o loned hag o zud.

El-sé éh oé an traoù tro-  
ha-tro de greiz an eil  
kantvléad kent donedigezh  
H.S..

Mez neuzé éh es bet kem-  
madurioù blaohuz hag en-  
des lakeit an oll poblansou-  
hont de vrechenn\* àr un dro,  
ha de zivroein\* keti-ketan.

A-fed, gouied a hram dré  
hen-lénegezh ar Greked, an  
Ejiptiz ha broioù ar Mézo-  
potamia hag an India, pe-  
naoz éh es bet, én amzér-  
hont, dégouézhioù hirisuz\*  
hag en-des skontet rah an  
dud. An dégouézhioù hiri-  
suz-sé a zo bet diféret deom  
dré an Hébréed, dalhet neu-  
zé én Ejipt èl « 10 gouli » an  
Ejipt. Ind é, me gred, en-des  
o lakeit de guitad ar vro é  
gré Moïz, ha de gerhed  
tréma ar « vro neùé » grateit  
dehé é bro Kanaan.

En amzér-hont eùé éh oé  
bet krénoù-douar spontuz  
hag en-doé um saùet ur  
pikol volkan àr lein ar mor é

inizenn Santorin, é retér ar mor Egée. Ohpenn kement-sé, ar volkan neüé en-doé lakeit ar mor de foéuein ha de verüein, én ur seüel oulennoù vraz – anaüet breman èl « tsunamioù » ketabl\* de ziskar peb tra àr o hent...ha de zizolein aodoù ar Mor-Ru, doh tu ar hreiz-noz, a-veid lezel an Hébréed de dreuzein, kent ma arriüehé an Ejiptiz ged o hirri-brezél!

E kreiz an eil milvléad éh oé bet eüé kemmadurioù braz én èbr ag an amzér, tuemmet en-doé an ér ag ur blé d'an all, ha mangoér an erh en-doé um lakeit de gilein trema aodoù ar Mor-Kreiznoz hag ar Baltig. Bleinienn ar mor en-doé um lakeit de ihuélad a nebeudigou, lared a hrér penaoz hi-doé kresket un uigent métrad bennag étre ar 15 vet hag an 10 vet kantvléad kent donedigezh H.S., ha palforset èl-sé de déhein pelloh an oll poblansou hag a viüé àr an douarou izélan. Téhein a hrent eüé rag ma oent, é retér an Europa, diléhiet\* dré

ar bandennoù réderion-bro deit a blénennoù Azia, an Hyksosed. Ar ré-man en-doé skarhet én o raog ar hKim-mérianed (Kembréed?) hag ar Skyted, Shakyaed al lén-negezh én India. Neuzé eüé éh oé diskennet an Hittited d'an Azia-Tostan, goudé boud féahet dehé an Ejiptiz é gré Ramsès II. An Ejiptiz a zelié eüé um züenn doh « Poblou-ar-Mor », én o mesk un nivér braz a vrezélerion hag en-doé kuiteit kreiz Europa é klask douarou neüé é léh ar ré o-doé dilézet étre ar Rhein hag an Donaü. E touézh ar poblou-sé é kavam ar « Washished » hag a hellehé boud kérent d'an Ossismed hag ar « Philistined », kérent eüé – péchanj – d'ar Pélajianed a Vro-Skos...

Neuzé eüé éh oé bet diskaret sevénadur Mysenn, hag éh oé dégouézhet ar brezél brudet étre an Akéyed ha tud Ilion (Troie), ar brezél-sé hag a zo bet dañüé skridoù an Iliad hag an Odyssée.

Kent an dégouézhiou-sé, ar poblansou indo-européat a viüé tolpet é kreiz hag é retér Europa, sterdet étrézé. O farlandoù a oé tost mad unan d'an arall, èl ma vehé rann-yézhou é kevér un héveleb yézh-mamm, ar sans-kriteg.

En o mesk éh oé ar Gelted. Diü rummad a oé anché, ar Goidéled, stalet neuzé é kosté ar stér Rhein, hag ar hGalled, stalet un tammig izéloh, àr riblou an Donaü. Pe arriüas geté an treboulou braz hag em-es diféret ihuéloh, um lakeit o-des, ind eüé, de ziléhiein aveid klask douarou neüé de vagein o loñed hag o zud. Ar Goidéled endes neuzé treuzet ar Mor-Breizh, hag um stalet àr douarou Albion. Neuzé eüé éma deit ar Belged de du kornog ar Rhein betag ar Champagne ha plénennoù kreiznoz ar Gall betag ar Sequana (*Seine*). Ar hGalled a ziskenné, épad an amzér-sé, lod doh tu ar hornog é plénennoù ar Gall abézh, hag ur lod arall trema ar hreisté, é flandrennoù kreiz

Europa : diazéin a hrézent neuzé Vindobona (Vienne, é bro Austria) ha Singidunum (Belgrade, é bro Serbia breman). Goudé é kerhezant hoazh pèlloh trema ar hreisté hag ar retér, betag kreiz Italia ha betag stréhenn ar Bosfor ha gouriniz Anatolia...

An treboulou-sé en-doé padet hir amzér épad devézhant hantérad an eilvet milvléad kent H.S. Ar hGalled en-doé enta dilézet douarou o havell ketan étre Rhein ha Donaü, aveid kornadoù arall ér Gall hag ér broiou a-kosté. En atretan, an douarou – dilézet geté – a oé bet pieüet ged ar Jermand hag ar Slaved...

Brechenn a hré enta an oll poblou de beb tu, èl bandennadoù loñed penfollet. El-sé é komprenér perag é kavér kenbroizion ér péar horn ag an Europa. Ossismed an Armorig a zo, me gred, kenderüed de boblansou an Estonia (é kosté ar Mor-Baltig), ha de ré an Osséted (é kosté ar Géorgia breman). Ar Vénéted en-des

eùé kenderùed é lein ar Mor-Kreiznoz (ar Wensed), hag é sôl ar Mor-Adriatig (ar Venedotia), ha mem, marsé, é kornad bro Unedice (ér Tchékia breman) hag a oé bet kalon ar sévenadur kelteg ketan épad maréad an Arem...

Mez perag o-des, ar Belged hag ar hGalled, féahet ken éz gelloud politik al Ligured hag an Ibéred, deusto ma oé ar ré-man ken nivéruz èl-dé, ha marsé niverusoh ?

Aveid kompren kement-sé, éma red, me gred, en-devoud sonj a stad an Europa hag an Azia én amzér-hont. Ar hGelted en-doé desket labourad an houam ged ur boblans deit ag an Azia, an Hyksosed marsé, pé kentoh an Hittited hag a oé deit de chom é kreiz an Anatolia. An dud-sé a oé brezélerion ha marhegion\* heb par, ha gouied a hrent kempenn benùegér hag armaj houarn a-houdé un herrad mad. An Hittited en-doé gellat èl-sé féahein an Ejiptiz àr bratell-brezél Kadesh é gré Ramsès

II. Ind é, me gred, a zo bet kelennerion ar hGelted ketan diskennet d'an Anatolia ha d'ar Palestina, goudé kreiz an eilvet milvleád kent H.S. Ar Gelted ketan, hag a zougé armaj houarn, en-doé enta féahet, heb dièzemant, al Ligured hag an hen-poblansoù arall, hag um servijé hoazh a armaj kouivr pé a-rem. Ohpenn kement-sé, ar Gelted-hont a arriüé àr gein ronsed éneb de éneberion àr droèd. Me gred neoazh o-des biüet é péah, oll àr un dro, goudé an emgannoù ketan, rag ar Gelted, desaüerion loned, a viüé liésan àr lein ha doh tor ar motennoù, é kontrél d'an hen-poblansoù, labourizion douar ha marhadizion, hag a oé stalet – al lodenn vrasan anehé – ér flandrennoù izel hag ér plénennoù.

El-sé éma bet mestroniet\* ar Gall abézh ged ar hGalled é korv pemp pé hwéh kantvleád tro-ha-tro d'ar blé 1 000 kent H.S. Arriüet a oent dija é flandrenn ar Rhône, p'en-doé ar Greked

saüet kér Massilia, é kreiz an 6vet kantvleád kent H.S. Neuzé éh oent arriüet eùé é kosté an Armorig : a-fed, kaved a hram, goudé an 6vet kantvleád, tuadoù « galleg » é retér ar gouriniz étal an Ossismed hag ar Venéted : an Unelled, ar hKoriosilited, ar Rédoniz, hag an Naonediz...

Ardro an héveleb prantad o-doé eùé treuzet ar Mor-Breizh hag heuliet ar Goidéled aveid poblein in izenn Albion. Deit a oé an in izenn de voud « Breizh-Veur, ha red a oé bet d'ar boblans

hénan kilein betag in izenn an Iwerzhon ha motennoù Bro-Skos. An tuadoù kelt deit d'an Albion a zo bet hanüet an Vretoned, hag o bro neüé, in izenn Prydén. Yézh an dud-sé ha yézh hen-poblansoù ar hKent, a-dal d'ar Gall, a oé, me gred, hanval mad unan doh an all. An oll duadoù en-des enta, heb arvar, um geijet heb kalz a boén, ha deit ind, oll àr un dro, de voud lodeg én héveleb sevénadur, hanni ar Gelted.

*De genderhel.  
Loeiz ar Mouel*

### Giriou dièsoh merchet ged ur stérennig\*

Stalet : *établi, installé*

Brechenn : *détaler, déguerpir (« moucher », en parlant des vaches)*

Divroein : *s'expatrier, émigrer*

Dégouézhiou hirisuz : *événements horribles*

Ketabl : *capables de...*

Diléhiet : *démembre (membre), ici déplacés*

Marheg : *chevalier, cavalier*

Mestroniein : *dominer, maîtriser, vaincre, présider.*



## UN DRO BALE BERR HA POENIUZ. ( heuliadenn)

### Kentskrid

- De getan penn, vennein e hran difaotein ur fariadenn em es groeit em devéhan kentskrid : én eilved linenn, lénnet (96 vlé ), é lèh ( 86 vlé). Ha neoah, skriüet em boé « huézeg vlé ha pwar uigent ».

- Grateit em boé eùé komz, ar huéh-man, hiroh ag an Aotrou POIDRAS, mèz n'em es ket hoah kavet hañi de lared dein un dra bennag a-zivoud é vuhè-michèr, na gellet, naket, kavouid chomlèh é vugalé. Gouied a hran hebkin, é ma bet mestr-skol é Bubri. Ma hell ur lénnouur bennag, ag en des ean anaüet, kas d'ar gazetenn distérajoué a-zivoud Georges POIDRAS, lared a hram trugaré dehon a vremen.



Sant Kristol, gouarnour ar pont

Breman, dam éndro de gavouid « Georges bihan », 8 vlé dehon, ér blé 1917, épad ar « Brezèl Braz ». Kuiteit hun es ean a pe dreuzas ar pont Sant Kristol, é toned ged é dad kozh hag é gi " Flok" ag ar penn pellan a Lann Er Stér ( én amzèrhont, ar Prad Rédereh Ron-sed a oé pell aveid diuharr ur paotrig ag an oed-sé! ), ged ur gariolenn a vréh, de glask goulion de soudardi « kér vraz An Oriant ».....  
.....Jobig Ar Guludeg

Goudé ar pont é krapam ar ru Verdun, un tammig mañéeg. Breman éh om, é gwirioné é kér An Oriant. Ne wélér nameid tiér ha tud. Burlutein a hra men daou-lagad. Tiér stok ha stok al liésan, a glei hag a zéheu ag ar ru. Tud a vostad, é voned hag é toned, hanval doh houlennoù ar mor. Ur yoh tud dré ar ruiou, àr an tro-toirioù, é tiviz meur a wéh, mez liésah àr voulj èl ur ruchennad gwérén. Tud a gement mod a zo : lod gwis-ket mod kér ag an treid bet ar penn; botoù lèr geté, tokoù, mantelloù ag ar ré gaeran. Nen dint ket a me farrez-mé anehé, ar ré-sé: tud a gér int, n'int ket méziadiz. Merhed yaouank, kouifet mad, ged kouif gwenn mem bro, distennet mad. Ha kirri-tan, unan àrlerh an arall, ur lostad huéenn ( huan ) àrdran. Ha péh safar ! Bojardet (aba-sourdi) tré on ha doned a hran de voud bouar. Kement a drouz a doull men diskouarn. Men é ma peah douéel ar mézoù? Un tachad didrouz a hrehé vad

dein breman. Seblant a hra dein éma ponnéroh an traou a-houdé un herrad, med red é ataù moned araog. Red é hoah kerhed mad, édan an héol, aveid tapein ar soudardi.

Dré forh moned, chetu ni digouéhet ur sord dirag soudardi an 62 ème, pé « kazern ar 6-2 », èl ma vé laret ar liésan. ( Ne vehé ket deit sonj dein-mé, an dé-sé, é vehen bet ér soudardi-sé, trizeg vlé àrlerh, éh obér an huéh miz devéhan a me servij soudard...). Un nivér a soudarded, é voned hag é toned dré porzh ar gazem, klozet ged mangoériou i-huél, ihuél, heb toull erbed, nameid ar porzh. Dégeméret mad om ha bochad ag ar soudarded a gomz brezhonég. Mez dén ne za de houlen genom petra a hortam. 'Ma red deom kemér hon tro én ur sted a girri. Gortoz, gortoz un tammig mad, un euriad bennag, plantet é kreiz an héol. "Peb unan d'é dro », èl ma lar ar sonenn!

Goudé un herrad mad a amzér, doned a hrér de lared



deom éh oé prest an traoù. Ged herr, ar poar fust houarn zo karget a houlion; ne garget ket, ur sord, muioh eid n'hellet kas. Mez ar pézh a gargam a hrei ur suhuniad biùans d'al loned. Rekiz é o magein hag o lardein : tèr buoh vad, ul lé, ur pé moh. Ged ar goulion éh es peb sord restajoù bouid ar soudarded; magadur ag an dibab: friko d'al loned. Ar briz? Ne oé ket a chipot nag a rebat: aveid nitra éh oé an traoù! Gwéhavé, ér goulion, é kavér a beb sord diholaj: koutelloù, blankoù, h.h...- Mez guell é chom heb komz a gement-sé : dijaoj e vehé. Gaoù a vehé lared ne vourren ket ér soudardi-sé. En anzaù a hran : ké em es doh hé huitad. Mez mall é deom moned araog hag um droein de glask hent an distro kent ma vo ré zevézhad. Poén hun es é seüel. Kourz ar pred a dosta, dam de goéni-ein.

Chetu breman ohpenn kreisté ha 'ma red deom rein

léh d'ar ré rall. Dam kuit, dam kuit fonnuz d'ar gér.

Hastam buan, rag goall vall é lakat « àr ouél » : « Hatoup! », èl ma laré hoah marteloded Inizenn Groé én amzér-sé. Mall é tennein d'ar gér, dam éndro d'ar pradeuiér glaz. An hantér ag al labour a zo groeit, mez breman 'ma red krog én ur labour poéniusoh. An tennan a chom hoah d'obér, rag sammét mad é ar harr. Ponnér 'ma ar véh. Me zad kozh a skop én é zorn, én ur blégein é gorv é daoù, a grog ér brankardoù, pléget é souk geton. An taol-man, ged ar bouiz, béh hon-es é lakad ar rodoù de droein.



Lan barr a houlion é ar poar fust houarn, ha ponnér, me heh tud ! Toemm a vo stleijein édan an héol ar fustoù-sé, karget réz, hag ur souéh é kas an traoù araog. Emberr é tigéram hag ur

huéh oeit én hent, é kerzh gwell ar rodoù. Difonn ur sord éh a an traoù genom. Diésad a hra berped ar herhed. Ar hent an distro, a nebeudigoù, é ta ar skuihded. Kerhed àr an hent a vehé ur blijadur, pe ne vehem ker sammét. Ohpenn tra, nen d'es ket a harz ged an héol, ged an héol ha ne arsaù a gouéh àrnóm a blom, heb truhé. Nitra aveid garantein an dén ér ruioù stréh, blazuz, goudronnet, heb goaskedenn erbed kazimant.

Hireh em es breman de guitad kër vraz An Oriant. Péhed nen dé ket brih an amzér, mez nen des ket kogusenn erbed én neañv. Gozig éh om rostet biù édan grouéz miz est. A pe vehé distañusoh an amzér ahoel ! Nen des ket a harz! Tagein a hran ged ar séhed, "Flok" eüé, é dead, hir geton. Ha deur n'on-es ket. « Ul lomm aveid dispelhein (*étancher*) me séhed, ur bannig deur fresk ! Ur pikol barrad glau, Eutru Doué ! Ur sell a druhé, a pe vehé ho volanté : glau a chudellad ! Deur deit

ag an neañv ! Emenn émant, an déioù glau ? »

Dén ne gomz. Nerh erbed n'em es mui, me halon dihuiget (*fourbu*) n'hell ket mui doug é samm. Tapennoù huiz a zivér doh me zal. Goulli é me fenn èl ur skaüenn (*sureau vidé de sa moelle*). Na divréh, na diùhar n'em es mui. Pariù on (*je n'en peux plus*). N'on ket mui tré d'obér me labour àr lost ar harr. Skuizh on èl ur jao prest de gouéh ér fogell. Nen dé ket ur vichér, boud de me oed édan ar hrouéz, é rédeg àr an hentoù. Me mamm gozh doé laret erhoalh dein : « Diwallet, diwallet, me mab...-Hwi ho-po ké » ! M'em behé reit ur skouéd eid boud é hoarn me saoud ér prad réderezh. Ah ! pe vehen duhont, ér gér ! Bourrusoh a vehé dein boud é klask radenn, pé deliaù, én dishéol, én hentoù bihan, éh obér me énié ér lanneuiér... Aman: araog, araog ataù ! Mez, berped ar memes éneberion kalet: an hent, an héol, ar grouéz, ar séhed, an naon. Tamm bara erbed ém

fiched (*poché*). Penaoz chom plom édan ur pouéz ken ponnér? Kaset on de hesk, dinerzh on èl ur violon heb kordenn. 'Ma rekiz dein gobér un tamm repoz! Marsé un arrest é ti me mamm-baeron aveid tennein on hanal? Derhel a hra un davarn én « Ti Kaol », ( breman, ur « station service » zo bet saüet é léh an davarn ). Me zadkozh nen dé ket ur fall zén anehon, ne faot ket laret, é kontrél, un dén mad kentoh, a dra sur. Mez nen dé ket unan aveid koll é amzér hag é argand én tavarnioù na diyalhein blan-kigoù én ivaj. Gwir é, 'ma bet sterd dehon gounid é damm kraoù a-

houdé é youankiz. Dalhmad ér labour, heb saü kein. Jaméz ne chom de chistrad na de lagoutad, jaméz évaj geton. Hantein an davarn ne hra ket, n'é ket é vod. Klommet mad ind, stagelloù é yalh! Goulenn geton un arrest? Nen dé ket kaer mad moned éneb dehon mar-a-wéh : red é gouied an tu anehon.

Ur burhud! Chelaouet é me fedenn : arrest a hra én ur arriü é kevéded (*aux environs de*) ti me mamm-baeron, tavarnouréz a vichér. Chetu me hrès !.....

(*de genderhel ha de achiü*)

#### An neüé-hañv

Ahoél an amzér yein, én or bro, zo achiü  
Hag an amzér neüé hoazh zo arriü ;  
Nerzh an héol zo kriüeit, ha gwerso ér parkoù  
An erh a zo téet èl ar skorn él lennoù...  
Ar goukou, pad an dé, a gleüér é kañein ;  
E pep léh é wélér ar Pradoù é hlazein  
Ar gwé, o tra bourruz ! rah dré ar verjéioù  
Zo glaz-deur ged an dé, pé gwenn-kann ged ar bleu

J.M. Cadic

#### KAN AR BOBL 2 007 é Pondi

Ar Gouélioù en-des padet tri dé :

- ❖ **d'ar gwénér** : ged « *Al lou Poté* » ha « *Mistéro Bouffo* », ur péh-hoari farsuz ged « *Téatr Penn-ar-Bed* »
- ❖ **d'ar sadorn** :
  - Kenstrivadeg (konkour) laridé-gavot : oeit é ar priz de Jouanno/Durassier
  - Kanit-ta bugalé (édan 18 vlé). Ar priz ketan de Sterrenn, Riwal, Envel, Louri. Reseüet o-des o friz ged Nolwenn ha Soazig Monjarret.
  - Ur valéadenn ged « *A Bouéz Penn* » én ur gañein soñennoù ar vro.
  - Ur brezegenn (*discours, conférence*) a-zivoud ar soñennoù poblek ged Andréo ar Meut hag é dad Yann ar Meut.
  - De 8 eur de noz, éh oé kinniget ur pred-filaj, ha reit an tu d'an dud de gañein ha diskañein, èl ma vezé groeit gwézhzarall.
  - Epad an amzér-sé é tigoré ur Fest-Noz Vraz ér sal ar Gouélioù.
- ❖ **D'ar sul** :  
Studierion ar skolajoù a zo deit niveruz; klasket o-des pinüikaad ar soñennoù én ur mod neüé dispar.  
Tro an dé kleüet on-es soñennoù a boz, pé de zansal, ha strolladoù muzikerion.  
Epad an enderü éh es bet kontadennoù é kastell Rohan.  
Ar blasenn dirag Paléz ar Gouélioù éh oé diskoeit podoù pri ag ar ré vraüan. Ul lod kaer ag an dud en-des prénet boloù, podoù...hag all...aveid o has d'o ziér.  
  
Ur (h)Kan ar Bobl plijuz a zo bet hoazh ar blé-man, ha gorteit a vo ged hiréh kani ar blé de zoned.

N. ha P. Padelleg.

## **STAJOU E BREZHONEG :**

### **Kamp ar Vrezhonegerion** – Skol-hañv 2 007

E Skol Stad Joliot-Curie é Skaer :

- Ur suhuniad ag ar sul 8 a viz gourhelen (gouere) 2 007 betag ar sadorn 14.
- Un eil suhuniad ag ar sul 15 betag ar sadorn 21 a viz gourhelen 2 007.

KEAV : 22 Hent Mouliouen 29 Kemper

Pellgomz : 02 98 95 59 31 Postel : [keav@wanadoo.fr](mailto:keav@wanadoo.fr)

### **Ged Stumdi :**

Ur stummadur (formation) a vo saüet, adal miz gwenholon 2 007, aveid tud a oui ar brezhoneg hag a venn gwellaad o yézh.

Ur stummadur a 6 miz é, mez gouest é Stumdi de zégemer tud eid ur miz, pé ur bléad skol.

Stumdi : Maner Keranden B.P. 311 29 413 Landerne Cedex.

Pellgomz de : Amzer Nevez é Soé – Planwour 02 97 86 32 08

Mail : [contact@amzernevez.org](mailto:contact@amzernevez.org)

## **LIVROU NEUE-EMBANNET :**

- « Ar fri war ar gloued » - Livr Mikael Madeg a 146 P.  
Priz : 13 euro.  
Kavet é Coop-Breizh, pé goulenn ged « Emgleo Breizh »  
10, ru Kemper 29 200 Brest. Pgz : 02 98 02 68 17
- « Jules Verne, le monde celtique et la mer », é galleg,  
kavet é Coop-Breizh eüé.

Coop-Breizh 60, ru ar Porzh 56 100 An Oriant Pgz : 02 97 21 22 17

## **DEGOUEZHIOU DE ZONED :**

### **Perhinded ar Vrezhonegerion é Santéz Anna** d'ar sul 29/4 :

- de 11 eur : overenn é brezhoneg lidet ged an Tad Joseph Mahuas hag a zo bet eskob é Toulon-Fréjus.
- de 3 eur d'enderù : chapeled ha gopéroù ged an Tad Jean-Paul Cado, person Gregam.

An dé-kent, d'ar sadorn, é vo kinniget, de 8 eur ½, un diù euriad bennag a bedennoù kañet dirag an aotér, ged ar strollad « Gédourion ar Mitin ».

### **E Ruiz, « Tachenn Sévenadurel An Erminig »**

(à Rhuys, Espace Culturel de l'Hermine) Pgz : 02 97 48 29 40

- Digwener 27/4 de 8 eur ½ de noz :  
Filaj ged Noluenn Le Buhé hag ur hontour. Digor d'an oll.

- Disadorn 28/4 de 9 eur de noz :

Fest-Noz ged « Spontuz », Noluenn Le Buhé, Annie Ebrel...

### **Gouel Sant-Erwan (Iwan) én Oriant :**

D'an 19 a viz Mae (mé), èl beb blé én Oriant, é vo lidet ar Fest-Yves / Gouél Erwan, ged pompadou (*parades*) dré gèr, hag un abadenn ged ar « Strollad Arvest ». Ar Strollad en-des kempennet un albom neüé « Fantazi » ; lakeit e vo é gwerzh an dé-sé.

Dé « Gouél Sant-Erwan » a zo deit de voud « deüézh ar Vretoned » ged muioh mui a dud, é Naoned, é Roazhon, én Oriant...hag èl léhioù arall, heb ankouéhaad Pariz, é lidein « Gouél ar Vretoned ».

Titouroù (*renseignements*) : Emgleù Bro an Oriant Pgz : 02 97 21 69 75

## PAJENN AL LENNERION

1 - **Houssine Nedjar** (a Nanterre) en-des skriüet dem al lizhêr-man. Trugaré dehon a greiz kalon :

« Setu un artickl berr aveid lénnerion kazetenn "An Doéré".

Più on ? Ha petra é un tudoniour hag yezhour, pé yézthoniour?

Houssine é me hanù, Hocine é galleg, me zo tudoniour ha yezhour.

Petra é un tudoniour ? An tudoniour 'zo an dén éldon hag a studi orin breihat hag eüé lid, hengoun amzér gozh hag an amzér-vreman, ha

kredennoù dishaval. Yézhour on eüé ; m'em-es studiet kalz a yézhoù èl ar galleg, iwerzhoneg, kembreeg, brezhoneg, saozneg hag arabeg eüé.

E Bro Gwened, él é broiou keltieg all, éh es kalz istoriou faltazi ged tud moliahuz él istor ar Roué Arhur pé ar Rouañez Dahut ged hé zad ar Roué Gradlon, mez eüé istoriou faltazi ged loened pé évned.

Me aséo labourad genoh ha skriü aveidoh istoriou faltaziuz ha spereduz a-zivoud danùé Breizh..... »

*H.Najaar*

2 - « **Amizion Chapel Intron Varia Ar Bleu** » a Blarnel a zo ur gevredigezh saüet ér blé 2 000 aveid reneüécin ar chapel hag al léhioù tro-ha-tro.

Skriüet o-des dem ha kouviet ol lénnerion d'ur soñadeg (*concert*) d'ar gwénér 20/7, de unneg eur de noz.

Kañerion An Oriant ha Kanerion Pleuignér a gaño sonennoù ar Vro ha ré ar broiou keltieg aveid plijadur an oll.

Lakeit e vo hoazh ar gemenn én niverenn 101 « An Doéré » a vo kaset d'an déioù ketan a víz Gourhelén.

## Néh an torig ru



an torig-ru, jotig-ru, pé bruchig-ru

Un torig ru 'n doé groeit é néh  
El liorh kouarh 'n ur braù a léh  
Doh tor ar hleu 'dan ur bod spern  
'n ur léh kuhet mad ha distern.  
A dreist é benn èl dishlaüer  
Ur barr radén 'hra an afér.  
Pe ven é pâlad me liorh  
M'er gwél é ton'd, é mon'd, ar boh !  
En é bigos un tammig gloan  
Flour a vo kamb ar ré vihan.  
Che éan é neijal heb arsaü  
Marsé, en-des aon ag ar glaü  
Ged plu, ged gloan, ha ged yaot séh  
'ma groeit é néh buan ha éz.  
Ar barr spern gwenn éma é glud  
G' ur voéh distér é kan munud ;  
E baréz zo doh er chelaoù  
E kañein hé oll gwerzennoù  
G' é dad é vamm deit a Gembré  
En-doé disket toñioù neüé.  
Bamdé é hra plijadur dein  
E kornig me liorh é kañein  
N'é ket rekiz dein er pécin  
Rag éan gav bouid é me jardrin.

*Pier-Mari Jehanno - miz mae 2 006 -*

## HOARAM UN TAMMIG

An dé-sé éh oé 7 eur pe saùas Yannig ag é wélé, d'ar 7 a viz gourhelen. Hunvréet en-doé éh oé ur jao é redeg ged an niverenn 7 ! Toui de toui !!! Arriù é me zro...Ur sell àr é gont « CMB » : 7.777 euro.

Sur de hounid, hoari a hra é 7.777 euro àr ar jao 7, d'ar seihved rédadenn.

Hag ar jao 7 a arriù ar seihved !!!



Ur voéz a zimé é sonjal é tei é goaz de chanj, pe vo diméet, ha ne chanj ket anehon.

An dén a zimé é sonjal ne chanjo ket é voéz anehi, ha chanjein a hra.



Pe vé tabut étré ur goaz hag é voéz dalbéh en-des ar voéz ar gér devézh.

Mar da d'an dén lared ur gir ohpenn é komans kentézh un tabut neùé.

### LAREDOU

- . Plaset é mad é argant ; n'o zoucho ket kén.
- . Ean en-des débret goédigennoù ha ne oé ket lazhet ar pé moh.
- . Ur hoh kazh a gar logod yaouank.
- . An hani a hrei an dro a honneh é vo red dehon seüel mitin.
- . Henneh en-des ur goutell hag a droh doh an n(d)aoù du.

## DALH SONJ

Dalh sonj, o Breizh izel ag an amzer 'raog ma oes gwerzhet ha treiset ! pe  
hellé te vi - bion kerhed seder, sonn o fenn, di - neh o spered, 'raog ma  
Oes bet taol - et heb diwenn ha peur édan seuliou pon - ner an estren  
Ha staget da vikén doh é garrons é eur doh te dreid ken tinér ur chadenn.

1

Dalh sonj, o Breizh izel, ag an amzer  
'raog ma oes gwerzhet ha treiset  
Pe hellé te vibion kerzhed seder  
Sonn o fenn, dineh o spered  
'raog ma oes bet taolet heb diwenn ha peur  
Edan seuliou ponner an estren  
Ha staget de vikén doh é garrons é eur  
Doh te dreid ken tinér ur chadenn.


2

Dalh sonj, o Breizh izel, ag ar ré gozh  
O-des luskellet te gavell  
E peb traonienn hag àr gribell peb roz  
E kleüei o boéh én aùél  
An aùéliou a hwéh àr te blaennoù  
A zoug énéañoù ar Vretoned  
Hag a lavar dis bamedé én o hlemmoù  
Dalh sonj a te amzer treménet.

## GIRIOU-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

- 1-Gir latin eid un obé-riadenn muzik.- Anùbadé ur gañerez brudet é Bro-Gwened.  
 2-(a) daol é rouédoù.  
 3-(a) bed é latin .- Mab me hoér.- Armé.  
 4-Liamm étre ar vrez-honegerion.-Anù bihan.  
 5-Stér é Roazhon.- Moéz pé goaz.  
 6-Kontrél a toemder. Gir ur hrouédur aheurtet.  
 7-Rod digreizet.- Pichon.- Hantér lennad.  
 8-Rein ar bennoh.- 9-Eil abad Cluny.- Emgann Napoléon é 1 806.



### A-dreuz

- 1.-Propoz heb é diù letrenn getan.- Arboell heb achimant. 2- Unan braz é Santéz Anna d'ar 26/7. 3-Stadoù-Unanet.- Sant é Normandi.- Téatr ar Japoniz. 4-Komans a hra skriù.- Malüenn heb penn. 5.-Achimant é Londrez. Nini dibennet. 6-Lugernuz de noz.-Soudarded U.S. 7-Lenn ér Mañéioù Piréné.-Deit de voud un annoér.- Jénéral U.S.- 8-Gober fulad .- 9-Kêr é Bro-Spagn.-Santéz, mamm ar Vretoned.

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed** : 1- OPUS.- SOFI. 2.- PESKETOUR.- 3- ORA.- NI.- LU.- 4.- ZH.- ADRIEN.- 5- ILL.- EON.- 6- ANOUID.- NA.- 7- RD.- EN.- LEN.- 8.- BENNIGEIN.- 9- ODON.- IENA.

**A-dreuz** : 1- OPOZ.- ARBO.- 2.- PERHINDED.- 3.- USA.- LO.- NO.- 4.- SK.- ALUENN.- 5.- END.- INI.- 6.- STIRED.- GI.- 7.- OO.- IO.- LEE.- 8.- FULENNEIN.- 9.- IRUN.- ANNA.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
degemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, bouhadurezh...



### KOPIADENNOU EN HO UNAN

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
 abcopies56@wanadoo.fr  
 10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
 Kevredigezhoù  
 Entreprizioù  
 Ne vem più...

### ENEZ GROE - Kambroù-ostiz(chambres d'hôtes)

*Digor a-hed ar blez*



3, Ar Leurc'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
 Lévræoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
 Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
 Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E (chèques libelles  
à l'ordre de Kevredigeñ Bro-Ereg)  
Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Monél - Mériadeg Herneù - Jobig Le Guludeg - N et B Padelles  
Alfons Samson - P M Jéhanno

**ROÑSE D-MOR**  
**4 LOKOAL-MENDON 13 MAI**  
5 6 7 8 9 10 11 12



B-ugalé  
Skol  
diuyézheg  
d'ar  
Kan ar Bolb



**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN 0750.3326

Dépot légal 1<sup>er</sup> trimestre 2007

**INTERNET** : <http://perso.libertysurf.fr/andoere> **E-MAIL** : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)


N° 101

an

DOÉRIÉ

Priz 4€

DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED



Kar pedèr-rod ar gkelted é maréad Hallstad  
(kavet é stretweg, é bro Austria)





SKOL-UEHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)

37<sup>e</sup> Festival  
INTER CELTIQUE  
Lorient



KAMPING AR VEITERI VRAZ  
E KARNAG  
ho tigemer

Digoret a viz Ebrel de greiz miz Gwenholon  
Brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg komzet  
Pgz : 02 97 52 24 01 - Fax : 02 97 52 83 58.

## ROLL AR PENNADOU

KENT-SKRID	P. 4
GOUELIOU ETRKELTIEG	P. 5-6
E BUBRI D'AR 17 A VIZ ME	P. 7-8
ISTOER AN ARMORIG	P. 9-16
UN DRO BALE berr ha poëniuz	P. 17-20
STAJOU E BREZHONEG	P. 21
Y. P. KALLOH, ér brezél 1917	P. 22
AN HANOUU TIEGEZH	p. 23
SORBIENN - LAREDOU	p. 24
GOURENOU LOKRIST	P. 25
GIRIOU - KROEZ	P. 26



Kirieg é peb skrivagner a veid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéré

**Kent-skrid :**

**An termén de zigor on daoùlagad**

Chetu deit hoazh amzér ar vakansoù. De Vreizh é tei miliadoù a dud, tro an hañv ; doned a hreint de ziskuizh (*dischuéh*) ha de zigor an daoùlagad àr beb tra a hra braùité or bed-ni.

Ré liéz é chomam-ni pell braz a-zoh braùité or bro, dré an akustumans surwall ag an traouigoù a ra ar vuhé pamdéieg.

Deit é neoazh an termén de ziskuizh aveid-om-ni eùé. Nen dé ket rekiz moned d'ar broioù pell-pell aveid tañoad braùité ar bed. Pinùig a-walh é ar bed éndro dem.

« **An Doéré** » a ginnig ur valéadenn a zikoei deoh penaoz selled doh ar bed a durrall. E Morbihan é chome-em, ha moned a hreem d'ur vorh plijuz, disanaùetoh marsé ged tud ar vro eid ged an diañvézerion a zo é toned énni bamdé : borh ar **Gasilieg** (*La Gacilly*) é, borh Yves Rocher. Beb blé, épad an hañv, éh es kinniget un dis-kouézhadeg (*exposition*) dré

gêr, a-hed ar ruioù, doh mangoérioù an tiér.

Ar blé-man, éma bet choé-jet an tem : Biüein ahendarrall é Bro-Breizh, pé « *Festival Nature et Paysage de la Gacilly* ».



*Unan ag al luhskeudennoù*

Ur gentél dispar a-zivoud ar hreskans paduz ha diwenn an endro (*environnement*) dré labour an dud a-ziàr ar mēzoù. Red é eùé, al kent, moned de wéled Uzin Y. Rocher.

Tost d'ar Gasilieg éh es diù vorh arall de selled énni ur dremén dré-zé : Roh-an-Douar (*Rochefort-en-Terre*) ha Malastreg (*Malestroit*).

Mar deët, reit dem ho ali, mar plij genoh.

*An Doéré*

**GOUELIOU ETREKELTIEG AN ORIENT**

**Un penn-rénour neùé : Lisardo Lombardia**



*Lissardo Lombardia, Penn-rénour neüé.*

A houdé gwerso éh oé Lisardo Lombardia, un Asturian, é labourad àr un dro ged Jean-Pierre Pichard àr dachenn ar Festival Etrékeltieg. Hiriü en-des Lisardo keméret léh Jean-Pierre Pichard èl penn-rénour ar Festival. Hennen neoazh a chom étaldon ha kenderhel a hrei pell amzér de gemér perzh geton ér Festival.....

**Blé Bro-Skos é ar wézh-man :**



**Bro-Skos** a vo én inour ar blé-man. Edan berr é vo kleüet ar « Pipe-Bands » é soñein dré ruiù Kêr An Oriant. Ur ruskenn muzik épad dég dé ha dég noz aveid plijadur an oll.....

Dré ar bed abézh éma Bro-Skos anaüet. Ur vro bihan é neoazh ged hé 5 million 300 a dud. Pe vé kleüet ar giriù : kilt, scotch whisky, hoarioù dré nerzh, biniù braz, korolloù...é sonjêr Bro-Skos. Ur vro plijuz é, ged hé sévenadur, med eùé hé ékonomiéz é kreskaad goudé m'hé-des adkavet hé (f)Parlamant.

### Emesk an darvoudoù épad ar Festival :

A-ziar kement ha kement anehé, a veidoh on-es dibabet ar ré-man :

- Kentstrivadeg ar Baga-doù, d'ar sadorn 4/8
- Baléadenn Veur dré ruioù An Oriant, d'ar sul 5/8
- Tro ar suhun é vo é-leih a arvestoù, korolloù, muzik a beb sort kaset ged 2 500 arzour ag ar ré wellañ.

Emesk ar ré-man é tei Sinéad O'Connor, Dan Ar Braz, an Dubliners, Laurent Voulzy dédenet ged or sévenadur...

Peb unan a hello choéj èl ma kar. Goulennet, heb gor-toz, ar roll -labour ged ar :

### Léh ar brezhoneg ér Festival :

Epad ar bléioù paset, a pe dreménér dré kêr, é vezé dibosubl kaved an implé jaojabl d'ar brezhoneg. Chanj a hra an traoù. Gwélet a vé muioh mui a verchoù, skritelloù skriuët én or yézh. Gwélet a vé mem skridoù an Ti-Kêr, ré ar Festival, lakeit

**Festival 8, straed Nayel én Oriant Pgz : 02 97 21 24 29**

[www.festival-interceltique.com](http://www.festival-interceltique.com)

Ar sul 12 a viz Est a vo an devézhan dé. E iliz Sant Loeiz, de zeg eur, é vo lidet an overenn-bred ged an aotrou René Le Ruyet, person Pont-Skorv. « Kañerion ar Skorv » ha « Boéh Santéz Anna » a rei harp d'an dud aveid kañein oll àr un dro.

El beb blé é tei hoazh, surwalh, kalz a dud de heuli un overenn gaer, é brezhoneg al lod vrasan anehi....

é galleg hag, àr un dro, é brezhoneg.

Labour « Ofis Ar Brezhoneg » a zo dispar. A nébeudigoù é ta de benn a lakad éndro ar yézh de viücin. Hir ha diêz a vo an hent. Digor é alkent, deom-ni é breman er frankaad.

### E BUBRI D'AR 17 A VIZ ME :

#### DEUEZH AR BREZHONEG

De 9 eur ½ é tigoré tolp-blé Kevredigezh Bro-Ereg, é Ti-Parréz, dirag un douséniad a dud, ha kentéh arlerh éh oé kenlidet an overenn-bred é iliz-parréz ged an aotrou Méliou Guillaume, person Melrand, an Tad Yann An Dorze hag an Tad Robert Prévost.



Deusto ma oé dé an Asansion, ha kaer an amzér, deit a oé kalz a dud d'an overenn, kement èl aveid ar blé paset. A vouéh ihuél hag a galon en-des kañet an iliziad kañennoù anaüet mad, édan rénerezh Jean-Jacques Le Floc'h, a zo penn-rénour « Santéz Anna Gwéned ». Sekouret mad a oé ged « baré kañerion Bubri ha Mel-

rant » hag an hoariour doh an harmonium, Jorj Belz.

Goudé an overenn deit é ohpenn tri ugent a dud d'ar pred é « Ti-ar-Goualleg »... N'hellér ket gobér ur chervad joéiuz étre mignoned heb soñennoù ! Ha soñennoù a zo bet épad ar pred !



Goudé ar pred, tro an enderù, éleih a soñennoù éndro ! Anicet, Pier-Mari, Gérard, Francis, Hervé, Nicole,

Maria ha...N'hellam ket ni-  
vérein oll ar ré en-des lakeit  
an dud de gañal.



Anicet, ur hañour ag an dibab

Plijet braz en-des euc ar  
fablenn « Ar Vran hag ar  
Bleiz ». Red é lared éh oé  
Raymond ar hontour, ha peb  
unan a oér éma éañ ur  
hontour dispar.



Jean-Jacques Le Floch

Ur péh-hoari farsuz :  
« Jostrom é klah dimécin »  
hoariet ged ré en em gav beb  
trived sadom ag ar miz é  
« Ti-Parréz » Bubri en-des

plijet d'an dud. Hoarhet o-  
des ataù o goalh !

Deit a oé eùé genem ur  
paotr, hag ur plah, izili  
(membres) « Spered Bro  
Ploué » En em lakeit o-des  
de gañein ha ni geté én ur  
heuli ar girioù ar un daolenn,  
ar un dro ged hoari un  
akordéon... ér fëson-sé, éma  
éz deskein ar soñennoù !



Tro Pier-Mari Jéhanno, kañour, soñour  
akordéon, ha skrivagnour...

Abenn ar blé é vo reneüet  
an deüézh d'ar mem dé, de  
Yaou an Asansion.....

A. Samson

N.B. :

**Ketan tol :** é Ti-Parréz Bu-  
bri d'ar sadom 15 a viz  
gwenholon, aveid deskein  
lénn, kañein...de 5 eur d'en-  
derù betag 7 eur.....

## ISTOER AN ARMORIG


### b/ Maréad an houarn (kendalh an niverenn 100)

Ar sévenadur kelt en-des  
padet a-houdé ar 15vet kant-  
vléad betag donedigezh ar  
Roméned, é kreiz an devéz-  
han kantvléad kent H.S. Mez  
boud a zo bet daoù stumm  
anehon.

Ar stumm ketan, hag en-  
des padet betag ar 7vet, pé  
an 6vet, kantvléad, a vé d'al  
liésan badéet « Sévenadur  
Hallstatt », revé hanù ur gé-  
riadenn a vro-Austria é péha-  
ni éh es un nivér braz a do-  
sennoù saüet ar béioù ar  
Gelted ketan, arriüet, èl ma  
ouïer, ar gein o ronsed pé én

Arlerh ar 7vet kantvléad, ne  
gavér ket mui tosennoù èl ar  
ré-sé, rag boud zo bet, én  
amzér-sé, un dispéah braz é  
kreiz an Europa, un dispéah  
braz hag en-des diskaret  
grons gelloud politig ar  
Gelted-hont, anaüet èl « tud  
Hallstatt ». An dispéah braz-  
hont a oé bet penn-kaozet,  
d'em sonj, dré greskans di-  
reizh ar poblansoù én amzer-  
hont, ha dré ma oé ar ré ya-  
ouank palforset de zivroein,  
é prantad peb neüé-hañv,  
aveid kavouid douaroù fresk  
é poéz. Disparti ar youankiz-  
sé a oé hanüet an « neüé-  
hañv sakret » (ar « ver sa-  
crum » é yézh ar Roméned).

Mestroni ar Gelted a oé  
neuzé, é gré Hallstatt, sellet  
ged ar ré-rall èl ur gelloud  
direizh, ha nahet a oé estal  
gelloud an noblans gall é  
penn devézh an 18 vet  
kantvléad goudé H.S. An  
« tiemed » kelt a oé deit de  
voud « tirañed », revé ar gir  
grek hag en-des an hévelep



Kavadenn Hochdorf (é bro Germania, 6  
vet k kent HS) Kempennadur bé un tiern

o hirri-brezél, é giz an Hitti-  
ted éneb d'an Ejiptiz. Intè-  
ret a oent ged o armaj hou-  
arn, ha liéz mad, ged o hirri-  
brezél, hag o bragerisoù..

grouiennoù (tiem = turanos = an hani hag a rén un tuad, é-unan). Ha breman, an hévelep armaj houarn a oé impléet ged an oll, Kelted hag hen-poblansoù...

Nen des ket testoni erbed a sévenadur Hallstatt én Armorig. Ne zeï dehé sévenadur ar Gelted nameid ged donedigezh ar hGalled goude kreiz an devézhan milvleád kent H.S...Neuzé éma dichennet ar Beljed hag ar hGalled trema ar hreisté betag kreiz an Italia, ha betag kreiz an Anatolia, ér Galatia, goudé boud keméret dehé ar gér a Rom ér blé 387 kent H.S... « Ne zoujam nameid un dra, a larezant de Alexandr-Meur (356 – 323 kent H.S)... ma kouézhehé an néañv àr or pennoù ! ». Neuzé éma deit eùé ar hGalled betag harzoù an Armorig. Um stalet o-des é kosté an Ossismed hag ar Vénéted, mez heb diskarein gelloud ar ré-man, hag a oé, a-houdé gwerso braz, rénerion ar genwerzh dré vor a-zebri aodoù ar Mor-Baltig, ar Mor-Kreiznoz, Mor-Breizh hag ar

Mor-Atlantig, betag Tartessos én Ibéria.

Ar henwerzh-sé en-doé neoazh goanneit paodmad anebeudigoù a-houdé penn devézhan an eilvet milvleád, rag ar Gelted Hallstatt, hag a vestronié kreiz an Europa abézh, en-doé kempennet hentoù neùé, dré ar stérioriù Elb, Rhein, Donaù ha Rhodanos (Rhône), aveid dougein marhadourezh broioù ar hreiznoz betag aodoù ar Mor-Médidouarel, heb gouzañuein danjérioriù ar Mor-Atlantig.

Ne chomé ket mui enta ged navierion ar Vénéted nameid an darempredoù ged o henderùed é Breizh-Veur, dreist-oll é Kantion, ha ged o ostizion é bro-Ibéria. Goannad a hras enta gelloud hag obéredigezh Korbilon, é embegadur al Ligér, betag doned de voud dianau é lennegezh ar Greked, én devézhan kantvleádoù kent H.S. Ne anaùér ket mui, ér Gall abézh, nameid Massilia, ar porzh-mor saüet dré navierion Phoséa é penn ketan ar 6vet kantvleád kent H.S..

An dispéah braz-hont – tro ha tro d'ar 7vet kantvleád kent H.S. – en-doé enta diskaret gelloud an tierned kelt, hag ur sévenadur neùé en-doé déreüet neuzé, forh dishanval d'an hanni aristokratig hag a oé é vleüein agent. Ar sévenadur-sé a zo anaüet èl « Sévenadur La Tène », revé hanü ur gériadenn distér a vro Helvétia é-kosté Neuchatel (Bro-Suis), é péhanni éh es bet kavet kalz a destioniù anehon.

Epad maréad La Tène, hag en-des padet a-houdé kreiz an devézhan kantvleád kent H.S., ar Gelted neùé en-doé mestroniet an hantér ag an Italia, betag Rom, ha diskennet o-doé betag an Azia-Tostan. Er Gall, diskennet o-doé flandrenn ar Rhodanos betag Massilia, ha kerzhet o-doé betag an Armorig hag ar Goaskonia. Chom a hras neoazh ar Goaskoned (ar Basked) fidél d'o yézh (an Euzkadi) hag an Armorigiz, fidél de lidoù o zud kozh...

An Armorigiz a viüé, al lodenn vrasan anehé, é kériadennoù\* distér streüet ér vro abézh, nivérusoh ha

stankoh, me gred, étal aodoù ar mor. Digoret o-doé parkoù-labour ha pradouiér é lédanded ar hoed braz hag a holé ar gouriniz, én amzér gwézh-arall ; ind é, d'em sonj, en-des reit d'ar vro ar stumm a anaüam hoazh, hiniü-an-dé, ged an hentoù praz hag ivarhoù, ar héioù hag ar hléioù a wélam berped...deusto d'an distruj obéret ged follanté a-houdé an 50 vlé devézhan-man ! Kaüet o-doé kambroù édan o ziér, heb ne ouiér perag émant bet kempennet, marsé aveid mired an ed éneb d'al loned (bleidi, luherned), marsé eùé aveid kuzhed an traoù doh ivi ar réderionbro ? Ar pézh zo sur, éma ne gavér ket kambroù don èl-sé ér méz a ouriniz an Armorig.



Kambroù don kavet én Armorig  
(Maréad an houarn)

Pégement a dud a oent-ind ? Etré 3 ha 10 é peb km2, de lared é, tro-ha-tro de 200 pé 300 mil a dud ar un dro, marsé muioh. Um vellein a hrent a zesaù loned (deved, saoud, ronsed) hag a estein fréhaj hag édaj a beb sort (mil, segal, guinézh-tu...). Um vagein a hrent ged youd, léahaj ha krampoèzh...ged un tammig kig ur wézh én amzér, a-ziar o loned (kig lé, yér, kounifled), hag al loned goué lazhet dehé é jiboésad pé tapet ged pinchoù. Dè-brein a hrent eùé pesked ha fréhaj mor.

O lidoù é kevér ar ré varù a zisko splann penaoz o-doé fé én ur vuhé arall goudé ar marù. N'o-doé ket neoazh dégeméret gizioù Hallstatt, ha chom a hrent fidél de lidoù hengounel ar vro. Lod anehé a intèré enta relégoù an dud marù, hag ul lodenn arall o loské, peb tuad ha peb tiegèzh revé gizioù ar ré gozh.

O béredoù a oé, liéz mad, merchet ged ur peul-maen\* é kreiz ar parkad béioù, èl ar ré zo bet kavet é Karnag (an Nignol, Koed-Atous), é Ki-

berén (Beg-ar-Vil, Mané-Béker-Notz)...Ar peulioù i-huélan, betag 4 métrad, a zo kavet drest-oll é kornad-bro an Ossismed, doh tu ar Mor-Atlantig, èl hani Penhors (é parréz Tréogat). Boud zo ré munut eùé, drest-oll é kornad-bro ar Vénéted, lod anehé ged un toul braz, kaùet ar ar lein anehé, aveid reseù al ludu.

Unan ag ar peulioù-sé, kavet é parréz Pluergad, a zoug ur frazenn skriüet é yézh ar Vénéted, dishanval de hani ar hGalled.



Peul an Enan (Anaon) é Trégastel

Ne ouïer ket pesort kre-

dennoù o-doé-ind, ha pesort lidoù a oé geté épad o buhé. Boud zo neoazh seblant en em dolpent mar-a-wézh é koedoù sakret, hanüet « nemeton », hag o-doé un doujans vraz é kevér an « Intron-Veur », inouret geté ahoudé ar maréad néolitig èl o « mamm-gozh » benniget.



An Intron Veur

Kreidein a hrér eùé é kempennent préhésionoù braz én dro de « Fetanioù-Buhé », ketabl de zakor ar yéhed d'ar ré klañv, ha de rein ur gulvoud euruz d'ar moézi dougerézed...

Desket a oé o bugalé, ha barnet a oent, pe oé red, dré

kélennerion brudet ér bed abézh, an Drouized. Geté, me gred, é rantent inour ha lidoù de « Zouéed » o zua-doù (Teutatès = tad an tuad, Lug...), de gKernunos, doué an Enan divarüel, de Bélénos, doué an Héol, ha d'é baréz Bélisa (pé Bélisama).




An Doué Kernunos (é muzeüm Reims)

Inouret a oent ar lein ar manéioù sakret, èl ar mané Sant-Mikél (hanüet neuzé « Tan-Bélen »), ha marsé mané Meukon. Intancin a hrent eùé tantadoù braz de gourzoù ar hempouiz\* étré dé ha noz, é penn devézhan mizioù Méhüen hag an Avent. Un doujans braz o-doé eùé aveid tolpadoù merhed youang (menestrein léanézi, pé gwerhiézed) hag

a viùe neuzé én inizi brudet, èl Séna, Groé hag inizenn ar Samnited (= Namnéted?) é embegadur al Ligér. Lared a hrér o-doé ar gelloud de zégas glaù, àùèl hag arnan àr ar vro...ha d'o lakad de deùel, èl ma plijé dehé !!!


Deli a hran lared, aveid achiù, penaoz é tiskoent ur garanté tinér é kevér o zud treménet, drest-oll d'an dé ketan a viz Kalan-Gouiañv, dé Gouil an Enan. Ar ré varù a zé, sanset, éndro an dé-sé, heb boud gwélet neoazh. Lakeit a oé enta boketou àr o béioù, ha marsé un nebeud boud revé ar pézh a blijé dehé, a pe oent biù...

An dud-hont, é maréad La Tène, a oé ken ampert èl ma om-ni breman. Ind a ouié filein ha nécin gloan, lién ha kouarh aveid gobér dillad ha kerdad. Derhel a hrent eùe de gempenn bohalou arem troédet, deusto ne oé ket mui kalz a oulenn aveité. Miché-rizion mad a oent aveid labourad an arem, èl gwézh-arall, hag an houarn, a neùeso, hag obérein a hrent benùégér a beb sort, ken éféduz èl ar ré hon-es breman,



Bohalou arem troédet kavet é Klégéreg

hag armaj eùe, pe oé rekiz dehé um ziuenn doh al laeron ha doh ar réderion-bro ha ne anaùent ket. Dornet mad a oent eùe aveid gobér kirri ha bagoù é stad de gas marhadourezh àr ar mor, ha de navial étré Mor-Breizh hag ar Mor-Atlantig.



Stumm gwirhanval bagoù ar Vénéted (Revé R.Y. Creston)

Kizellerion o-doé eùe aveid implécin mantalou présiuz, hag obérein bizaouïér, azornelloù\* ha brehelloù\*

aveid dougein bri d'o merhed ha d'o moézi.

Red a oé dehé um ziuenn doh ar réderion-bro hag a glaské o laerad pé o goaskein. Kempennet o-doé èl-sé kampoù ha kastelloù mein, ged kéioù ha kléioù masonet, ha ged fozelloù douar aveid arrest ar ronsed. Kavet zo bet un nivér braz anehé, é lein ar manéioù hag é begoù-douar\* ihuél é kosté ar mor; ar ré anaüetan a zo de wéled é Kamp Artus (Huelgoat), hag èl léhioù hanüet « Koh-Kastell », ér Gerveur hag é inizenn Hoedig. An hani brasan a oé é PenChateau, é parréz Pouliguen, é kosté Korbilon: diüennein a hré 7 ha a zouarou, ardran pedér linenn fozelloù...



Fozellou-douar, é Kamp Artus (Ardou-an-Arvor)

Ar riblou ar stérioù, hag é kosté ar mor, éh ouient eùe

tapein pesked ged gouredoù-mein\*, kempennet én dro de bouloù-deur stanket, heb komz ag ar besketerezh ged higennoù, stléjet a beb tu d'o bagoù...Desket o-doé eùe tennein halén ag an deur mor, ged er poahein é podou pri: dobér o-doé ag an halén-sé aveid salein o boud ha mired o mohaj, brudet é oll kornadoù ar Gall. Ur stal braz aveid tennein halén a zo bet kavet é kosté Moustérian, é parréz Siné.

Lared a hran, aveid achiù, éh ouient eùe kempenn podou pri a beb sort, deusto ne impléent ket an turn\* aveid rein dehé ar stumm deliet.



Lestri-pri aveid reliqouà ar ré vuru, kavet é Kastell-Paol (Penn-ar-Bed)

A-fed, kavet zo bet milou anehé, ré vihan ha distér aveid dobériou ar vuhé pamié, ha ré braz ha nifl, seill-

stummet\*, aveid dégemér relégoù ar ré varù.

Ar gwellan testoni a am-pertiz ar Armorigiz a zo de gaved, d'em sonj, én o fêz-hioù-moné, a-houde an eil kantvleád kent H.S. betag donedigezh ar Romened. Stummet a oent estal ré an Arverned (goude diskar ar ré-man ér blé 121 kent H.S.), àr skuir ar monédoù a vro-Makédonia.



Pèzh-moné ar Vénéted



an Osismed

Ar vichérizion hag en-doé

o zrêset ha skoeit a oé ar-zerion drest par, mez ne ouj-ér ket neoazh, é gwirioné, petra a venné lared an tresoù hag al linennoù a gavér ar daoù du ar monédoù-sé : marsé dremmoù o Douéed, pé o rénerion, pé hoazh tud brudet én o lennegezh ?

En ur gir, dalhet o-devoé an dud-hont gizioù o zud kozh, deusto ma o-doé dégeméret a-nebeudigoù yézh o mistr, ar hGalled. Sellet a oent àr an achimant èl ul lodenn diziforh ag ar vro Gall, mez chomet a oent ur-sort ur hornad dishanval é kornog Europa.

Loeiz ar Mouel. (de genderhel...)

#### **Giriou diéz ha neué-giriou merchet ged ur stérennig\***

**Azornelloù** : bracelets de poignet  
**Bréhellou** : bracelets de bras  
**Begou-douar** : promontoires  
**Brechenn** : courir en tous sens  
**Darempredoù** : relations  
**Dégouézhioù** : événements  
**Dereuein** : commencer  
**Diléhein** : déplacer, refouler  
**Obérédigezh** : activité  
**Embegadur** : embouchure  
**Goured** : pêcherie (avec blocage de pierres)  
**Hirisuz** : terrible  
**Kenwerzh (dré vor)** : commerce maritime  
**Kambr don, pé kaüet** : souterrain

**Pièuein** : posséder  
**Kériadenn** : localité  
**Ketabl** : capable  
**Kaüein** : creuser  
**Peul-maen** : stèle  
**Seill-stummet** : en forme de séau  
**Stalet** : établi, installé  
**Stréhenn** : détroit  
**Turn** : tour (de potier)  
**Donaü** : le Danube  
**Réderion-bro** : nomades

## **UN DRO BALE BERR HA POENIUZ**

(heuliadenn... ha dibenn)

### Kentskrid

Chetu ni arriü ér penn devéhan a dro balé ur paotrig a gomansam anouid mad breman : Georges Poidras, 8 vlé ér blé 1917. Kroget en devoé én « dro balé »-sé ged jourdoul a pen doé kuiteit ti é dud kozh é Lann Er Stér, de vitin. Mès, àr hent an distro, deit é ar valé de vould poéniuz-tré, rag sammet mad a oé ar garioleenn, loskein a hré an héol, ha séhet braz o-doé. Vad a hrei dehé ur poz é tavarn mamm-berén Georges, én "Ti-Kaol". Chetu ind én davarn. Trouz erbed én ti...

### Tad-kozh

Démad, tud ag an ti-man ! Mes, ne des ket dén ? E-menn 'ma ar vestrez ?

### Mamm-berén (é toned)

Gorteit un tammig, éh oen én ti-chistr. Deüéh mad deoh Franséz. Gwerso n'em es ket ho kwélet. Penaoz éh a ar bed genoh ? Ur vin vad a hues, frèù oh ataü ? Azéet 'ta, pesord a zoéréiou genoh ?

### Tad-kozh

Mestrez an ti-ni a zo deit merhad d'o kwéled hiziü ha d'o-bér un tammig diskwizh genoh. Ni zo-ni bet é klask goulion de soudardi An Oriant ha séhed braz on-es ged an amzér ken toemm man. E gwirioné, ré a zo ré, kredet mé.

### Mamm-berén

Gwir erhoalh é laret : falloh-fall éh a an traoù, é kement mod a zo. Petra a hrehé vad deoh ? Laret dein péh ivaj a vennet aveid o tiabarzh. Boud a zo aman bochad a draoù mad de lipad

### Tad-kozh

Digaset dein un tasad chistr ag ar vro, an hani matan. D'em



lapous-kaill ha d'em hi, aveid o lod fest : ur skudellad lan-bar a zeur a vo mad. D'oh-hui, mestréz, ar péh a vennet. N'é ket kustum de ived ha de lezel ar ré-rall de selled.

### Mamm-berén

D'ein mé, ur huérennad kafé ; ar hafé a hra nerzh d'an dén hag a zigor é spered. N'hellan ket mé biuein heb kafé.

Eh an de drel unan arall genoh, Franséz ? Ur bannig hoah ?

### Tad-kozh

Trawlh, mestrez, trugaré. Diéz a vehé boud gwell, arlerh an tasad chistr man.

Ur misi (*bonheur, soulagement*) a gavan mé breman, ur souéh ! Chetu mé diboéniet, deit de blom, prest de voned araog. Gelled a hran kemér éndro me labour é lost ar harr. Mes chom a hran atañ bamet ged ar péh a zo arriù genein a-houde ar mitin man. Chetu mé é postal ar hent. Emberr é tapam ar prad réderezh ronsed ha ti me mamm-gozh. Nitra ne hell rein dein brasoh joé, n'em es ket dober a lared deoh.

Mamm-gozh ( diviz a hra dohti hé-unan én ur hortoz hé mab-bihan hag én ur selled, a gorn, doh an orloj )

Devéhad é, me sonj: pedèr eur ! Hâni ne za. Arriù é neoah an termén hag hâni ne za atañ. Tostad a hra ar hourz. Gwell é geté chom de gantréal. Penaoz lahein an amzér ? Beruein a hra me goéd é me horv. Kaer em es selled, ne wélan dén. Più a oér é-menn émant ? Skuizhein a hran é hortoz. E-menn 'ma me bugul ? Laret, Aotrou Doué. Krénein a hran aveiton. Dober braz em es anehon. A ! un drouz a ziabell ! Tostad a hra ( ha hi de redeg de doull an nor ). Ma vehé... Gwell é dein guéled éraog kredein. Mes un dra a lar dein ma ind é... Chetu ind é tishon benn ar fin : émant aman. Trugaré, men Doué !

Ne dé ket fall an traoù èl ma wellan a ziabell. Tosteit, hast buan, me mab bihan. E pé léh éh oh chomet ? Komzet. Groeit e hues un hent mad ? Bourruz 'ma bet an traoù épad ho tro-kaill ?

Mab-bihan : bokein a hra dehi, én ur balbouzein (*en bre-douillant*)

Hantér vad, hantér fall. Etré mad ha fall. Muioh a drouz éged droug. Kaset é ar labour de benn atañ. Peb unan en-des groeit é lod ha me gav genein em-es groeit me hani. Gwélet em-es petra é ur gér vraz...

Mamm-gozh : ged dejan (*raillerie*), a droh é ziviz

Tañet, tañet. Gwell é deoh cherrein ho pég. Ionkein ho soubenn, torrein ho naon ha moned de gousked. Brèuet é ho korv, ré hir 'ma bet an dé aveidoh. A ! éh én de ankoéhad : chonjal a hran em es labour de rein deoh. Chelaouet mad : piz bihan a vo de ziglosein é ti Dilory, étal iliz Ker-En-Treh. Plij a hra deoh ar véaj-sé ? N'oh ket é klask gobér un eihved asé ? Marsé en « diskant » n'é ket ken plijuz èl ma oé ar « han » ?

Mab-bihan (étré kriù ha kloar)

Me chomo ér gér. Ar wéh ketan a vo an hani devéhan...

Mamm-gozh ( Koutant braz é kleüed an doéré-sé )

Ne des droug ha ne denn de vad !

Mab-bihan

An dro balé-sé a chomo é me mimoér. Gwéled em es An Oriant ; ya, mes ohpenn, gwélet em es pegement 'ma diéz de me zad-kozh obér ar labour-sé.

Mamm-gozh (heb dihüen)

En ur veiteri heb jao nag arèr èl on hani-ni, ma tenn an traoù. O tad-kozh, kaer en des gobér, staget é, gozig a zevri, ag

ar mitin betag an noz, doh ar labour: ne hra nameid huézein. Chetu penaoz é ma é ved. Ha mé, berped un dra bennag d'obér àrdro ar loned. Arriù on skuizh mès ne dalv ket ar boén rekinal. Ar hloh a son : mall braz é dein rédeg, mall é dein dariù me soubenn...

...Hag elsé bamdé !

### **Eid klozein**

P(ear) / (oar) / (eùar) / (revé imur me aozour...) zeg vlé ha tri-ugent àrlerh an dro balé-sé...

Un dro balé arall em es groeit léh ma chomé me zud-kozh. Ar veiteri zo bet diskaret ged ar brezél. Chom e hra hoah ar puns...stanket! Ar prad réderezh ronsed zo goleit a diér, ar paludoù eùé. Ar prad foenn me zad-kozh, 'ma saüet «Kès an Amerzh» (Caisse d'Épargne) a gér (vraz breman) LANESTER. Ar vèred en des braseit. E tavarn ar vèred ne vé mui komzet gir erbed é brezhoneg Bro Gwénéd !

Déh oé déh, hiniù an dé 'zo un hiniù arall...Nen-des nameid an traoù marù ha ne chanjant ket !...

Georges POIDRAS

*Chetu achiù istoér tro balé ur paotr a 8 vlé, skriüet dehon a pe dé deit de boud un dén kozh. Mes épad é vuhé, goarnet en doé biù én é galon hag én é spered ar sonj ag an deùéh souéhuz-sé, ar sonj ag é vugalégezh, ar sonj ag é dud-kozh...*

*Koutant on boud kenniget d' « An Doéré » embannein an istoér gwirion-man. Un devér eidon a oé é kevèr an A. Poidras. Aséet em es gobér ar labour en doé goulennet genein, heb treisein ar spered a oé é ganni, a pen des skriüet é istoér.*

**Jobig Ar Guludeg**

## **STAJOU :**

### **Ur staj gwénédeg é Pont-Skorv :**

Tro ur suhun é vo dalhet ar staj-sé ag an 16 d'an ugent a viz gwenholon. « Stumdi » en-des hé hennennet.

Stajou a beb sort a zo ged « Stumdi » tré de zigémér tud aveid ur miz, tri miz, ur bléad-skol. Stummein (former) a hra ar ré a garehé diskein ar yézh hag ar ré a garehé hé gwellaad (skolae-rion, kazetennerion, sekré-

tourerion, konterion...)..... El evel skwér é vo saüet unan é miz gwenholon 2 007 hanüet « Stummadur ihuél ar brezhoneg ».

Titouroù (renseignements) de Stumdi Manér Keranden B.P. 311 29 413 Landerne Cedex

Pgz : 02 98 21 39 94

[bzh.stumdi@wanadoo.fr](mailto:bzh.stumdi@wanadoo.fr)

### **Skol an Emsav é Roazhon**

Eid deskein ar yézh, pé hé gwellaad, d'an implidi (employés) én entreprizioù é kinnig « Skol an Emsav » stajou berr pé hir, ged harp ar Stad pé/hag ar Rann-Vro.

Aveid gouied muioh : Skol an Emsav 25, straed Pierre Martin 35 000 Roazhon-Gar. Pgz : 02 99 38 75 83 E.Mail [anne.sac.bzh@wanadoo.fr](mailto:anne.sac.bzh@wanadoo.fr)

### **Un deùézh-studi ged Santéz Anna Gwénéd**

El beb blé é vo kempennet un deùézh-studi é Vinsin (Arradon) d'ar sul 21 a viz héré (Gouél-Mikél). De 10 eur é tigoro ar staj. Priz an deùézh, ged ar pred : 6 euro. Kas ar chekenn àr hanù Santéz Anna Gwénéd, de Claude Jégousse 60, Av. Général de Gaulle 56 890 Plescop. Tél : 02 97 44 53 46

## Y.P. KALLOH, ér brezél 1 917

1 917, de lared é 90 vlé-so...D'an 10 a viz ébrel (imbrill) é kouéhé Y.P. Kalloh édan an obusoù, éan hag en-doé skriüet :

« Me zo ar gédour braz én é saù àr ar hleu.  
Goud a hran petra on ha me oér petra hran ;  
Iné Kornog, hé douar, hé merhed hag é bleu,  
Oll kened ar bed é, an noz-man, a viran... »

D'ar 27, é skriüé Loeiz Herriéu, àr an talbenn, éan eüé :  
« Hiziü é tégouéh genein un doéré glaharuz : lahet é me heneil  
ha kenlabourér J.P. Kalloh, a Hroé, un tu bennag doh an ta-  
chad léh mah oem ar suhuniou treménét. Bet om bet tostig tra  
unan d'an arall heb gouied dem... »

Chetu al lihér devéhan en-des Y. P. kaset d'é vignon Yann  
an Diberdér :

Sul Vask 1 917 :

Ar suhun goahan em-es paset ér brezél, ar suhul santél-man é.  
Na ti na toenn, édan un amzér ken kri. E korv 60 eur em-es  
kousket un eur, ha hoah éh om bet dihunet d'ar yeindér, oll an  
armé goleit a erh. Skuih om d'ar marü. Pegourz é tavéo ar  
vuhé-man ?

Skriü a hran deoh a sol ur hoed, a gouéh ar melloù-dir abarh  
ken puill èl glaü.

Marsé éh-es duhont, pell, o ken pell, kêriou, ha tiér, hag  
oèledou... Aman ne ouiam ket, ne sonjam ket mui...

Trugaré Doué, nerh on-es atau d'en-em stléjal ha de hoarhed  
àr on truegeh.

Kénevo, Iwann, louz é ar brezél, chetu. An hani 'zo é penn on  
nivérenn, hag a renkehé komz eidom a pen dom skuih, en-des  
respontet déh éh oem fréu. Petra 'faot deoh, biskoah ne vé  
genem ! A galon, Yann.

## AN HANUOU TIEGEZH

An hanuou tiegezh é  
Breizh a seblant souézhuz  
d'an dud a véz vro. Dishaval  
int tré doh ar ré a gavér én  
« *Annuaire téléphonique* ».

Perag ? Rag men dint go-  
zig oll « morhanuou » (*sur-  
noms*) brezhoneg.

Sellam, mar karet, doh un  
ugentad anehé :

**Le Blévec :** blèu = *cheveux* –  
Bléveg : *chevelu*

**Barvec :** barü = *barbe* –  
barüeg : *barbu*

**Bouguennec :** bougenn =  
*joue*–Bouguenneg : *joufflu*

**Le Bronnec :** bronn, di-  
vronn = *les seins, mamelu*

**Le Bruchec :** bruch – *poi-  
trail*

**Le Calonnc :** kalon =  
*cœur* : *qui a du cœur, coura-  
geux*

**Le Danteg :** dant = *dent* :  
*bonne dentition*

**Le Garreg :** garr = *jambe*

**Le Goff :** *forgeron*

**Le Gouguec :** goug = *cou* :  
*long cou*

**Le Nivineg :** ivin = *ongle* :  
*onglé*

**Le Melinér :** *meunier*

**Le Mentec :** ment = *taille* :  
*qui est grand*

**Le Mouël :** moel = *chauve*  
**Le Pensec (Painsec) :** pens :  
*fesse, fessu*

**Le Queignec :** kein = *dos*  
*(qui a un grand dos)*

**Le Scouarnec :** skouarn =  
*oreille*

**Torec :** tor = *ventre* : Toreg  
= *ventru*

**Troadec :** troad, troed =  
*pied* : troadeg : *qui a de  
grands-pieds*.

An hanuou é galleg hag a gomans dré **Le** a verch :

- *ar vichér* : Le Méliner
- *ur morhanü* : Le Garreg
- *an téch* : Le Calonnc
- *ur plég-fall* : Le Korveg

**N.B. :** al lost-gir (*suffixe*) **eg** a greska (Toreg), **ig** é kontrél a  
vihanna ar gir (ar Pabig).

## SORBIENN

Hei, hei, me hazeg  
De Gabreg ha de velin Hedeneg  
Er velin plouz, ér velin wenn  
'oé toul ar bank doh an daoù benn  
de velin Brétignou, Kéradeg ha Lokmalou  
De Berken ar Gémené  
A Garnasen de Bloué  
Kemér an hent de Gélan  
A Gélan de Lovedan  
De Lovedan a Gistinid  
Tré Sant Matelin éh em kuit.

*P.M. Jéhannoù (kleüet ged paourerion é klask lojeris aveid an noz, pe oen kroédur).*

## LAREDOÙ

Ur goall-gomz a ya a veg de veg hag a greska é kerzhed.  
Ar vedisinerion a vehé klañv, a pe vehé yah oll an dud.  
Boud a zo tud hag a fond rah o dañvé é seüel tiér hag é obér  
chervad. Seüel a hrant tiér èl pe vehé deliet dehé biüein de  
virüikén ha débrein a hrant èl pe vehé ar wézh devézhan a  
vehé.  
E kañein é ta al labour de voud êsoh d'obér.  
Ez é, pe vér yah, rein avizoù mad d'ar ré klañv.  
Un dra a za de voud êsoh de gredein pe vé laret penaoz éma  
bet groeit.  
Perag-ta éma du ho pléü ha gwenn ho parü ?

## GOURÉNOÙ LOKRIST

*(ér Pichon a Lovedan)*

Barh ar blé triwéh kant ha seih ha pear-ugent  
Troeit ur sonj é me fenn de seüel ur soñenn

Troeit ur sonj é me fenn de gompozein ur son  
Saüet 'zi-är paotred gourénerion breton

Saüet 'zi-är paotred gourénerion breton  
Péré ya de hourén de Lokrist én Hen-Bont

Hag é Lokrist Hen-Bont a pe oent arriüet  
An aotrou Charles Barreaux dohtu o-doé gwélet

Démad deoh, Charles Barreaux, démad deoh é laran  
Diskoeit dem ho kajou breman, ma o gwélan !

-« O ya, m'em-es gajou, o ya, pasein kant liour,  
Ar hetan anehé 'zo ur prim a inour.

Deit hwi genein, paotred, deit genein d'ar hlazenn,  
Hwi 'gomanso gourén, mar karet, mem abenn ! »

Ar hetan krog 'oé bet oé Jean-Mari Pichon :  
Ur martelod youank en-doé kollet getoñ.

An eil krog a oé bet, oé Boulbar a Gelüen,  
Ha Jean-Mari Pichon 'yas d'é huein\* är 'r hlazenn !

-« Ne hues ket sonj, Pichon, a baüé Kemperlé,  
Em-boé torret ho préh ha diaozet ho skoé ?

Em-boé torret ho préh, Pichon, ha diaozet ho skoé  
Dwallet mad, Pichon, ma n' dorrann ho kosté ! »


Dastumet ged Gwenhaël Herriou, é Lanngedig ér blé 1 904.

N.B. Charles Barreaux, rénouer ar Govéliou, d'ar prantad-sé, ha  
tennour Kirsch.

## GIRIOU-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

- 1-Dégouézhioù.-
- 2-Dam dehi! Mantal présiuz.
- 3-(a) laka Marseille de vèrùein.- Aved krapein d'ar sulér.
- 4-Podadoù bebeilpennet
- 5-Deur skuillet.- Bro an Afrika.
- 6-Hañuet eùe bobelan.-
- 7- (a) hré nig a-drechil.- Na mé nag éan.
- 8-Ar gir ketan é 7 heb e.
- Ivein digempenn.-
- 9-Son ar hloh bihan.



### A-dreuz

- 1.- Diù wézh ugent.- 2- Breur an Argoed.- Gin mesket. 3- Lugernuz én Ejipt.- Deliaùenn mar karet.- 4- Dolpadenn.- 5.- Benùeg ér park.- Aneu én ur grapein. 6- E kêr Rom émant. 7- Diù rank pemp pan .- Penn ar velin.- 8- Roué dibennet .- Yézh an iliz katolik.- 9- El-sé éh oé éh obér Roué Stevan.

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed** : 1- DARVOUDOÛ.- 2- ARAOG.-EUR.- 3- OM.-DERGEL.- 4.- UODADOP.- 5- URED.- MALI.- 6- LEUENAN.- 7- ENEGEN.- TE.- 8.- NGN.- NEVIL.- 9- TINSADENN.

**A-dreuz** : 1- DAOU/UGENT.- 2.- ARMOR.- NGL.- 3.- RA.- DELENN.- 4.- VODADÉG.- 5.- OGED.- UENA.- 6.- ROMENED.- 7.- DEG/PAN.- VE.- 8.- OUE.- LATIN.- 9.- URISINEIN.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
dégemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, boulhadurezh...



### KOPIADENNOU EN HO UNAN

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhoù  
Entreprizioù  
Ne vern plù...

### ENEZ GROE - Kambroù-ostiz (chambres d'hôtes)

*Digor a-hed ar blez*



3, Ar Leurc'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévræoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemér evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue,  
écrire à :

**Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARBORE**

N° CCP de l'Association : **NANTES 4 287 62 E** (chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigezh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herrièu - Jobig Le Galudog

Alfons Samson - P M Jéhanno



**Ar Gasilieg**



**L  
A  
G  
A  
C  
I  
L  
L  
Y**

**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = **16 €**

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépot légal 2<sup>ème</sup> trimestre 2007

**INTERNET** : <http://perso.libertysurf.fr/andoere> **E-MAIL** : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)

N° 102

an

DOETRE

Priz:4€

## DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED



BREIZH - TOUCH E PARIZ  
(cf p.7)



SKOL-UEHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)

Pays de Galles

1 au 10 août  
2008

Emerald Isle Festival

Festival  
INTER-CELTIQUE  
Lorient



KAMPING AR VEITERI VRAZ  
E KARNAG  
ho tigemer

Digoret a viz Ebrel de greiz miz Gwenholon  
Brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg komzet  
Pgz : 02 97 52 24 01 - Fax : 02 97 52 83 58.

## ROLL AR PENNADOU

KENT-SKRID ( <i>LÉH AR BREZHONEG</i> )	P. 4
DISTRO-SKOL 2 007	P. 5 - 6
DEGOUEZHIOU ( <i>BREIZH-TOUCH E PARIZ</i> )	P. 7
( <i>TUD A LÉZENN É ROAZHON</i> )	P. 8
DARVOUDOU DRE-MAN	P. 9
AMZER ME YOUANKIZ	P. 10 - 19
OR RE DREMENET	P. 20
LAREDOU / HOARHAM UN TAMMIG	P. 21
FABLENN ( <i>AR GRILLAN HAG AR VELIONENN</i> )	p. 22
CHELAOU KOMZ	p. 23
SONENN ( <i>AR FOEUOUR</i> )	P. 24
( <i>BETAG AR FETAN SKLER</i> )	P. 25
GIRIOU - KROEZ	P. 26



Spli'hennig « Ofis ar Brezhoneg »

Kirieg é peb skrivagner a veid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéret



## Léh ar brezhoneg : traoù iskiz (souézhuz)

« Ofis ar Brezhoneg » a laka béh de rein d'ar brezhoneg é léh étal ar galleg, hag én Oriant, èl ma ouiér, en-des an Ti-kêr reskondet d'an Ofis. Sinet mem en-des ar Garta (*Charte*) eid ma vehé bet lakeit ar skritelloù ha panneloù é brezhoneg dré gêr, hag én tiér publik.

Anzaùam éma bet kaset de benn al labour promètet é-pad ar mizioù ketan. Neoazh breman ! Kaer ho-po selled, ne welleet ket brezhoneg er-bed merchet, nag én ospital neùé flamm ar Skorv, nag é « Penn-kêr ar Gouél Tabarly ». Perag-ta ? Iskiz ! Marsé é vo groeit devéhatoh !

An aotrou Eskob Gourvès, kent moned d'é retred, en-doé kaset ul lihér d'an oll parréziou ag é eskopti. Al lihér-sé a houlenné ma vehé bet diwennet ar sevénadur ha dégeméret ar brezhoneg

én ilizioù. Ne wellam du-zé chanjemant erbed.

Rénerion an Deskadurezh en-doé laret d'o zu : « E peb léh ma vo goulennet é tigo-reem ar skolioù diüyézheg. » D'ar bajenn 11 é wéleet penaoz éma lakeit ar starderéz aveid parrad a voned araog.

Dré voneur, éma ar Vretoned pennoù kalet. Ur merch splann : ar « Breizh Touch » é Pariz ! Nag a hardéhted ! Moned lerh-o-lerh àr ar Parkoù-Elisée, banniél Breizh displéget d'ar péar aùél, eid brudein d'ar bed abézh é chomeem Bretoned !

En nivérenn-man é kaveèt « Amzér me Youankiz » ged Loeiz Ar Mouél. Skriüet é flour, êz de lénn ha de gompren. Ni zo sur é vo lénnet ged plijadur, èl ma vo ged ar pennadoù arall.

Kénavo ar wézh ketan.

An Doéré.




Plijeet genoh reneüein ho komanant é kourz ha kas ho chekenn de : An Doéré 8, straed Jules Le Guen 56 260 An Arvor

## DISTRO-SKOL 2 007

Ar blé-man éma bet dégeméret **11 750** a vugalé ér skolioù diüyézeg lodennet é 167 tachad, revé ar chifroù :

2 991 ged Diwan (+ 1,63%, 48 ohpenn),  
4 136 ged Dihun (+ 6,52%, 142 ohpenn),  
4 623 ged Diüyézh (+ 8,42%, 359 ohpenn).

Ar skeudenn a zisko ar greskans a-houdé 20 vlé, de lared é 1 977, ar blé ma oé digoret ar skol ketan Diwan.



Heb an diézemantou é kav Diwan, Dihun ha Diüyézh aveid digor skolioù neùé, pé mem klasoù arall, é vehé an nivér ag ar vugalé skoleit é brezhoneg paod-mad ihuéloh.

Laret en-doé ar Rann-Vro hé vennanté de dihein (*atteindre*) ar chifr a 20 000 a vugalé ér skolioù diüyézh

éraog ar blé 2 010. Red a vehé rein un taol startijenn (*accélérateur*) drest-ordinér. Ha neoazh ne vank ket goulennou ; bugalé awalh a zo a garehé boud dégeméret. Alas ! Ne vé ket reit an aotréioù revé an dobériou. Elsé é vo, tré ma ne vo ket muioh a helloud étre daouorn ar Rann-Vro.

Chetu a du-rall penaoz éma rannet ar vugalé étre ar klasoù, ag ar skolioù-mamm betag al lisé :

Repartition des élèves bilingues par systèmes et niveaux pour la Bretagne à la rentrée 2007

	Diwan	Public	Catholique	Total	Repart. %	En 2006	Evolution globale
Maternelle	979	2 215	1 778	4 972	42,31%	4 733	239 5,05%
Primaire	1 153	1 965	1 945	5 053	43,00%	4 733	320 6,76%
<b>Total 1er degré</b>	<b>2 132</b>	<b>4 179</b>	<b>3 723</b>	<b>10 025</b>	<b>85,32%</b>	<b>9 466</b>	<b>559 5,91%</b>
Collège	668	360	304	1 492	11,90%	1 323	179 5,97%
Lycée	201	103	19	323	2,75%	301	22 7,31%
<b>Total 2° degré</b>	<b>869</b>	<b>463</b>	<b>413</b>	<b>1 725</b>	<b>14,68%</b>	<b>1 624</b>	<b>101 6,22%</b>
<b>Total global</b>	<b>2 991</b>	<b>4 623</b>	<b>4 136</b>	<b>11 750</b>	<b>100,00%</b>	<b>11 090</b>	<b>660 5,95%</b>
Repartition %	25,46%	39,34%	35,20%	100,00%			
Total 1er degré 2006	2 125	3 809	3 533	9 466			
Evolution 1er degré	7	361	191	559			
	0,33%	9,48%	5,41%	5,91%			
Total 2° degré 2006	818	456	361	1 624			
Evolution 2° degré	41	2	52	101			
	5,01%	0,44%	14,41%	6,22%			
Total global 2006	2 943	4 264	3 894	11 090			
Evolution globale	48	359	253	660			
	1,63%	8,42%	6,52%	5,95%			
Total global 2005	2 895	3 881	3 659	10 405			

El ma wélér éma al lod brasan ag ar studierion ér hlasoù ketañ, skolioù-mamm ha dérez ketañ. Mad é aveid skolajoù ha liséoù eid ar bléioù de zoned.

El ma larem ihueloh éma an dalh étre daouorn tud é karg melestrerezh ha deska-durezh ar vro. Or yézh a zo é danjér braz. Ne faot ket plé-gein.



Diwan a zo én diovéer a argant : groam ur prov dehé. 10, 50 euro... Ur papér-dis-karg (*reçu*) a zo kaset abenn eid ma hell ar broverion digontein 66 % a-ziar an tao-

soù deliet. Elsé, abenn ar fin, ne gousto un donézon a 50 euro nameid 17 euro.

Kas ar chekenn de : **Diwan**  
Z.A. Sant-Ernel B.P. 14  
29 411 Landerne Cedex

## DEGOUEZHIOU DRE AR VRO

### Breizh-Touch é Pariz :

Lénnet ho-pes ha gwélet àr an télé ar morad Bretoned é ti-chenn ar « Parkoù Elisée » é Pariz.



Emesk ar sellerion Bertrand Delanoë ha Jean-Yves Le Drian ; én o heim é wélér eüé : Jo Kergueris, Claudie Le Breton, ...



N'ankouézho ket an oll sellerion ar valéadenn vraz-sé dré ar « Parkoù Elisée »

## Tolp tud a lézenn é Roazhon d'an 29/9 :



E kerzhed dre gêr

Heb goulenn nitra ged ar Vretoned é vennehé grons Gouarnamant Pariz distag al Loér-Atlantel a-zoh Léz-Varn Meur Roazhon aveid kani Angers. Elsé é vehé torret al liamm devézhhan a zo hoazh étre Bro an Naoned ha Breizh.

Deusto d'ar vennanté ar Vretoned – éma an tri hard anché aveid adunancin Bro-

Breizh – ar gelloud politig a zo chomet mud. Chetu perag en-des ar vichérierion a justis, árdro 500 anehé, um dolpet é Roazhon ha goulennet ma vo élkent dalhet kont ag o vennanté-ind.

Ha chelaoüet e veint ? Di-êz é goud, nameid ma tei kreñvoh hoazh vennanté ar Vretoned.



Arriü a hrant d'ur prejen

## DARVOUDOU DRE-MAN :

### *D'an 3/11 Un enderü ged Santéz Anna Gwénéed :*

- De 2 eur-1/4 d'enderü, en em gavo hé izili é iliz Kalan. Marie-France Bonniec a zisplégo an diskouézhadeg « Les Sablières des Chapelles en Morbihan ».
- Diü eur arlerh é vo kenniget ur pennad studi, é Ti-Parréz Ploué, diár ar homzou hag ar hañennoü impléet épad an overennoü.
- De 6 eur de noz, é lido an Tad Yann An Dorze un overenn é iliz Kalan.
- De 7 eur 1/2 : Filaj vo é « Ti 3 Kastell » é Ploué ged tud « Spered Bro Ploué » ha ré « Santéz Anna Gwénéed ».

### *D'an 11 a viz kalan-gouiañv é iliz Sant Geltaz :*

De 2 eur 1/2 d'enderü : abadenn (*séance*) ged rummadoü kañerion aveid derhel sonj ag or ré marü épad ar brezél 1 914 / 1 918. Nen des ket gwerso é vezé dalhet sonj anehé é Santéz Anna, beb blé, d'an unneg a viz kalan-gouiañv. Ankouézh et int bet goudé un nebeud bléioü. Chetu perag en-des « Santéz Anna Gwénéed » goulennet

an aotré (*autorisation*) de gempenn én o inour un enderüiad a gañennoü é iliz-veur Santéz Anna. Hama ! N'hé-des ket bet an aotré d'en obér, ar blé-man atau.

E iliz Sant-Geltaz an Alré é vo tu de lidein ar Gouél.

Lénnerion « An Doéré » a zo kouviet de zoned ged o familh hag amied.....

### *Overenn-noz an Nédeleg :*

Ar blé-man é vo hoazh merhad unan é Iliz Sant-Jojeb ar Plessis é Lann-ar-Stér. Spiseit a vo ér gazetennoü d'ar hourz.

### *Pred-noz é Kaodan : (d'an 31/12 devézhhan dé ag ar blé.)*

Ged « Tarzh An Deiz » èl beb blé, de 9 eur 1/2 de noz.

## Kent-skrid « Istoér an Armorig » :

*Labourad a hran, a-houdé 3 miz, àr donedigezh ar Romened d'an Armorig é gré Julius Kaezar, mez al labour nen dé ket hoazh é stad de voud embannet.*

*En atretan é kennigan, de lénnerion An Doéré, ur studiadenn berr a-zivoud amzér me youankiz (1 925 – 1 940).*



## AMZER ME YOUANKIZ (1 925 – 1 940)

Gañet on é déiòu ketan miz Méhüenn 1 925, seih vlé enta goudé ar Brezel-Braz.

Me zad, gañet é Pleskob ér blé 1 876, a oé ul labourérouar hag a viué àr un dachenn étre-an-naoù é parréz Plaorén, doh tor motenn Meukon. Deit a oé de chom azé ged é dud, labourizion-douar él-don, goudé boud labouret é parréziòu Pleskob

ha Gregam, é kosté chapél ar Burgoù.

Pe oé bihan é tégasé é saoud de bérad azé, étal ar chapél, de gourz an neüé-hañv, éraog moned d'ar skol. Epad ma oé al loned é vouitad, moned a hré éan de azé ér chapél, ha de lared é bedennoù...Hag un dé endoé gwélet abarzh diù verhig gwisket é gwenn deit de

chupad ar chapél ha de gempenn al liénaj àr an aotér. Mez ne hrent ket trouz erbed, ha ne larent ket ur gir étrézé. Me zad nen des bis-koazh gouiet più a oé an diù verhig-sé, na de betra é oent deit azé. Laret a oé bet dehon goarn an traou-sé aveiton é unan, rag marsé o doé-éan rézet...Chomet a oé enta an afèr-sé é sôl é galon, betag dé kent é varù, ér blé 1958. « Tuchant é ouiein più a oé an diù verhig-hont... » a laras-éan neuzé d'ar ré a oé tolpet én dro dehon.

Tud me mamm a oé labourizion-douar, ind eüé, deit a gornadoù Gregam ha Lokmaria. Gañet a oé ér blé 1 885, ha kaset a oé bet d'ur skol léanézi én hé youankiz. Chom a hras ged ar seurézéd épad un 18 vlé bennag. Kaset a oé bet de servij é broiòu estrén én arbenn ag ar brezél braz, ha desket hidoé él-sé gobér àrdro ar ré klañv hag ar ré maheignet. Koéh a hras klañv neuzé, hi eüé, ha saü a hras ur pikol béh étrézi ha Mestréz-Veur ar seurézéd. Ker chifet hag ankinet a oé me mamm ma vennas grons kuitad an dud-

sé, ré gri ha digalon én hé hevér. Diliammet a oé bet azohtë, ér blé 1 922, ha distroein a hras de di hé zud. Neuzé é anaüas me zad, deit de voud intañv ged péar a vugalé. Eredet a oent é berr amzér, ha tri a vugalé arall o-des bet étre 1923 ha 1 927 : diù verh hag ur paotr. Me oé an eil anehé. Deit de voud él-sé peizantéz me mamm a oé forh istimet én hé hornad rag ma ouie mad penaoz rantein servij d'ar moézi dougerézed. Merüel a hras é miz meurzh 1 947, d'an oed a 62 vlé heb kin.

Rah an dud a saüé abred mad de vitin, étre 5 ér ha 5 ér hantér, hañv ha gouiañv. Ha ne choment ket de boéz a vitin de noz, m'el lar deoh. Kentéh saüet, ha golhet é fri, me zad a grapé d'ar sulér a-veid dégas foenn d'ar ronsed ha d'al loned korn, épad ma oé me mamm ha me hoérézed kohan é hoérein ar saoud hag é kempenn bouid ar moh é ranjodoù ponnér. Di-yunein a hrent arlerh, oll àr un dro, ged ur bolad kafé ha léah, hag un tamm bara lardet ged amonenn.

Arlerh ar hafé é krogé peb unan én é labour, revé kourzoù ar blé. Me zad a yé d'ar park, ged ur jaù staget doh ar brabant, ha moned a hré de arad an douar, kent hadein an ed. Mar-a-wézh é labouré eùé ged un arér aveid stummein an erù de reseù an had avaloù-douar, hag ar plantennoù arall la-keit én douar aveid magein al loned. De gourz an hañv éh é de drohein ar foenn ged ar falheréz mékanig, paod-mad spleitusoh (*plus avantageux*) eid ar felhiér hag ar falsiér impléet a-gent. E kalon an hañv, pe zé kourz ar méde-rezh, éh oé hoazh lakeit ar falheréz de labourad éndro, ha rah an dud én oed a zé neuzé de cherrein ar feskad, ha d'o herlein ged un dornad plouz gwéet (*tordu*). Al labour kaletan, én amzér-hont, a oé, me gred, skarhein ar hraoù, ur wézh pé diù épad ar blé. Red a oé boud valiant ha nerzhuz aveid ten-nein an teil ged ar hrog, hag aveid er has àr ur gravah betag an deileg. Arlerh éh oé dégaset lann fresk ér hraoù abézh, hag éh oé lakeit un troh

plouz aveid rein konfort d'al loned.

Epad an amzér-sé, me mamm ha me hoérézed kozhan a oé dalhet ged labourioù an ti. Goudé goéret ar saoud, éh oé red tennein koeüenn al léah, ha ribotad ar goeüenn aveid gobér an amonenn. Pe oé rekiz, éh ent eùé de rein an dorn d'ar ré a labouré ér prad aveid séhein ar foenn hag en dégas d'ar sulér. Deli a hrent hoazh moned d'ar park, aveid sekour de gourz ar méde-rezh, hag aveid tennein an avaloù-douar, pé trohein ar boud-loned estet àr an da-chenn. Ind é eùé a gempenné ar mérenn ha koén aveid an oll, hag a zisterné peb tra goudé ar predoù.

Ar goahan deùézh-labour aveid me mamm a oé dé ar bugad. Red a oé neuzé tolpein rah ar pézh a oé de holhein a-houdé 2 pé 3 miz, ha kas ar samm-sé én ur garrikell betag poul ar fetan, pell mad azoh an ti. Ohpenn an dillad hag al liénaj, éh oé kaset eùé betag ar poul diù pé tèr bréhad koed séh aveid berüein an tammoù lousan én ur pikol kaotériad deur.

Ar holheréz um daolé àr hé daoulin adal d'ar poul, hag a labouré azé tro ar mitin, aveid golhein peb tamm liénaj én deur yein, hag é skarhein, a daloù bah-dillad (*battoir*) al lousteri a chomé staget dohté. Lod ag al liénaj a oé èl-sé lakeit de verüein én deur-skaod ged skolpad suan ha leziù, ha goudé, rinsé é deur ar poul. Arlerh ar holherézh éh oé kaset éndro rah an traoù tréma an ti, én héveleb karrikell, mez ar samm a oé deit de oud ker ponnér èl plomm breman, ged pouiz an deur chomet él liénaj. Neuzé éh oé lakeit an traoù de séhein étal an ti, àr barroù spernegi pé àr ar brattell, pé hoazh àr neudennoù houarn staget doh ar gwé ihué. Gobér ar bugad a oé, me gred, an dañé labour poéniusan aveid ar merhed.

Hañi ne chomé enta heb é samm labour tro an dé. Ar vugalé a oé lakeit, ind eùé, de rein an dorn, én ti hag ér méz, revé oed peb unan, drest-oll épad an hañv. Kas a hrent al loned d'ar prad, pé d'al lann, hag o dégas a hrent éndro d'ar hraoù, ged sekour ar chas...Ne oé na-

meid un dé de zichuézh épad an oll suhun : ar sul...ha hoazh, goudé boud maget al loned korn hag ar moh, moned a hrent rah neuzé d'an overenn-vitin, de 6 ér hantér, pé d'an overennbred, de 10 ér, peb unan d'é dro. Moned a hrent àr droed, a dra sur, ha lakad a hrent o botoù-lér, an dé-sé, é léh o botoù-koed pamdieg. Hir a oé an hent betag ar vorh, tost de péar kilométrad, ha soursi braz o-doé ag o botoù-lér, ker skoselleg ha fangeg a oé an hentoù, én amzér-hont.

Red a oé liéz mad lemel ar fang azohté ged un dornad plouz, pe arriüent é kosté an iliz. Ar ré hag a oé bet d'an overenn-bred a zégasé geté tammigou bara benniget, aveid ar ré hag a oé bet dalhet ér gér, ne vern perag.

Kalet a oé enta ar vuhé pamdieg én amzér-hont, èl ma wélér, ha ne oé ket kalz a zeverransoù épad ar blé. Pe oé bet cherret ar bléad, éh oé kempennet neoazh un tammig pred aveid rein kalon d'an dud, ged chistr a-leih àr an daol, ha mar-a-wézh mem ur wérennad gwinn. Groeit a oé bourrabl eùé, pe

oé achiù an dornerezh, é devezhan ti ar baré, ha soñet a oé gwéhavé : ar ré youang um laké liéz mad de goroll, deusto ma oent hernet ged al labour...Ar gwellan deverransoù a oé d'ar gouiañv, pe zé an amizion ged o lanternoù-pétrol d'um dolpein é ti ul labourer ag ar hornad, aveid gobér « filaj » én dro d'ur goahad-tan. Ne oé ket mui « filet » ar gloan, èl gwézh-arall, mez doned a hrér aveid diviz ha dejanal, pé aveid hoari kartoù édan sklérder ul lamp-pétrol skourret doh an treust. Ar moézed a zivizé eùé étrézé, heb arsaù a vrochennad. Eved a oé chistr ha gwin ged ar baotred, kafé ged ar moézed, ha débret a oé kistén ha kenoù, pé hoazh avaloù poazhet é korn an tan...Ar vugalé a chomé bammet, é chelaoù ar sorbiennoù dibabet aveité dré ar « barh-labourer » ag ar hornad. Sorbiennoù tennet ag an amzér treménet, ha reneüéet a vlé de vlé ged peb larér, revé hoantou ar che-laouèrion. Komzet a oé, eùé, liéz mad, a brofèsiou ar Roué Stevan, ur barzh génedig a vMeu-

kon, hag en-doé biüet éraog an Dispéah-Braz.

E ti me zud éh oé komzet brezhoneg heb kin. Ne gomzé me zad é galleg, nameid d'ar ronsed...ne ouian ket perag. En arbenn marsé, ma en-doé labouret épad ar brezél-braz ged ronsed gall ar an talbenn duhont, ha ma ne gomprenent ket ar brezhoneg ? Ataù é komzé hoazh galleg dehé, 20 vlé goudé ar brezél ! En iliz eùé éh oé distaget an oll predegou é brezhoneg, betag donedigezh ar brezél 1 939-1 945. An dud ér vorh a gomzé neoazh galleg muioh-mui, hag o bugalé eùé, mez ar hatechim a chomé é brezhoneg aveid an oll, nameid aveid ar ré - un dornadig - deit ag ar skol publig.

Yézh ar véléan étrézé a oé ar galleg, deusto ma oé ul lod braz anehé brezhonegerion a-vihan, rag o skolaj é kloérdi Gwénéed a oé bet distaget é galleg hag é latin heb kin. Poén o-doé enta ged o fredégou brezhoneg, nameid ar ré hag en-doé vennet deskein skriü yézh o mamm, a-kosté d'ar galleg. E mesk ar

ré-man é telian hanüein an Aotrou Rouaud, génedig a Gregam ha gouieg (*expert, savant*) heb par ar brezhoneg Gwénéed. Trugaré dehon, a greiz kalon.

Er skol publig - ar « skol ru » - ne oé komzet nameid galleg, ha diwennet a oé grons d'ar vugalé distagein gir brezhoneg erbed, nag én ti-skol nag ér lérenn-hoari (*cour de récréation*). Ar « sim-bol », é stumm ur vot-koed, a oé lakeit ar goug an hanni kablu, hag er goarn a hré èl-sé betag ma vehé bet kavet un arall aveid en di-boéniein...

Ur skol kristén a oé bet saüet ér barréz ér blé 1 930, ha cherret en-doé, abennkaer, al lodenn vrasan ag ar vugalé, nameid un dornadig hag a venné o zud o gouarn édan ar Stad. Er skol neüé, hanüet Skol Sant-Bili, an oll kélenadurioù a oé distaget eùé é galleg penn-der-benn, deus-to ma oé an oll bugalé brezhonegerion ér gér. Ken dilézet a oé enta ar brezhoneg, èl ma oé ér skol ru, ha ne hellé ar vugalé implé yézh o mamm nameid épad an ériou-dichuéz él lérenn-

hoari, hag a pe zistroent d'ar gér.

El-sé é kerzhé an traou é skolioù ar baotred. Ar merhed, ind, a oé skoleit én un ti skol arall, én ur houvand rénet ged ar seurézed. Ul lodenn anehé a chomé noz ha dé ér houvand, ag al lun vitin betag ar sadorn, én arbenn ma oé ti o zud ré bell azoh ar vorh. Ar ré-rall a oé skoleit ar un dro geté, ha débren a hrent geté de greisté, oll ar un dro, mez kerzhed a hrent d'ar gér arlerh dibenn an ériou skol. Ar gelennadur a oé kenniget é galleg heb kin, èl é skolioù ar baotred, mez ar merhed a gomzé neoazh brezhoneg marawézh, pe oent pell azoh ar seurézed, hag a p'um gavent étrézé o-unan, ar an hent d'ar gér.

El-sé éh oé enta an traou é skolioù ar barréz étré 1 920 ha 1 940, épad an 20 vlé a béah étré devé ar brezél-braz 1 914, ha mizioù ketan ar brezél 1 939.

Lakeit a oen-mé bet ér skol kristén ér blé 1 932, d'an oed a seih vlé. Ar mestrskol ketan a oé bet an Ao-

trou Lamour, bet mestr-skol publik ar bléioù kent, un dén abil braz ha dédennet eùé de obéroù an arz. Studiet endoé, ha labouret, én ur muzéom aveid kempenn kopia-dennoù a liùajoù brudet an 17vet hag an 18vet kant-vléad. Reit endoé é daolennoù d'ar barréz aveid kreskein braüanté an iliz.

Frammet a oent bet goudé ged plankennoù koed verniset, ha lakeit, 2 anehé é blein an iliz, adrest an aotér braz, hag an 2 arall àr lein an aotérioù bihan, é kazal an iliz.

Ar person hag a réné ar barréz én amzér-hont, an Aotrou Pier Ar Bihan, endoé kempennet eùé àr ar vangoér én dro d'an aotér, ul lambrusk (*lambris*) koed koéret, hag àr lein al lambrusk, ul linenn meinigoù liüet hag a laré « E sakrifis an overenn, Jézuz hor Salvér a ziskenn ».

En amzér-hont, ér blé 1 935, éh oé bet ur voterezh ér barréz, hag éh oé diù listenn kenniget d'an dud, listenn ar ré dija é karg, hag ul listenn neüé, sanset ul « listenn ru ». Kement-sé ne oé ket souéz-

huz erbed, mez kaset zo bet eùé, d'an oll voterion ag ar barréz, ul lizhér mollet é brezhoneg, hag a hré goap a dud an eil listenn, èl ma véhént bet tud dizesk hag ivi-uz ? « An tri kensort é tavarn ar Marh Gwenn ». Ne vo ket biskoazh gouiet più a oé bet skrivagnér al lizhéhont, mez chomet é biù mad betag breman ar sonj anehi, èl ar sonj ag un dra kentoh méhuz... rag ma oé tud an eil listenn ken inourabl èl ré an arall.

Un nebedig goudé, ér blé 1 936, éh oé bet kempennet ur voterezh braz aveid dibabein kannaded ar vro é Parlemant Pariz. Deit a oé ar maout ged tud ar « **Front Populaire** », èl ma ouiér, hag ar spe-redoù ér barréz a oé deit de voud ken intañet èl ma oent é Pariz. Ne oé ket, a dra sur, é bro Gwénéed, kement a dol-padoù ru èl é Pariz, hag é kériou vraz ar retér hag ar hreisté, mez ar vichérierion hag ar hounidizion a ziwenné grons ar mennozhioù neüé, hag a houlenné goprou ihué-loh ged o mistr, ar beizanted. Alas ! ar ré-man ne hel-lé ket rein dehé ar pézh a

houlennet, rag ma endoé ar prizioù ar bléad diskennet izél, ged an digresk spontuz deit àr an oll marhadou, ér bed abézh. Boud a oé enta kalz a glemmoù hag a demalasionnoù é peb tu, betag seüel foèterezh kalet étre an dud, pennfollet èl ma oent ged o dobériou hag o stad a ziovér. Klaoù a hrér mem, taol ha taol, pozioù an « Internationale » sonet a-bouiz-penn é tavarnioù ar vorh.

Arrestet a oé bet al labour é peb léh, ha chom a hré ar vro èl morgousket é hortoz disklériadurioù ar Gouarnemant. Red a oé bet de bennoù braz Pariz plégein de houlennoù an obérierion, ha rein dehé ar suhun a 40 ér, hag an droed de gemér, peb blé é kreiz an hañv, 2 pé 3 suhun de zichuézh, heb koll nitra én o goprou. Neuzé éh oé bet kroget éndro ged al labour én uzinioù, hag éh oé deit ar péah é spredoù an dud.

Doned a hran éndro breman d'ar vuhé ér skol, ér bléioù 1 932 ha goudé. D'an oed a seih vlé, ne oen ket mé na braz na bihan, mez un a-

vrelaod (*garçonnet*) kentoh munut, ged diuar berr. Re-kiz mad a oé dein ur-sort moned àr droed, a di me zud betag an ti-skol, ér vorh, ha doned én-dro d'ar gér, arlerh an ériou skol. Boud a oé èl-sé tost de 4 kilométrad de gerhed diù wézh bamdé, tro ar blé, yein pé tuemm an amzér, ha mem a pe goéhé glaù, hag a pe oé an douar goleit ged an erh.

Ha kerhed a oé red ged botou koed tachtet é trouzal à mein an hentoù. Ar botou koed a oé, liéz mad, kriüet ged flaskou tachtet arnehé aveid parrad dehé a faou-tein...mez ar flaskou a laké mar-a-wézh ar goed de rédeg àr an ibilioù-troed, a pé zé dehé dihentein ged ur maen bennag, ha stokein unan doh an arall.

Poéniuz a oé enta, drest-oll d'ar gouiañv, moned bamdé d'ar skol, mez plijadur or-boé neoazh àr an hent, rag ma kerhem é bandennoù kamaraded disoursi, ha ma hoariem a-hed an hent érag arriü ér gér.

N'or-boé hirezh erbed de arriü én ti, rag kentéh arriü-et, éh oem lakeit de grogein

é labourioù an tiegezh, èl trohein koed-tan aveid ar goén, pé de vouitad al loned korn hag ar moh, pé hoazh de dennein seilladoù deur ag ar puns aveid dobérioù ar gegin.

D'an hañv èh oem kaset de foennad (é kourz ar foenn), de sekour ged ar véderion (épad ar véderezh), ha de cherr avaloù-douar hag avaloù (de gourz an avaloù-douar hag an avaloù).

Ohpenn hoazh, laret a oé dem, liéz mad, kas al loned d'ar prad pé d'al lann, ha rekiz a oé dem, mar-a-wézh, tremén an deùézh abézh geté, d'ar yaoù ha de gourz ar vakansoù...Hoari a hrem neuzé ged peb sort hoariell, ha klask a hrem néhiou...

Ged ar blé l 937 èh oé a-chiù me skolaj ér barréz, rag gounidet em-boé ar «sertifikat». Mez ne ouien ket ré petra gobér goudé : chom de labourad ér gér ? - Mez ne oé ket labour awalh àr an dachenn aveid derhel an oll bugalé ér gér ! Moned d'ar skol é kér ? - Ré gir a oé ar skolaj é kér aveid yalhad me zud ! Moned de labourad àr ur vichér bennag ? - N'em-

boé ket hoant a vichér erbed, nag an abilted rekiz.

Neuzé en-doé an Aotrou Kuré goulennet ged me zud mar gousantent d'em has de gloérdi Santéz-Anna. Kousant a hrézant heb dalé, ha mé eùé ged leüiné. Ha chetu mé oeit enta de Géranna, é déioù devéhan miz Gwenholon l 937.

Kalet oé bet an traoù de getan, rag dalhet a oem azé, heb moned d'ar gér, betag Nendeleg, hag a zé ketan ar blé betag Pask, hag a sul Quasimodo betag déioù ketan miz Gourhelén. Ha red a oé azé studi ha patérad heb dihan, a-hed ar blé, nameid épad kourz ar vakansoù. Biüein a hrem euruz neoazh, rag ma oé karanté étrézom kamaraded, ha ma or-boé mistr frontal (*généreux, libéral*) a-walh aveid cherr o daoulagad àr ar farsoù a glaskem gobér. Red é lared eùé penaoz or-boé hoarioù plijuz, épad an ériou-dihan, arlerh kreisté hag é kourz an droioù-balé a hrem d'ar yaoù ha d'ar sul d'enderù. El-sé em-es desket, ged plijadur, hoari «kornigell» (*tourpie*) ged ar gamaraded, ha

hoari «brezél», pignet àr bihiér fourcheg (*échasses*), armet ged bouloù koed pon-nér.

Euruz a oem èl-sé, épad ma oé an traoù é fallad étre Gouarnamantoù ar «Broioù-Kevredet», ha ré an «Ahél-Berlin-Róm». Ha chetu deit ar blé l 939, hag ar brezél neüé ! De getan ne oé ket bet kalz a gemmadurioù ér vro. Red a oé bet neoazh d'ar hloerdi dégemér soudarded deit ag an Afrika, ha lezel geté lod ag or saüadurioù. O selled a hrem ged ansouéh !

Epad mizioù ketan l 940, ar stad étre an daoù lu a seblanté bet bourdet : disklé-riet a oé bet ar brezél, mez ne oé ket forh emgann erbed é neb léh. Ar soudarded a hoarié «Foot» étrézé, é kosté al linennou-disparti, aveid tremén an amzér ! Ur brezél fentuz enta !

Hag én un taol, pa-ta-tra ! Chetu an Alemanted é fardein àr ar Beljed hag an Hollanded, hag é treuzein o bro tréma Pariz, heb kemér ar

boén d'um gemér doh al linenn Maginot. Ha chetu ind, é korv 5 pé 6 suhun, én tu rall a Bariz, hag àr an hent d'ar hreisté ha d'an Armorig ! Oeit a oé ar Gouarnemant de vBourdel, heb gouied petra gobér aveid arrest an disurh ; Hag én un taol, un doéré digredabl : kambr ar gannaded é Pariz - Kambr ar «*Front Populaire*» - endoé reit ar gelloud politig d'ar Marichal Pétain !...

Me oé-mé é Santéz-Anna an dé-sé, an dé 18 a viz Méhüén, én arbenn a préhésion parréz Plaorén. «Rein a hran me iné d'ar vro, a laré ar Marichal, ha goulenn a hran un arsaü-brezel inou-rabl ged an Alemanted». Kleüed a hrem diviz ar Marichal àr-un-dro ged kañennou ar préhésion én inour de Santéz Anna.

Komprennet em-boé neuzé, heb arvar erbed, èh oé koéhet an Néañv àr on fennoù, hag èh oé achiù amzér me youankiz !

*Loeiz Ar Mouëll*  
(31 a viz Est 2007)



## Or ré dremenet :

### Marie Dréan



Marie Dréan hag e breur (+ d'ê 88 vlê)  
Ean a oê botoour e Gregam

Mamm Fransiz ha Madelén, en-des kuitet ar bed-man d'an oed a 99 vlê d'an 26 a viz ébrel (imbrill) devézh-an.. An Tad Adrien Collet é en-des lidet hé overenn-intermant é iliz Sant-Geltaz én Alré.

Marie a zo bet komananterez fidél d'« An Doéré »...

### E ti Jean-Jacques Le Floc'h.

Kollet o-des o mab bihan, Yvon, daoù vlê dehon, béet én ur poull deur. An obidoù

a zo bet lidet é iliz Pléhéneg d'ar sadorn 22 a viz Gwenholon.

### Aotrou Max Le Fur-Debicki :

D'an 28 a viz Gwenholon éma bet lidet overenn-intermant Max Le Fur-Debicki. Ean a zo bet breutaér (*advokat*) ha kuzuliour é ti-kér An Oriant.

An tad Joachim Ar Palud en-des lidet an overenn, al

lod vrasan anehi é brezho-neg.

E vugalé : Aotrou hag Intron Iwan Ar Fur a zo é chom én Naoned; ind ha Geltaz, unan ag ar ré getan en-des saüet ar Skol Diwan, dalbéh chomet féal d'« An Doéré ».

**D'o famill glaharet é kennigam or gourhemennoù a gengañv hag a garanté.**

## LAREDOÙ

An hani nen des ket mimoér  
A zo red dehou kaved diuharr

◆  
Ur plah yaouank a pe zimé,  
A wél an eur é lein ar gwé,  
Hag é vé dél melén a vé.

◆  
Komans a hra hé grillan kañein (*elle commence à penser à son mariage*)

◆  
Ur verh a ouil a pe gar.

## HOARHAM UN TAMMIG :

En un ti-kafé éh a un ostiz ambah (*timide*) de gaved ar bar-man ha de houlenn geton :

« Ar privéziou, mar plij genoh »

« D'an tu-rall » é reskond ar barman

En em ziblas a hra an ostiz hag éan de vourboutal é skouarn ar barman :

« Ar privéziou, mar plij genoh. »

☺

Oeit on bet de Lourd ged me moéz.

Nen des ket bet burzud (*miraki*) erbed.

Deit on éndro geti.

☺

Ur skoliad 7 vlê a lar d'ê vestréz

« Faot ket dein ho spontein, mez me zad en-des laret, mar dalhet de rein dein notennoù ker fall, be zo unan hag a dapo ur fésennad a fésou ! »

## AR GRILLAN HAG AR VELIONENN

En amzér ag én hañv  
Heb arsaù, noz ha dé,  
E kañé ar grillan,  
Ha bourruz a gavé.

E kreiz an deverrans,  
Ankouéheit mad en-doé  
A cherrein é viùans  
Eid an amzér goudé.

Mez tremén a hra béan  
An imbad, an hoari,  
Chetu deit ar gouiañv  
Ha deit ar gerteri !

Ne gavé mui nitra  
De rein d' é gargusenn,  
Na preñved, na bara,  
Nag un tamm kelionenn.

Ar grillan disoursi,  
Goulli kaer é voelloù,  
Kalz a hoant n' en-doé mui  
De lared soñennoù.

De di ar velionenn  
Ean oeit, ar hêh grillan  
De houlen ur grañenn  
Aveid torrein é naon.

-« Me lar deoh a-vreman,  
a galon, emé éan,  
m'ho péo, an est-man,  
diù grañenn eid unan. »

Mez ar velionenn kri  
A reskond d' ar grillan :  
-« Bara ne hues ket mui !  
Petra hreh hwi d' an hañv ?

-« Pe oé kaer an amzér,  
eid komz ged gwirioné,  
ér mēz hag én tiér  
me gañé noz ha dé.

-« A ! ya, hwi a gañé  
pe oé red labourad !  
ama, krollet eùé.  
Kénavo ! yéhed mad ! »

Grillan, n' ankouézhet ket,  
Mez dalhet sonj erhad  
De beb unan ér bed  
Ema red labourad.

Ha hwi, gouiet eùé,  
Melionenn digalon,  
Chelaouet ged truhé  
Goulen ar baourerion !

*E. Le Strat*

## CHELAOU KOMZ BREZHONEG BAMDE :

**Ged Radio Bro Gwéné** ( 97.3 kreisté Morbihan, 101.7 kreiznoz ha 92.6 Pondi)

Ag ar lun d' ar gwénér

- 7 eur. ½ - 9 eur. : Liù an amzér
- 11 eur - 12 eur : Kreiz mitin
- 13 eur - 13 eur ¾ : Diskouarn an nijal (ged Radio Kerné)
- 16 eur ½ - 17 eur ½
- 17 eur ½ - 18 eur : Pop Skeud

D' ar sadorn : de unneg eur, épad un eur : ne vimp pilet evit komz.

**Ged France Bleu Breiz Izel** ( 103.1 An Oriant)

Bamdé, tro ar suhun, abadennoù ha keleier (doéréioù)

**Ged France3 Ouest :**

Ag al lun d' ar sadorn : An taol lagad de 12 eur ¼  
D' ar merher : Mouchig-Dall 8 eur 40 - 9 eur.  
D' ar sadorn : Digor din 10 eur ½ - 10 eur ¾  
Té ha mé 10 eur ¾ - 10 eur 50  
D' ar sul : Red an Amzér 11 eur ½

**Ged TV Breizh :**

àr TPS (kanol 23), Canal Sat (kanol 26).  
D' ar sul : Tro war Dro de 8 eur.

**Kouviet oh d' an tolp beb 3vet sadorn ag ar miz é « Ti-Parréz » Bubri de 5eur d' enderù betag 7eur. Aveid lénn, komz ha kañein é brezhoneg Bro-Gwéné. Digor d' an oll.**

## Ar foëuour

Me me- lin a lein ar ma- né me me- lin  
a lein ar ma- né me me- lin a lein  
ar ma- né a zo e tro a bad an dé.

Diskan :

*« Me melin, àr lein ar mané,  
A zo é tro a bad an dé.*

Ar beizanted ag ar hornad Me flahézed a ziméein  
A zégas dein gran a sahad De dud en-des traoù de horein

Hei ha segal, kerh ha gwénéh Me faotred eùe en-devo  
A arriù genein a beb léh Ar merhed gwellican a zo

Malein a hran, mitin, ahoé Seùel a hrein eidonn un ti  
Aveid kreskaad me zamm-dañùé Péah em-bo é me hohoni.

A pe sellan doh me yalhad Dré forh gouied hoazh em-vagein  
Me gav é vo èz me ziad Un tammig tor a zeï dohein ! »

Ré a foëuaj a hré èl-sé  
Kaset é bet, éraog, d'ar bé !...

Diskan devézh

*Hag é velin àr ar mané  
A chom, heb troein, épad an dé !*

*Sonenn toniet ged Pier-Mari Jéhannou*

## BETAG AR FEUTAN SKLER

*( ag ar sonenn : à la claire fontaine)*

1  
Betag ar feutan sklér, o  
'N ur voned de valé (bis)  
M'es kavet deur ken sklér  
Ma saillen ged ar joé.

2  
Ged délenn un nèruenn, o  
Em-es séhet abenn (bis)  
Ar ar barr ihuélañ  
Un estig a gañé.

3  
Kañ, estig-noz, kañ-ta  
Joé braz é te galon (bis)  
Hoant hé-des de gañein :  
Em hani, melkoni

4  
Daroù eid m'ami Pièr  
En-des men dilézet (bis)  
Eañ hag en-doé grateit  
Hed buhé me harein.

5  
Mar da dehoñ kuitad, o  
Men diléz aveid mad (bis)  
Men daroù a rido  
Noz ha dé heb arsaù

6  
Mez oll éned an Néañv o  
A zeï d'em honfortein (bis)  
Neuzé an estig-noz  
Ne hrei nameid ouleïn.


7  
Betag ar feutan sklér, o  
Eh ein ged leüiné (bis)  
Ha barroù an nèruenn  
Dousig me luskello.

8  
A pe vein kousket don, o  
E larein ém hunvré (bis)  
« Pell 'zo en ho karan  
Biskoazh 'n'ho ankouézhein

9  
O ya, kañ estig-noz  
A-viskoazh ho karan (bis)  
Ha laret kriù d'an oll  
Hed buhé 'n'em garein.

10  
Ema ataù ho pouézh  
En don a me halon  
Ha tré betag ar marù  
'E vo me leüiné.


*(Troët ged Mériadeg Herriou)*



**GIRIOU-KROEZ** (ged Kermorvan)

**A-hed**

- 1-Hernet (daoù gir).-  
 2-Geton é hellér torrein ar séhed.  
 3-Salud Sézar(én ur zistill).- An avél en-des é hani.- hir divogalennet.  
 4-Douééz grek.- Stér é Evreux.  
 5-Kér é 29 ha kentanù.  
 6-Kaptén Jules Verne.-  
 7-Penn an oheh.- Fuzillenn yankee draillet.- Pas mé.  
 8-Edan ar yar, é hortoz de voud ur pousin.-  
 9-Kér Sant Jildaz.- Dizimé dibennet.



**A-dreuz**

- 1.-Garchennour.- 2-Salud Sézar.- Huné mesket. 3-Mem salud èl é 3 a-hed.-Rem.-Edan ar yar.- 4-Grateit d'an achimant a beb blé.- 5.-Lor fondet.-Gad heb é galon.- 6-Tost d'an noz.- 7-Notenn muzik.-Unan é latin.-Penn Viktor.- 8-Urh én dizurh.-Melt kemmesket.- 9-Ema é poéz.

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed** : 1- A/BLAD.- 2- TAVARNOUR.- 3- AV.-ROD.-HR.-4- HERA.-EURE.- 5- EDERN.- 6-NEMO.-VOLT.- 7- OH.- UGN.- TE.- 8- UN/UI-DOVET.- 9- RUIZ.- ZIME

**A-dreuz** : 1- ATAHINOUR.- 2- AVE.- EHNU.- 3- AVE.- REM.-UI.- 4- BARADOUIZ.- 5- LRO.- GD.- 6- ANDERV/NOZ.- 7- DO.- UNO.-VI.- 8- UHR.- LTEM.- 9- ARRESTET/E.



Skritelloù, mailing, kartennoù-dégemer, pik-fax, grouiennerezh, plastikerezh, boulhadurezh...



**KOPIADENNOU EN HO UNAN**

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
 abcopies56@wanadoo.fr  
 10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
 Kevredigezhou  
 Entreprizioù  
 Ne vern più...

**ENEZ GROE - Kambroù-ostiz**(chambres d'hôtes)  
*Digor a-hed ar blez*



3, Ar Leurc'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

**AMZER NEVEZ**

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
 Lévræoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
 Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
 Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzernevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

**Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR**

N° CCP de l'Association : **NANTES 4 287 62 E** (chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigeh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herriéu - Jobig Le Guludeg  
Alfons Samson - P M Jéhanno

programme

Le Pays d'Auray  
en Fête  
2007

Bro ALRÉ GOUIL BAMBÉ

Le Pays d'Auray en Fête 2007

Av. Jules Le Guen - 56260 An Arvor

Le Pays d'Auray en Fête 2007

Av. Jules Le Guen - 56260 An Arvor

Le Pays d'Auray en Fête 2007

Av. Jules Le Guen - 56260 An Arvor

## Invitation pour un automne autrement

Séjournes en Pays d'Auray et revenez en automne, vous êtes nos invités.  
Le Pays d'Auray se découvre toute l'année. Retrouvez le programme  
détaillé « un automne autrement » sur [www.pays-auray.com](http://www.pays-auray.com)

- AVOIS CHAUSSEES** 4 week-ends de balades ludiques animées et encadrées pour découvrir le patrimoine naturel sur 40 circuits pédestres
- BRO ALRÉ GOUIL BAMBÉ** un festival de plus de 40 animations culturelles bretonnes (destou-nez, webnoz, spectacles, expositions, concerts, journée langue bretonne, stage musique et danse traditionnelle...)
- DÉTOUR D'ART** 3 circuits d'interprétation et 6 animations pour découvrir le patrimoine religieux.
- À MUSÉE VOUS !** 23 animations ludiques pour porter un nouveau regard sur la mémoire des lieux et des gens en suivant le cercle du patrimoine de quatre musées.
- LES SEMAINES À CROQUER** pour découvrir les saveurs automnales et les produits du terroir.

**Un bon plan pour découvrir  
le Morbihan et la Bretagne-Sud  
aux couleurs automnales !**

➤ Réservez dès à présent votre location gîte et vos billets sur [www.morbihan-sud.com](http://www.morbihan-sud.com) les professionnels vous accueillent !

➤ Trouvez votre itinéraire complémentaire et auprès des offices de tourisme et sur le site [morbihan.com](http://morbihan.com)

NAUVELLE BRETAGNE  
Morbihan  
ouest  
france  
Morbihan  
Corse gère  
BRETAGNE  
CIRCUIT d'ABONNEMENT

**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED  
N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépôt légal 3<sup>ème</sup> trimestre 2007

INTERNET: <http://perso.libertysurf.fr/andoere> E-MAIL: [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)

N° 103

an

DOÉRIÉ

Priz 4€

DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED



*D'an 11/11 E iliz Sant -Geltaz An Alré*



SKOL: GHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, stradae an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)

37<sup>e</sup> Festival  
INTER CELTIQUE  
Lorient



KAMPING AR VEITERI VRAZ  
E KARNAG  
ho tigemer

Digoret a viz Ebrel de greiz miz Gwenholon  
Brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg komzet  
Pgz : 02 97 52 24 01 - Fax : 02 97 52 83 58.

## ROLL AR PENNADOU

KENT-SKRID	P. 4
OEIT E ANICET	P. 5-6
E ILIZ SANT-GELTAZ D'AN 11/11	P. 7-8
ABATI INTRON VARIA AL LEUINE	P. 9-10
PEGEMENT OM-NI	P. 11
DOEREIOU A BEB SORT	P. 12-13
ISTOER AN ARMORIG	P. 14-21
KAKOUZELL LANN BIHOUE	P. 22
HOARHAM UN TAMMIG / LAREDOU	P. 23
FABLENN (AR GARELL)	P. 24
SONENN (DISUL DE HANTER-NOZ)	P. 25
GIRIOÛ - KROEZ	P. 26



Splilhennig « Ofis ar Brezhoneg »

Kirieg é peb skrivagner a veid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéret

## Kent-skrid

Lénnerion ker,

Aveid ar blé neùé 2 008 é kennigam deoh or hetoù gwellan, de getan, ar yêhed hag eùé rah an traoù mad a gareheh kaved àr ho hent ar blé-man.

An Doéré a hrei ar gwellan ma hello eid rein deoh penna-doù plijuz de lénn.

Ar wézh-man éh om arriüet ged an niverenn 103.

Ged Lociz ar Mouël é helleet lénn "Istoér an Armorig". Red a vo marsé, d'ul lod aha-noh, lakad béh ! « Labouret, keméret poén... » a lar ar fa-blenn. Ged sekour ur gériadur é vo tu de zoned de benn. Skridoù talvouduz int hag a zizolo istoér bro or gour-dadoù.

Ar pennadoù arall a zo a beb sort. Spi on-es é kaveet plijadur geté.

Mez chomam hoazh àr dreuzoù ar blé neùé aveid goulenn genoh doned de sekour genem ha rein harp d'An Doéré.

Penaoz ?

- én ur gaved komanante-rion neùé
- mar skriüet-hwi brezhonég, kaset deom ho skridoù, soñennoù, sorbiennoù... pé laret deom più a anaüet (amizion, kelénne-rion...) hag a hellehé rein un taol skoéans deom.

Trugaré deoh, mignoned ker, ha kénavo ar hetan.....

An Doéré

## OEIT É ANICET D'AR BED ARALL



Ne gredem ket é oé Anicet édan hur huitad, deusto ma oé bet obérateit (*opéret*) dré ziù wézh. Kredein a hrem éh oé kreñv awalh d'en em ziwenn doh ar hleñüed en-doé kroget énnon.

Na trist a oé an dé-sé, dé é overenn-intermant, d'ar yaoù 29 a viz kalañ-gouiañv, de ziù eur hantér d'enderù ! Lanbarr a oé an iliz, ha kement arall a dud ér méz anehi. E familh tolpet étaldon ha sterdet én dro d'é bried Maria, d'é vugalé ha d'é zouarénéd, oll é vignoned deit de lared

kénavo dehon a oé ponnér o halon geté.

Neoazh éma bet braù an overenn ged pédennoù ha kañennoù a blijé braz de Anicet. Laret en-des, un dé, d'unan ahanom, n'en-doé ket eun ag ar marù, deusto mar karé ar vuhé ha mar kavehé diêz leskel é familh àr é lerh.

Anicet en-doé 70 vlé. Groeit en-des é vichér karrellour ged ampertiz Un dén digor a spered ha douget de rein servij. Ged lod ag é amied, hag a volanté vad, en-des-éan reneüéet Chapél Santéz Elen ha Skol Santéz Elen adal d'ar chapél. Anaüet en-des Polig Monjarret ha kenlabouret geton.

Elton éma bet soñér ér Bagad Sant-Iwan saüet geton ér bléioù 1 970. Er filajoù tro-ha-tro éh ouié Anicet kañein a galon éleih a soñennoù. Un hañour dispar a oé. Kañein a



hré hoazh ged baré kañerion ar barréz.

Grès dehon éma bet kavet an tu de gevellein (*jumeller*) Bubri de vMacroom, kêr an Iwerzhon. A vlé de vlé éma deit al liammoù de vould sonnoh sonn étre an diù gêr.

A-fed « An Doéré » chemel a hram « stoket » ! Kenlabouret en-doé Anicet genem kentéh èl ma oé bet saüet an dastumadenn, ha sekouret pe oé rekiz èl é “Fest an Tri Hanton” ag ar blé 1 982 d’ar blé 1 985, étal ar pont é Pont-Aogan.

Digoret en-des eùé an diù euriad-lénnadenn é “Ti-ar-Barréz” àr blasenn iliz Bubri, de beb trived sadorn ag ar miz.

A greiz hur halon é laram trugaré dehon. Kendalhein a hreem àr é lerh, én ur sonjal é vo hoazh én hur mesk, drestoll pe vo kañet genem ar soñennoù a vourré-éan kement kañein.

Or sonjoù karantéuz de vMaria ha d’é familh ér glahar.



En iliz-parréz Bubri dé an asunston 2007

## E iliz Sant-Geltaz An Alré D’ar sul 11 a viz Kalan-Gouiañ

### UR FILAJ-SOÑADEG (CONCERT) DUDIUZ

*An dé-sé, de 3 eur ½, éh oem 500 a dud tolpet én iliz, kouviet ged « Santéz Anna Gwénéed », eid inourein or soudarded marü ér brezél braz. Chetu un enderü en-des plijet d’an oll.*

*Paréioù-kañerion en-des kañet soñennoù kaer diàr ar brezél hag ar péah. An dud en-des bet an tu de gañein a galon geté.*

« **Boeh Santéz Anna** » en-des kañet « Kloh ar Brezél », « Sent Breizh », « Tridal a hra », « Doué Madelézhus ». Jorj Belz en-des lénnet « Disklériet é ar brezél », ur pennad tennet a Livr Loeiz Herrieù « Kamdro An Ankoù ».

Kentéh àrlerh « Doué Madelézhus » éma bet lénnet lizhéer Loeiz Herrieù kaset d’é familh épad ar brezél. Ar pennadoù-skrid a zo bet lénnet, ur wézh ged Jorj Belz, ur wézh arall ged Yann-Baol Rieux.

Ged kañerion « **Bubri Melrant** » éh oé neuzé kleüet « Soudard Bubri », « Kañenn Intron Varia ar Gellouid », « Kañenn én inour de Sant-

Bihui », « Kendalhom » ha « De fé on tadoù kozh ».

Ul lénnadenn hoazh « An overenn ér hoèdeg » a Yann-Per Kalloh hag éma deit Paré **Sylvia** de gañein « Jézuz pégen braz é », « Me zo gañet é kreiz ar Mor », « E Kervouial » ha « Boéhiou joéiuz »

Neuzé éh oé dégaset soñj deom ag an « Daou soñer a Landévan » :

*Ar an Iser é tasoñé o zoñioù Tad ha mab, an tad doh ar bombard, ar mab doh ar biniou, oeit ur potarn (obus) koèzhet àrnehé ha lazhet an daou soñer.*


Gérard Breurec ha Francis Dréan en-des kañet pe oé André Le Meut ha Dominique Le Blay é soñein ged o biniou ha bombard. Dreistpar !

Kartér-noz ér hleuioù ar gédour :

« Me zo ar gédour braz én é saù àr ar hleu. Goud a hran petra on ha me ouér petra hran. Iné Kornog, hé douar, hé

merhed hag hé bleu, oll kened ar bed é, an noz-man, a viran. »

Più n'anaù ket ar giriou-sé en-des skriüet Yann-Ber Kalloh àr an dalbenn, éraog boud lazhet éan eùé.....



« **Boeh ar Mor** », deit a Blé-héneg, en-des kañet “Klemgann ar Brezél” (groeit é ter lodenn), ha « Galvadeg an tri hant mil soudard ». Tridal a hré or halonou, èl ma lar ur soñenn arall !

Predeg an Aotrou Emile Masson de skolaerion Lisé Pondi a zo bet lénned

« *Pé daù an drouz, é kan an énéan* » hag ar paréiou-kañerion en-des n'em lakeit

de gañein oll àr un dro « Pédenn aveid ar ré varù », « Kénavo », hag ar « Bro-Gozh » aveid achiù.

N'ankoéheem ket an 240 000 - ur chifr éahuz - a soudarded koézhet duhont, pell a-zoh o bro. Ha beb blé, revé Santéz Anna Gwénéed, é vo reneüet an abadenn d'an unneg a viz Kalan-Gouiañv.

Trugaré a greiz kalon deh

## ABATI INTRON VARIA AL LEÛINÉ – HEN-BONT – lakeit é gwerzh

*Lénned a hues surwalh ér gazetennou, pé kleüet dré ar radio an doéréman : an abati a vehé édan boud gwerzhet de Odalys; honnen er lodennehé é uigent pezh-lojeris de fermein d'ar ré en-devehé argant awalh aveid o frénein.*

*Istoér an abati dré vraz :*



E kreiz an trizegved kantvléad éma bet saüet an abati àr un dro ged kêr an Hen-Bont. Al léanézi a viué a-barzh en-doé an droèd àr beskerzh ar Blañoeh, hag ar ré a

**Diàrbenn ar werzh :**

E miz genvér 2 007, ur bléso enta, en-doé an ti-kêr disklériet éh oé prest de brenein an abati d'ar briz a 145 000 euro. E miz meurzh éma bet

yé de besketad a béé gwiriou (*redevances*) dehé. Melinioù o-devoé eùé. Peizanted, melinerion, baraerion...a labouré édan o bili. El-sé é chomo an abati betag achimant an triwéhved kantvléad, de lared é, épad 5 kant vlé.

Neuzé deit é de voud ur homanand prevez.

Dohtu àrlerh ar brezél 1 940 éma bet reit de gKraou ar Ronsed (*Haras Nationaux*). Servijet en-des de zégemer tud é kambrou an estajoù, ha ronsed de réz an douar.....

tolpet ur baré tud, dilennidi (*élus*) hag izili kevredigezhoù én o mesk...aveid gouied penaoz implé ar saüadurioù (*bâtiments*).

E miz-even éma bet saüet ur sindikat étré Cap an Oriant, an Ti-Kêr, an Département hag ar Rann-Vro.

Sonjal a hrér é kerzhé mad an traoù a pe gouéh an doéré

### Ha breman ?

Al lod muian ag an dilennidi ha kevredigezhoù, èl « Sarah » én Hen-Bont, en-des kentéh goulennet ged an Ti-Kêr en em vellein heb gortoz ag an afér-sé ha gwéled penaoz gobér aveid gouarn an abati.

Kennigoù a zo bet groeit a-veid implé a-féson ar saüadurioù heb torrein al liamm ged an « Haras ». Ne vehé ket, é gwirioné, un dra vad digreskad ha goannad ar « Hraoù-Ronsed ». Ré danjeruz é vehé aveid o dezoned, rag perag ne vehé ket gwerzhet arhoah an « Haras » a-bézh ?

Un emgleù a zo bet saüet étré kevredigezhoù Bro-an-Oriant hag ar ré-man en-des kouviet kentéh o izili d'un

souézhuz, árdro an Nendéleg : an abati a vo gwerzhet de Odalys d'ar briz breman a 470 000 euro. Ur bromèsgwerzh a zo bet mem sinet étré an Haras hag Odalys.

tolp, d'ar sul 13 devézhan, de 3 eur d'enderù, aveid disko-ein o vennanté de ziwenn an abati.



Péar hant a dud a zo deit deusto d'ar fall amzér a oé an dé-sé aveid rein harp d'an emgleù. Dehon breman é vo ar garg de genlabourad ged an dilennidi aveid salvein an abati.

### Pégement om-ni é Breizh ?



D'ar hetan a viz genvér 2007

éh oem : **4 334 000**  
 Er blé 1500 : **1 000 000**  
 E 1801 : **2 100 000**  
 Etré 1876 ha 1946 : **3 000 000**.  
 Ar chifr a zo chomet goann é-

pad an 70 vlé-sé; an divroerezh (*émigration*), èl ma ouiér, a zo bet kreñv, hag an tri brezél – é 1 870, hag an daoù devézhan – en-des lamet ul lod braz ag or yaouankiz.

Goudé 50 vlé é kresk éndro poblans Breizh, dreistoll ar vord ar mor hag ér hérioù vraz.

D'ar hetan a viz genvér 2 006 boud éh oé :

- Aodoù-An-Arvor : **569 000** a dud.
- Penn-Ar-Bed : **879 599**
- Ill-A-Gwilun : **938 000**
- Loar-Atlantel : **1 219 000**
- Morbihan : **693 500**

Poblans an deg kér vrasan a oé istimet é 2 005 :

- Naoned : **281 800** - St-Nazer : **68 200** - Sant-Herblain : **45 000**
- Roazhon : **210 500** - Sant-Maloù : **49 600**
- Brest : **145 100** - Kemper : **64 900**
- An Oriant : **58 400** - Gwénéed : **53 700**
- Sant-Brieg : **46 700**

Pégement a zo ér mēz ag ar vro (divroet) ? N'on-es ket chifroù résiz (*précis*). Ur wézh-rall é vo marsé an tu d'er lared.

## DOEREIOU A BEB SORT :

### Béhin (*algues*) én ho kéfluskér (*moteurs*).

Glaz, ru, griz...en em streù-ein a hrant àr an aodoù. Impléet int èl bouéd ha remedoù é tiér-apotikér... Edan berr é veint impléet èl deurtan (*carburant*), 30 gwell a-veid ar holza pé an dro-héol

(*tournesol*). Al laborenoù (*laboratoires*) a zo é studi penaoz gobér an ésans neùé a-doullad dré ar bed.

Al litrad ésans-sé a vehé prest de zivérein é 2 010.....

### An Aotrou Eskob a vehé é studi ar brezhoneg.

Un doéré mad é.  
Hunvréam breman : kom-prénet en-des rah é véléan éh oé mall braz dehé heuli o eskob, hag édan daoù pé tri

blé – un herrad amzér fur aveid diskein mad ar yézh – é vo diüyézheg an overennoù ha lidoù arall én or ilizioù ha chapélioù. Ya, hunvréal.....

### Stajoù Stumdi - keméret é karg ged ar stummadur dibaouez (*formation continue*) :

- **Ur suhun é brezhoneg** : ag ar 25 d'an 29 a viz huavrér 2 008 é Landerné. Liéz é kinnig Stumdi ur suhuniad, de lared é : 5 deùézh é 35 euriad
- **Stajoù ged témoù** :  
E énézenn Eusa : ag an 21 d'ar 25 a viz ébrel (imbrill) 2 008. Epad ar suhun-sé é vo reit an tu de zizolein braùité an énézenn.

- **Didan al loér gann** : ag ar 7 d'an 11 a viz gouéré (kalan-gouiañv) 2 008. Beb blé, é Landerné, é vé lidet "**Gouél Kan al Loar**". Epad ar festoù é kinnig Stumdi dizolein pé gwellad ar brezhoneg. Stalioù a beb sort a zo, ha hoarioù...
- **Gwénédeg é Pont-Skorv** : ag an 21 d'ar 25 a viz gourhelén. Ar stajerion a zizolo Pont-Skorv én ur gomz é brezhoneg bro Gwénéd.

### Kan ar bobl 2 008 :

(*deizadur an abadennoù*)

27 genvér	é Kavan	Bro-Dreger
2/3 huavrér	Plemet	Aodoù-an-Arvor
9/10 .....	Gwerleskin	ged Park an Arvorig
10 .....	Lesneven	Ti-ar-Vro-Leon
16/17.....	Sizun	Park an Arvorig
17.....	Pacé	ged La Rassemblée
22/24.....	Pleskob	Petra Neùé
23.....	Landavran	Bro Vitré
8 meurzh	Guehenno	
9 .....	Mael-Karaz	Radio Kreiz Breizh
14 .....	La Méaugon	Bro Sant-Brieg
15 .....	Trégunc	Tud Bro-Konk
15 .....	Pariz	
22 .....	Ménez Dol	Bro Dinan
30 .....	Langonnet	
30 .....	Kaodan	Tarz-an-Deiz

11/12/13 a viz imbrill é **Pondi**. Deùézhioù devézhan « Kan ar Bobl ». Epad an dézhioù-sé é vo dibabet ar ré wellan, èl beb blé.

## ISTOER AN ARMORIG

### 4 – Edan bili ar Roméned (56 kent H.S. betag 476 goudé)

Ged donedigezh ar Roméned d'an Armorig, ér blé 56 kent H.S., éh arriüam breman ged kourz an istoér gwirion, an hanni kempennet diàr skridoù tud ag an héveleb prantad, pé ataù tost dehon. En o mesk éh eus, a-zivoud ar pemp kant vlé-sé:

- An "**De Bello gallico**" (àr brezél éneb d'ar Gall), skriüet ged Julius Kaezar éan-mem, pé kentoh, marsé, ged un ofi-sour sentuz dohton. An darvoudoù diféret azé a zo, heb arvar, dré vraz, fidél d'ar wirioné istorig, mez seblant a hrant boud ankoézhuz ha mud é kevér ar pézh hag a daolehé méh pé dizinour àr obéroù ar Roméned...

- "**Istoér Rom**", skriüet devé-hatoh ged Dion Cassius, un istoéroure grek ag an eilvet kantvléad goudé H.S.

- An "**Notitia Dignitatum**" : ul listenn a stagadennoù (*détachements*) lu ar Roméned é ké-rioù ha porzhoù-mor é kornog ar Gall, épad ar 4vet kantvléad goudé H.S.

- Ha skridoù a beb sort deit a bluenn an eskobed, hag an dud é karg, én amzér-hont...

Goudé brezél Kaezar (a 59 de 51 kent H.S.) é koézh ar Gall abézh édan bili Rom. Epad an herrad-sé, éh eus kalz a skridoù latin diàr aférioù Rom hag ar Gall, mez red é gobér un enklask per-huéh énné – hag étrézé – a-veid dizolein istoér gwirhan-val an Armorig hé-unan, ken treboulet èl ma dé bet dé-goézhioù (*événements*) ar vro koézhzet édan bili Rom.

Er pennad-man é vo kavet fréh me labour àr an tachad-sé: un ansé aveid diforh ha

dibab an oll darvoudoù (*événements*) hag en-des fichet an Armorig hag an Armorigiz édan yaù ar Roméned.

A pe lénnér an "**De Bello Gallico**", é wélér ar hGalled, hag én o mesk an Armorigiz, èl tud peur ha kentoh dizesk, tud heb kalz a sévenadur. Mez, penaoz éh oent-ind, é gwirioné ?

Aman é komzan ag an Armorig heb kén, mez ar pézh a zisplégan a jaojehé, me gred, aveid ar Gall abézh.

Gwir é penaoz an Armorig en-doé neuzé dégeméret lé-zennoù ha gizioù ar Gall a-houdé an 6vet kantvléad kent H.S., é kreiz maréad an Houarn...pe oé deit ar hGalled é oll kornadoù ar Gall, a-kosté d'an hen-poblansoù, an Ibéred hag al Liguere. Deit a oent eùe enta betag an Armorig, hag azé o-doé kavet, drest-oll, an **Ossismed**, pé Ostimed, Ostioned) doh tu ar hreiznoz, hag ar **Vénéted** (pé Wenn-ed) doh tu ar hreisté. Neuzé éh oé deit eùé, me

gred, d'an Armorig, ar broadoù keltieg hag a oé azé é gré Kaezar. E kosté an Ossismed, doh tu ar retér: ar **gKoriosolited** (é kornadoù Courseul hag Alet); an **Diablited** (é kornad Dol, o hér-vamm a oé Jublains, ér *Mayenne* a-vreman); an **Unelled**, an Abrinkated (é kornad *Avranches*), an **Exuvied**...Izélikoh éh oé ar **Riedones** (ar Redoned, én dro de gCondate, étal kempér an Ill hag ar Visnonia (= *Vilaine*)). E kosté ar Vénéted, doh tu ar retér eùé, éh oé an **Namnètes** (an Naoneted), àr ribloù al Ligér, én dro d'o hér-vamm Condevicnum); an **Andékaved** (é kosté *Angers*), an **Touroned** (kornad *Tours*).

Douaroù an Ossismed um lédé é kornog ha kreiznoz ar ourinéz, a-zebri ar Mor-Atlantig betag pleg-mor Sant-Brieg. Douaroù ar Vénéted um lédé, ind, a-zebri Bro-Gerné a-vreman betag divégadur al Ligér, ha stalet a oent àr daoù du ar stér, penn-dé-gwir ar Vénéda (= ar *Vendée* a-vreman) a oé sanset boud neuzé

stér ar Vénéted. Etaldé, doh tu ar hreisté, éh oé ar **Pik-toned** (é kornad *Poitiers*), ha pelloh, ar **Santoned** (kornad *Saintes*). An diù vroad-sé a oé kentoh iviuz é kevér ar Vénéted: temall a hrent dehé diskoein ré a vrazanté (*orgueil*), èl rénerion ar mor a-houdé gwerso...A-fed, ar var-teloded vénétig a oé navierion heb par, a-houdé maréad ar Houivr hag an Arem, ha rénein a hrent an oll kenwerzh étré an Armorig ha Breizh-Veur.

Kérioù vrasan an Ossismed a oé, péchanj, Vorgium (*Karuez breman*) ha Vorganium (ne ouiér ket émenn éh oé), hag ur porzh-mor dédenet d'an darempredoù ged Breiz Veur. Ré ar Vénéted a oé Dariorigum, ar gér-vamm, ha Korbilo, ar porzh-mor braz é beg al Ligér, brudet agent èl goarneréz ar henwerzh hag ar marhadourezh étré Mor-Breizh, an Atlantig hag ar Gall.

**Dariorigum** (Rouañez ar mor) a oé, a-daol sur, léhiet é

kosté Korbilo, rag azé oé dégaset al lodenn vrasan a varadourezh an navierion vénétig. Ne hellé ket ataù boud é Gwénéde, nag é Lokmaria-Kér, rag ne oé ket azé morlenn erbed é gré Kaezar : ne vo ket plég-mor erbed azé é-raog kreiz an 3vet kantvleád goudé H.S., a p'um lakei bleinienn ar mor de ihuélad. Ne hellé ket ohpenn boud én Intell, én arbenn ma o-doé dober ag ur morlenn éz de voned abarzh, ha ma oé barrenn an Intell ré riskluz aveid ar bagoù dré ouél. Boud a oé, péchanj, é sol ar stér (é kosté Losteng ?), ur gériadenn hag a oé bet brudet gwézh-arall, ged hé motennoù ha mangoérioù, hag é morlenn stanket, mez ré bell a oé azoh beg al Ligér aveid boud kér-vamm ar Vénéted.

Ya, Dariorigum ne hellé boud léhiet nameid étré Korbilo hag ar mor, é sòl ar morlenn braz hag um lédé neuzé étré ar Pouligwenn ha Gwennrann, àr ar blénenn deit de voud breman maréz ar

Brière. A-fed, Gwennrann a zeli, d'em sonj, boud komprénet èl "Rann ar Wened" (= ar Vénéted), kentoh eid "Rann an Halén), drest-oll a pe ouiér ne oé ket azé park halén erbed é gré Kaezar. Ar Pouligwenn a hell eùé boud komprénet èl "Poul ar Wened" (= ar Vénéted).

**Stad-buhé an Armorigiz** a oé kentoh mad, me gred, én amzér-hont deusto ne oé ket merhad ker pinùig èl ma oé bet épad maréad an Houam. A-fed, kollet o-doé al lod brasan ag an henwerzh o-doé neuzé (Uébr, krohennoù, stén...) ged marhadizion ar Mor-Kreiznoz hag ar Baltig.

Ar marhadourezh a ziskenné breman dré ar stérioù Elb, Rhein, Rhodanos ha Donaù, betag ar Gall ha broioù ar Mor-Médidouarel, é-léh doned àr bagoù ar Vénéted dré Mor-Breizh hag ar Mor-Atlantig. Chom a hré ursort ged an Armorigiz an darempredoù ged o henderùed a Vreizh Veur : Krohennoù, doh un tu, stén ha potéùaj, halén hag ivl,

ha gwin drestoll, doh an tu arall, ha kement-sé a denné hoazh d'an Armorig ur somm vad a argand, ha dañué labour aveid hé zud.

Chetu aman ur gartenn, tennet a livr Joël Cornette (*Histoire de la Bretagne et des Bretons*) hag a zisko splann léh an Armorig é kenwerzh ar gwin, é kourz an devézhan kantvleád kent H.S.:



Kavadennoù Anforoù gwin deit ag an Italia.

Pinùidigezh an Armorig a oé tennet eùé a labour hé zud àr ar mézoù. Desau a hrent loned (éhén ha saoud, deved, moh, yér...) hag estein a hrent peb sort bléad (gwénézh, ségal, kerh, heizh, mil, gwénézh-tu...) ha glazadurioù a-

veid al loned hag an dud. Aozein a hrent mohaj (*charcuterie*), brudet ér Gall ha pelloh, miret én halén. An halén-sé a oé tennet a bodoù pri karget a chumenn deur-sal lakeit de verüein àr an tan. Boud a oé un nivér braz a staladurioù sort-sé é kosté Douarnenez. Boud a oé eüé, én Armorig, michérizion a-vostad, ketabl de labourad an oll mantaloù, ha de obérein benüégér aveid servij de zobéριοù an dud, àr ar mézou èl é kér. Gouied a hrent téein houarn é govellou izél tuemmet ged koed, ha kizellein a hrent peb sort brageriz aveid o moézi hag o damezéled. Aveité èh ouient eüé néein ha teisein gloan aveid gobér dillad. N'ankoézham ket naket an ampertiz o-doé aveid skoein monédoù a-houdé an 3vet kantvléad (ar Vénéted) hag an 2vet kantvléad kent H.S. (an Ossismed, Riedoned ha Namméted). Kavet zo bet un nivér mad anehé é Breizh-Veur hag ér Gall, ha dougein a hrant un testoni diarvar (*indubitable*) de abilted

ar gizellerion ha de vrud ar varhadizion armorigiz.



*Skeudenn ur pézh-mané vénétig*

Rénet a oé broioù an Armorig ged tierned (= rouañé), édan sell an dud a lézenn ha barnerion, an Drouized, de lared é, tud a ouiegezh braz (dré+wid=goud), dédenet eüé de gélennein ar vugalé. Skol ihuél an Drouized a oé é chom, én amzér-hont, é inizenn Mona, étre an Iwerzhon ha Breizh-Veur.

Rantet a oé inour, ha kenniget lidoù, de zouéed ar bobl, èl an Intron-Veur, chomet biù é kalon an dud a-houdé maréadoù ar mein, hag an douéed keltieg èl Bélén ha Bélisa, douéed an Héol, Lug, doué ar sklérder ha patrom an dud a vichér, Mullo, doué ar soudarded (?) ha patrom Condate

(*Roazhon*) ha Fanum-Martis (*Corseul*), gKernunnos, doué an dasorh (*résurrection*) ha mestr ar vuhé divarüél.

Kenniget a oé eüé lidoù de inéoù ar mamennoù deur-rid ha de ré ar manéioù sakret, èl ar Mané-Sant-Mikél ha Mané Meukon ...

Kement-sé a zisko penaoz an Armorig a oé ur vro ker yah, ker relijiuz ha ker sévenneit èl ma oé Rom hag an Italia én héveleb prantad...a pe goéhas Julius Kaezar àrnehí, ér blé 56 kent H.S.

Pemp kantvléad kent, a pe oé ar hGalled pobl gelloudusan an Europa, o-doé treuzet ar stéριοù Rhein ha Donaù, ha treuzet eüé manéioù Alp ha Piréné. Diskennet o-doé betag kreiz a Italia, ha saüet ur rannvro gallig é flandrenn ar Pô, ar « Gallia Cisalpina ». Keméret o-doé mem, ha diskaret, Rom, kér-vamm Italia, ér blé 387 kent H.S.

Mez ar Roméned, é léh koll kalon, en-doé neuzé saüet ul lu neüé, hag é korv 40 vlé, a

oé bet ketabl de féahein ar hGalled, ha d'o lakad de gilein. Koéhel a hras ar Gallia Cisalpina édan o gelloud ér bléioù 223-218 kent H.S., hag ar hKeltibéria ér bléioù 181-139.

Deit a oent neuzé de greisté ar Gall, én dro de vMassilia, ér blé 125 kent H.S., aveid diwenn ar hornad grek-sé éneb d'al Ligured « Salyens », kevrédet ged an Arverned...Féahet a oé bet al Ligured, ha kempennet én o bro, édan bili Rom, ur rannvro hag um lédé a-zebri mané Alp betag ar stér Rhodanos, ha badéet ar « Provincia » (=Provence). Kér-vamm ar rannvro a oé Aquae-Sextiae (*Aix-en-Provence*). Un 20 vlé bennag goudé, o-doé hoazh féahet an Allobroged hag an Arverned, hag éh oé bet saüet un eil Provincia, a-zebri ar Rhodanos betag kornadoù an Ibéria: Narbonn a oé bet choéjet de voud ar gér-vamm eüé.

Un nebeudig bléioù goudé, hoazh, ér blé 101 kent H.S.,

éma diskaret dehé pobladoù abézh ar hKimbred hag an Teutoned, tuadoù jermanig pé kentoh jermano-keltieg, deit a retér ar Rhein betag kreisté ar Gall.

Ar Gall abézh a oé enta prest de goézh édan yaù Rom, pe arriüas énni Julius Kaezar, hanüet Konsul (=rénour) é Rom ér blé 59 kent H.S., ha Prokonsul ér Gallia Cisalpina ha Narbonnéz, ar blé arlerh.. Ha, revé skridoù Dion Cassius, sonjas a hras-éan abennkaer, é telié grons tenein ar Gall abézh én é yalh aveid plommein é inour adal de sénatoured Rom...

Ha chetu éan galüet dré an Eduañed (é kornad Autun) aveid skarhein Jermaned Arioivist ér méz ag ar Gall. Deli a hré eüé parrad doh an Helvéted a dreuzein douaroù an Allobroged, ar ré-man édan bili Rom èl ma ouiam, aveid moned de vro ar Santoned. Féahet é dehon an Helvéted, ha palforset int enta de zistroein d'o bro meineg ha manéeg. Jermaned Ario-

vist a zo kaset éndro, ind eüé, én tu-rall d'ar Rhein.

Arriü é breman Kaezar é **bro ar Belged**, ha reit é dehon, me gred, an tu de wéled **tévennoù Breizh-Veur** én tu-rall de stréhenn Calais (*Pas-de-Calais*), é bro ar Morined. Breizh-Veur en-doé neuzé ar vrud a voud un « Eldorado », ur vro pinüig ged kenwerzh ar stén a Gernéù, hag a üebr ar Mor-Baltig...Kaezar endoé dobér ag ur somm vraz a eur aveid gounid boéhiou ar sénatoured éneb de bPompée ; sonj a hra enta treuzein Mor-Breizh ha moned de glask azé ar yalhad a vanké dehon !

Mez, aveid treuzein Mor-Breizh, éh oé red, de getan penn, en-devoud un nivér braz a vagoù aveid dougein é légionoù. Rekiz a oé eüé diskar, de getan rah, **mor-lu an Armorigiz**, rénerion an navierezh (*navigation*, navial=*navigation*) étre ar Gall ha Breizh-Veur, ha diwennerion ar porzhoù-mor ar an daoù du a Vor-Breizh. Kaezar a gas

neuzé ar jénéral Publius Cassius tréma an Armorig aveid ansé mestroniein kornog ar Gall, ha lakad èl-sé mor-lu ar Vénéted de blégein de vnantéioù Rom.

Epad ar mizioù ketan é kerh mad an traoù aveid ar jénéral Crassus : an oll broioù en dégemér a-féson, ha koutant a hrér rein, pé gwerhein, dehon an oll darbar rekiz aveid é soudarded hag aveid é loned. Kemmet a oé bet mem ostizion étrézé, aveid diskoein volanté vad an oll. Mez ar Vénéted a gomprenn fonnabl éh oé ar Roméned é klask o lorbein aveid torrein al liammoù hag a oé étrézé hag o henderüed a Vreizh-Veur. Ul lakad a hrant enta de zifari ar broadoù arall, ha seüel a hrant, é berr amzér, ur feur ged an oll Armorigiz aveid skarhein ar Roméned ér méz ag ar vro. Lakad a hrant neuzé ostizion Rom é dalh, betag ma vehé dégaset éndro ar ré hag a oé bet reit de gCrassus.

Kaezar, hag a oé diskennet de Rom aveid dilouiein é aférioù du-hont, a za éndro, abennkaer, kounaret braz, ha vennein a hra kastiein an Armorigiz. Kemenn a hra neuzé d'é soudarded obérein un nivér braz a vagoù skañv, bagoù ged diù sted ruañerion, aveid tâlein doh bagoù ponner ar Vénéted. Goulenn a hra, aveid kempenn al labour é berr-amzér, sekour an ollgalvéion gallig é poéz, ha drest-oll ré ar Piktoned hag ar Santoned, iviuz èl ma ouiér é kevér ar Vénéted...

Sonj a hré Kaezar, sur mad, é hellehé, ged un nivér braz a vagoù skañv ha fonnuz, lan a soudarded kaloneg, um gemér heb doujans doh bagoù ponner é éneberion, ha diskar heb kalz a boén morlu ar Vénéted, ur morlu mélestret ged marteloded-marhadizion, kentoh eid ged soudarded duah de vrezélad...

( de genderhel...)



## KAKOUZELL LANN-BIHOUE (GED MERIADEG)

Groeit e vezé d'ar ré lovr fasipl èl d'ar ré varù.

Arlerh an overenn èh a an intermant de ambroug Mikél, an dén lovr, de gakouzeri Lann-Bihoué. Arrestein a hra ar béleg étal tihan ar goard, hag é lar kénavo de Vikél é hanù ar barréz. Goulenn a hra geton troein é galon trema Doué hag en digollo ér bed arall ged larganté.

Neuzé é tispieg dehon al lé-zenn : ne zelio ket doned ér méz a Lann-Bihoué nameid ged aotré ar person. A pe zeí ér méz é tougo ur gaze kenn zu. Ne hello moned é iliz erbed, nameid é chapél Maria-Madelén saüet ér lann a-veid ar gakouzed. Ne yei de davarn erbed, de velin erbed.

Ean a zivallo a éved ag ar feutaniou, ar mammennoù, hag a douch doh ar boudaj.

Ne gomzo doh an dud dí-lovr nameid seih paz azohté. Ne lako é zorn àr zén erbed, drestoll àr ar vugalé. Neuzé é kennig ar hurèu ar bál a zo geton d'an aotrou person.

Hennen é boud én douar, doh kosté an hent, a denn ur bâliad douar, hag é zaol àr dreid Mikél én ul lared : **"Exsultabunt ossa humiliata"** (*Saill a hrei ged ar joé an eskern méhekeit*).

Neuzé é pella ar hurèu, én ur bédein, heiliet ged an oll, nameid ged ar haeh Mikél, hag a hortoz ma tei é vamm de durel un dornad douar biù, hag ar béhig dillad-de-chanj, a zo deit geti aveiton.

Trevariet é ar gaeh vamm ged ar glahar, ken ne hell mui diboukein, àr hé divéz, gir erbed de lared d'ar mab-sé hé-des gañet ketan. N'en-des nameid ar darou a riolenn didrouz, bet kornou hé beg, àr hé bougennoù rouzet d'an amzér, hag a lar de Vikél brasted kalonad é vamm, hag a zo eùé é hani éan.

Kemér a hra é bagadig didan é gazal, hag é hra ar pemp pé hwézh paz hag en disklos grons a-zoh ar ré a gar, aveid en turel étre divréh ar Gloéz hag an Ankén, tost kar d'an Ankoù.....

## AN DIÙ VOÉZ MARÛ

Diù voéz marù a zo é hortoz doh dor ar Baradouiz. Unan anehé a houlen ged an arall : "Penaos éh oh bet deit de voud marù ?"

"Marù on én ur skorneréz."

"O ! Nag un dra éahuz ! Penaos éma merüel skornet ?"

« Krénein a hret, droug a hues d'ho pizied, daouorn ha treid. Arlerh un herrad amzér ne santet mui nitra. Moned a hret kuit dousig èl ma vehé én ur housked...

"Na hwi, penaos éh oh hwi deit de voud marù ?"

"Mé ? ged ur goahad kalon (*crise cardiaque*). Me gredé ne oé ket fidél me goaz, ha do-

ned a hra dein ar sonj de rédeg betag an ti, é kreiz an enderù. Kavet em-es me goaz azéet é selled doh an télé. Chetu mé neuzé é redeg d'ar ganbr ; mez ne oé hañi ér ganbr. Dichennet em-es d'ar haù ; ne oé hañi naket abarzh. Krapet em-es kentézh d'an eilved estaj, heb kaved hañi. D'ar sulér é rédan, ha mankein a hra me halon dein, ha chetu mé marù én un taol ».

Ar voéz arall, én ur hirvoudein, a lar neuzé :

"O ! Mar ho-pehé digoret ahoél dor ar skorneréz, é vehen-mé hoazh biù, ha hwi eùé."

## AVEID FARSAL

- Ar sourzien :
  - « Diéz braz a gavan lared deoh : ho koaz n'hello ket mui labourad, na forsein. »
  - "Aotrou kër, nag un doéré mad ! Eh an abenn de lared dehon. Esaad a hrei kentézh ma ouio kement-sé. !"
- - Petra gobér eid ma chomo me goaz ér gér ?
  - Moned kuit ag an ti !

## UR GARELL OEIT EN UR SULÉR

Ur garell treud ha moén, dré un toullig distér,  
En-doé gelllet, un dé, moned én ur sulér.  
Un herrad kent éh oé bet klañv.  
Enno é kreiz ar joé vrasan.  
Dèbrein a hras hé goalh ken ma oé stambouhet.  
Più a laro an traoù a oé bet dismantret  
Ged ar gomer, an déioù-sé ?  
Ha lard a oé kement neuzé  
Ma oé tostig rond èl ur voull.  
Mez trouz a glev doh ar vangoér  
Ha chetu hi é klask an toull  
Eid moned kuit ag ar sulér.  
An toull nen dé ket mui  
Frank awalh aveiti,  
Ha hi a dro hag a zistro.  
"Dré-man neoazh em-es paset.  
Emé-hi, n'en-des ket gwerso.  
Kredein a hran, n'em drompan ket."  
Ur rah, doh hé gwéled é poén,  
a lar "Perag boud souézhet ?  
Neuzé ho poelloù a oé moén  
Ha breman émant karget.  
Treut a oeh, me héh komer,  
A pe oeh deit ér sulér.  
Red é ma veèt treud  
Er méz a pe yeèt. »

Tennet a "Gwerzennoù Breizh-Izél." E. Le Strat.

## DISUL DE HANTER-NOZ

De yerhet (♩ = 103)

Na di-sul de han-tér-nos, O gé! O gé! Na di-sul de han-tér  
nos, Na di-sul de han-tér-nos, O! P'oe rah endud é re-poz.

1  
Na disul de hantér-nos  
O gé ! O gé !  
Na disul de hantér-nos ( Diù wézh )  
O !  
P'oe rah an dud é re-poz.

2  
P'oe rah an dud é kousked  
O gé ! O gé !  
P'oe rah an dud é kousked (diù wézh)  
O !  
Ne gleven mui grik erbed


3  
Ne gleven grik àr an douar  
O gé ! O gé !  
Ne gleven grik àr an douar  
O !  
Meid un éinig é kañal

(tennet a « Soñennoù ha Gwerzennoù Bro-Gwened »)

## GIRIOÙ-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

- 1-Teùenn tost d'  
Arcachon Brasted.  
2-A zo bet eskopti.  
3-El Gabriel.- 7 grek.- Gir  
ur hroédur aheurtet.  
4-Hugo direihet.- Un hoari  
eid gounid argant.  
5-Muzisian gañet én Italia.  
6-Madoù de ziwenn.- Tell  
én disurb.  
7-Nann saozneg.- Achi-  
mant é Londrez.- Mar-a-  
unan groeit é Santéz Anna  
8-A zo tost ! (daoù gir).  
9-Peb unan a ziwenn é  
hani.



### A-dreuz

- 1.-Parréz Paotred kañerion.- 2-Eid lakad an argant.- Un hantér a  
lodenn. 3-Elen distillet.-Glad boulhet àrdran.-Kalon laïk.- 4-Doned a  
hrei ur blantenn neué.-5.-Komans ar ribardenn.-Naon heb achimant  
6-Pesked a hra soubenn.- 7-Tamm ui saosneg.-ivl saozneg.-Kenso-  
nennoù é arriù.- 8.-Dibenn.-Unan ohpenn daoù.- 9-Mad de holhein.

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed :** 1- PYLA.- MENT.-2- LANDREGER.-3.- EL.-VIL.-NA.- 4.- UHGO.-  
LOTO.- 5- LULLI.- 6- GLAD.-EL TL.- 7- NO.-END.-RO.- 8.- EDAN-ARRIU.- 9-  
INOUR.

**A-dreuz :** 1- PLEUIGNER.- 2.- YALH.- LOD.- 3.- LN.- GLA.-AI.-  
4.- ADVODENN.- 5.- RI.- NAO.- 6.- MEILLED-RÜ.- 7.- EG.- OIL.-RR.-  
8.- NENT.- TRI.- 9.- TRAOÙ-LOUZ.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
degemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, boulhadurezh...



### KOPIADENNOU EN HO UNAN

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhou  
Entreprizioù  
Ne vern più...

### ENEZ GROE - Kambrou-ostiz(chambres d'hôtes)

*Digor a-hed ar blez*



3, Ar Leurc'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévroeg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzernevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E (chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigezh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herriéu - Jobig Le Guludog

Alfons Samson - P M Jéhanno

**KENSTRIVAIDEG VROADEL  
AR BAGADOÙ**

**BREST 2008**  
TERROR VINDICTAIS

**59° CHAMPIONNAT NATIONAL DES BAGADOÙ  
PREMIÈRE CATÉGORIE  
LE QUARTZ, BREST (29)**

Bodadeg Ar Sonerion, Centre Anzer Nevez, Boze, 56270 PLOEMEUR  
Tél : 02 97 86 05 54 - E-mail : contact@bodadeg-ar-sonerion.org

COMMISSION  
VILLE DE  
BREST

FAMILIA  
BREIZH

Dimanche  
17  
Février



**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982) N° ISSN. 0750.3326

Dépot légal 4<sup>ème</sup> trimestre 2007

**INTERNET** : [http //perso.libertysurf.fr/andoere](http://perso.libertysurf.fr/andoere) **E-MAIL** : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)


N° 104

an

DOËRIÉ

Priz: 4€

DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNEDE



Goueletenn TARA  
ér PORZH- MOR- AN ORIENT



SKOL-UEHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr


[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)

Festival INTERCELTIQUE LORIENT

Pays de Galles

1 au 10 août  
**2008**

Emvod Ar Gelted



KAMPING AR VEITERI VRAZ  
E KARNAG  
ho tigemer

Digoret a viz Ebrel de greiz miz Gwenholon  
Brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg komzet  
Pgz : 02 97 52 24 01 – Fax : 02 97 52 83 58.

## ROLL AR PENNADOU

KENT-SKRID	P. 4
KÉR GWENED A LAR "YA" D'AR BREZHONEG	P. 5
AR PRIZIOU É VRECHENN	P. 6
REDADEG DIWAN	P. 7
É MELRAND D'AN DÉ KETAN A VIZ MAE	P. 8
KAN AR BOBL É PONDI	P. 9
COOP-BREIZH EN ORIENT	P. 10 - 11
ISTOÉR AN ARMORIG	P. 12 - 19
DARVOUDOU DE ZONED	P. 20 - 21
LITORIENN AN ERMINIG	P. 22
TROIOÛ-LAVAR – AN ARAOGENN : GED	P. 23
DIVINADELL – AVEID FARSAL	P. 24
SONENN AR GARANTE	P. 25
GIRIOÛ – KROEZ	P. 26



Splilhenntig « Ofis ar Brezhoneg »

Kirieg é peb skrivagner aveid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéré

## KENT-SKRID : Kenderhel

« Ne bléget ket, jaméz... »  
El-sé é laré Winston Churchill d'ur ré yaouank a oé é chelaou dohton.

A-fed ar Vretoned, mar gouiér émant "pennoù kalet", red a vo dehé boud pennoù kaletoh hoazh. Ne gomzam aman nameid ag o yézh, ar brezhoneg. E 2 010, mar vennam gouarn biù ar yézh, édan 2 vlé enta, é teliehé boud desket ar brezhoneg de 20 000 a vugalé, revé studi tud é karg ag ar Rann-Vro.

Léna Louarn, Penn-Réneréz « Ofis-ar-Brezhoneg », a lar hi éh es 12 000 ar blé-man ér skolioù diuyézheg, ha ne vo ket ohpen a 14 000 é 2 010, de lared é 1,30 % ag ar vugalé ér skol, a p'en des 30 % én Euskadi. Mankein a hra 6 000 a vugalé, lesket ar vord an hent. Perag an diforh-sé pe vé gouied éma é kreskaad ar goulenn é-kever deskadurezh ar yézh ? Lod a lar éma vennanté ar Gouarnamant dalbéh éneb d'ar brezhoneg. Gwir é. Marsé eüé éma kani an dilen-


nidi (*élus*) é karg ag afériou ar vro. Gwir é eüé. Marsé éma or vennanté-ni. Patrick Devedjian en-des laret un dé « N'ho kleüam ket, hwi ar Vretoned. Goulennet grons hag é vo reit deoh. » Gast ! Hag é vehé'ta ar girioù-sé kouézhet én diskouarn tud bouar ?

Ged ar miz-man, miz ar voretz, éma deit méréd ha dilennidi neüé de rénein on tiér-kêr. Nen dé ket al lod muian anehé éneb de zDiwan na d'ar skolioù diuyézheg, med kentoh a du geté.

Deom-ni enta de voned devaté, ne vern péh liù politik o-des, aveid goulenn ma vo kreñueit, ha kresket, implé or yézh ér skolioù hag ér vuhé pamdéieg. Penaoz ? E Gwened hag é Pornizh, èl ma lénneët pajenn 5, éma bet sinet karta « Ofis-ar-Brezhoneg ». Digor é an hent d'an tiér-kêr arall. Mall braz é moned àragog tré ma ne vo ket ré zévézh.

An Doéré

## Kêr Gwened a lar « YA » d'ar brezhoneg.



Ti-Kêr Gwened

François Goulard, Mêr Kêr Gwened, en-des sinet ar Garta « Ya d'ar brezhoneg ». Ged al livé 1 (*niveau 1*) en-des kroget, de getan, é tri tra :

- Panneloù diuyézheg zo lakeit ar hentoù é voned pé é toned dré gêr.

- Léhienn Internet a zo pedéryézheg, ar brezhoneg par d'ar yézhou arall (150 pajenn).

- Beb blé é vé brudet kennadurioù é brezhoneg kiniget d'an oll dud, a beb oed, hag ar un dro é vé reit ur sekour argant ha dafar teknikel d'ar skolioù diuyézheg.

Kêr Pornizh, é Liger-Atlantel, en-des sinet ar memes garta. Perchans é vo arriüet é berr amzér ar hourz de voned pelloh hoazh én ur sinein al live 2 "Ya d'ar Brezhoneg".

## Staj Stumdi é gwénédeg é Pont-Skorv

Étré an 21/7 hag ar 25/7 a viz Gourhelén

Epad ur suhuniad é vo reit an tu de gomz, de zizolein Pont-Skorv tro-ha-tro...é gwénédeg. Skriü de : Stumdi Manér Keranden BP 311 29 413 Landerne Cedex Pgz : 02 98 21 39 94 – [bzh.stumdi@wanadoo.fr](mailto:bzh.stumdi@wanadoo.fr) - [www.stumdi.com](http://www.stumdi.com)

## AR PRIZIOÙ É VRECHENN

Kleüet on-es lared éh oé priz ar moh é tichenn ha ne gavé ket mui o zesaüerion an tu de hounid o buhé èl agent. Neoazh, p'en em gavér dirag staliou tiér-kenwerzh ne wélér ket ar prizioù é tichenn, é krapein kentoh, ur bamm ! étre 10 ha 44 % aveid ar morhed-hoh, épad an tri miz devézhan. Memestra aveid priz al léah ha produioù tennet anehon, al légumaj eùé, hag all...

Ar beizanted a lar éma ar goall ged ar supermarhadou hag ar ré-man a lar éma ged an uziniou. Pe vé goulennet ged ar ré-man hag ged ar ré-sé diskoein splann de béh chi-

## PRIZ AN ÉSANS EÛE

Piü en-dehé kredet é arriüe-hé ur varilhad (*baril*) petrol d'ar priz a 110 dollar ? Ha, revé spierion an ékonomiezh, ne zigresko ket.

An tregas brasan a zo ged ar besketerion. Deusto de bromèsou ar Gouarnamant é-mant atao é hortoz an harp a

frou-priz é vé prénet an traou, hag ar gounid a ya geté, é chomant mud. Penaoz displeg é hounid an entreprizioù kement a argant ?

Ar Gouarnamant en-des laret é kasehé ensellerion\* (*inspecteurs*) an DGCCRF aveid lakad muioh a réolennoù a-hed ar chadenn. Marsé, mez kemér a hra é lod éan eùé. An taosou a greska paodmad ged ar prizioù. François Fillon endes laret ne oé ket posubl digreskad an taosou.

Neoazh é vo red dehé, un dé bennag, d'ar prontan gwel-lan, en em lakad rah àr un dro eid ma vo gwélet ha digresket ar chadenn penn-der-benn....

rehé dehé an tu de hoarantein o michér. Chetu perag é té-gasant trouz. Ohpenn tregont a lestri-rouedér (*chalutiers*) a zo chomet heb labourad an déioù-man é Porzh-Pesked an Orient. Mall é implé nerzhioù neùé.

A nebeudigoù é arriüant....

## REDADEG DIWAN

Aveid an tregont vlé Diwan é vo aozet (*kempennet*) ur rédadeg anüet « A di de di » a 600 km. én ur dremén dré ar pemp départamant a Vreizh.



Ar rédadeg a guito an Naoned d'ar merhêr 30 a viz imbrill de 11 eur ½ d'an noz hag a arriüo de Garaez d'an 3 a viz mae.

Peb unan ag ar réderion a zalho ur vah-test hag a hrei ur « km ». éraog hé rein, a zorn de zorn, d'ur rédour arall. Ar vah-test a dreméno noz ha deiz be-

tag ma arriüo é Karaez. De beb unan ag ar réderion é vo goulennet geton 100 euro aveid ma hello rédeg é gilometr.

Aveid gouied muioh skriüet, pé pellgomzet de : **Diwan** Z.A. Sant-Ernel B.P. 14 29 411 Landerne Cedex Tél : 02 98 21 33 69



*D'ar Yaoù an Asansion, dé ketan a viz Mae :*

## UN DEÛÉZH É BREZHONEG É MELRAND

E léh Bubri, é Melrand en em gaveem ar blé-man de lidein un deùézh gloestret d'ar brezhonég, revé ar roll-labour :

- de 9 eur ¼ : **tolp-blé** Kevredigezh Bro-Ereg (Sal an "Ti-Pred La Tourelle", étal an iliz)
- de 10 eur ½ : **Overenn-bred** é iliz parréz. An Tad Méliáu Guillaume, person Melrand, hag an Tad Yann an Dorzé, a anaüam mad, a genlido an overenn. Rum-madoù kañerion Melrand/Bubri, àr un dro ged

"Boueh Santéz Anna" a sekouro de gañein.

- de 12 eur ½ : **Pred** kinniget d'an oll, ged soñennoù, d'ar priz a 20 euro (*ged an digor-kalon, gwin gwen, gwin ru ha kafé.*)
- de 15 eur ½ : un enderù "**Fest-Deiz**" a zeverrans é-trézom, ged soñennoù, sorbiennoù...Digor é vo eüé d'an oll.

Ur blijadur d'en em wéled éndro. N'ankouézhet ket kas ar folenn distag aveid ma vo merchet ho anù.....



*É Bubri, ar blé paset*

## Kan ar Bobl é Pondi

*D'an 12 ha 13 a viz Ebrel (Imbrill) 2008*

Roll ar henstrivadegoù (konkourioù)

### Disadorn 12 é Kastell Pondi

2 eur – 7 eur d'enderù	Salon al luderion	Digoust	ér Galerioù
3 ... 6 .....	Hoarioù breton	.....	Douvéziou
2 ... 3 .....	Laridé – Gavotenn	.....	Porzh
2 ... 6 .....	Soñennoù de gerzhed	.....	Salon inour
3 .....	Tro-valé ged soñennoù	.....	Porzh
3 ½ .....	Kanit 'ta bugalé	.....	Koban
4 ½ .....	Tud kar	.....	Galerioù
5 ½ .....	Emgav ged Albert Poulain	.....	Salon inour
5 .....	Skol muzik Pondi	.....	Koban

### Disadorn é Paléz ar Gouéliou

5 eur – 8 eur d'enderù	Fest-deiz	6 €	Réz an douar
8 .....	Pred ged soñennoù	12 €	Koban
9 .....	Fest-Noz	6 €	Rez an douar

### Disul àr leurenn Paléz ar Gouéliou

10 eur – 7 eur d'enderù	Marhad ar bodourion	Digoust
-------------------------	---------------------	---------

### F Paléz ar Gouéliou (dégemer eid 6 €)

A 11 eur de 8 eur de noz Strolladoù muzik - Soñennoù de zansal – Duo ha solo – Soñennoù de chélaou – Skolaerion – Fest-Deiz .....

De 8 eur : an disohoù (*Résultats*)

### Disul é Kastell

2 eur – 7 eur d'enderù	Salon al luderion	Digoust	Galerioù
3 ... 6 .....	Hoarioù breton	.....	Douvéziou
1 ... .....	Kontadennoù	.....	Sal inour
3 ... 4 .....	Skeudennoù bév	.....	Sal Schweitzer
2 ... 7 .....	Leurenn digor d'an oll	.....	Koban

♦  
Tro an daoù dé : salon ar hevredigezhioù, eskemm ha gwerzh benüegoù, stajoù dans...

## COOP BREIZH *én hé 51 blé*

D'an 30 a viz du, (*pé kalan-gouitañ*), 1957 éh oé dalhet, é Gwened, an Emvod en-des reit buhé de « Coop Breizh ». Kresket mad hé-des goudé.

Hé chifr-gwerzh a zo un nebeud ihuéloh eid 5 million euro, ha goprad a hra 29 a dud lakeit étre al léhiou-man :

- Coop Breizh é Kerangwenn 29 540 Spézet, léh ma vé kem-pennet an embannadurioù. Pgz : 02 98 93 98 00
- Coop Breizh 10, straed Maine 75 014 Pariz
- Coop Breizh 60, straed ar Porzh 56 100 An Oriant Pgz :02 97 21 22 17



Coop Breizh én Oriant

Kavet a vé én hé stalioù :

- Lévroù de zeskein ar brezhoneg (ged gériadurioù, yézhadurioù...)
- Lévroù de lénn (romantou, barzhonegoù, kontadennoù...) én o mesk ul lodenn vad aveid ar vugalé hag ar yaouankiz...)
- Bannoù tréset
- Kasetennoù, CD-ROM...a zizolo kañerion ar vro, én o unan pé ér rummadoù, bagadoù, soñennoù kanha-diskan...
- Danùeioù a beb sort, breizhat pé keltieg, bragerisoù, T-shirt, banniéloù Breizh...

A pe dreménet dré gér An Oriant keméret hent Coop Breizh, d'an 60, Straed ar Porzh (*rue du Port*). Azé é kaveët Ivonig ar Merdy, dalbéh dibrés kaer eid ho reseù én hé lévr-di. Ha surwalh, ged hé avizoù mad, é helleët prénein ar pézh a faota deoh.

An Internet [www.coop-breizh.fr](http://www.coop-breizh.fr), a-durall, a zisko éleih a draoù a hellér prénein.



Ivonig Ar Merdy én hé stal-lévrou

## ISTOÉR AN ARMORIG (KENDALH)

Mez émenn éh oé **bagoù ar Vénéted**, én ur ortoz an emgann ? Hag émenn en-doé dégoézhnet an emgann ? Kaezar n'el lar ket én ur féson réziz (*précis*); red é enta gobér sonjoù erhad aveid kennigein ur reskond jaojabl d'ar goulennou-sé.

Ar Vénéted a orté, a daol sur, én ul léh frank awalh ha sur é kevér oulennoù ar mor... ur morlenn enta ! Mez gouied a hram penaoz pleg-mor ar Morbihan ne oé ket hoazh krouizet, én amzér-hont : um grouizein en-des, a-nebedigoù, épad ar 4vet kantvleád heb kin, ged ar hemmadur dégoézhnet neuzé é ihuêlled an deur-mor. Stér an Intell a hellé sanset boud impléet èl morlenn, pe oé rekiz, mez ré bell a oé azoh beg al Ligér, ha riskluz a oé treuzein barrenn an Intell aveid bagoù dré ouél ker ponnér èl ré ar Vénéted. Ne chom enta aveid derhel ar ré-man én aior, nameid ar morlenn hag um lédé neuzé

ér léh anaüet breman èl **maréz ar Brière** : ar maréz a oé neuzé édan 5 pé 6 métradedeur, ha tost de zDarioorigum ha de gKorbilo...

Pe zéréüas an emgann-àrvor, é miz gwenholon ar blé 56 kent H.S., àrdro deg eur de vitin, éh oé kentoh kriù an aùél. Bagoù ar Vénéted endoé fardet enta àr ar Roméned, ha flastret, pé daoühantéret, lod ag ar ré tostan dehé. Kaezar, hag a oé é sell àr an aod, pignet àr lein ur votenn douar, a oé prest de goll kalon. Penaoz divagein (pé douarein = *débarquer*) é Breizh-Veur, mar ne za ket de benn a ziskar bagoù ar Vénéted ? Ha penaoz diskar gelloud an Armorigiz, diwennet èl ma dint é sòl o forzhioù-mor, goarantet ged kerreg skoselleg, doh un tu, ha ged motennoù ihuél, doh an tural !

Mez chetu **an aùél é koézh**, én un taol, marsé ged done-digezh an dichal, an dé-sé :

bagoù ar Vénéted a chom neuzé dinerh ha diziwenn, é kreiz an emgann. Ar soudarded romén a hell breman um daolein àr ar pikol bagoù vénétig, lan a varteloded heb kin. Marteloded ha n'o-doé ket geté na mein na biroù de lansein àr ar soudarded. Ar ré-man um geméré dohté, peb unan d'é dro, hanval doh bleidi tolpet én dro d'ul lon maheignet. Lod ag ar bagoù vénédig a oé bet èl-sé lakeit an tan énné, ged pillotaj in-tañet; ul lodenn arall, trohet dehé o fardaj ged felhiér staget doh goafou hir, a servijé de bratell-brezél aveid ar soudarded. Goed ar Vénéted a ridé enta a bouloù dru. Ar varteloded, kollet dehé o finans, um daol neuzé ér mor, unan àrlerh an arall : gwell a oé geté merüel béet ér mor kentoh eid boud tapet ged ar Roméned, ha gwerzhet goudé èl sklaved...Kentoh ar marù hiniù, ar marù abenn-kaer, eid an dizinour arhoazh ! Diskaret a oé bet èl-sé, én un

Deüézh heb kin, gelloud ar mor-lu vénétig, a pe guhas an héol, an dé-sé. Kaezar en-doé neuzé um daolet, ged é soudarded, àr ar gér-vamm, Darioorigum, tost de léh an emgann, é beg al Liger (èl ma kredam), ha groeit en-doé derhel ha lahein an oll sénatoured, kabluzein én é gevér. Ar baotred a oé bet tolpet ha cherret édan goard ar soudarded, aveid boud gwerzhet devéhatoh èl sklaved : èl-sé é vehé bet kresket trézol Kaezar...

Distrujet a oé bet, péchanj, rah an tiér, ha losket eüé kement tra ne hellé ket boud keméret ged ar soudarded. Palforsset a oé enta an oll Vénéted de zilézel léh ar gér-vamm, hag al léh-sé ne vo ket biskoazh adsaüet : béet é breman, d'em sonj, édan an deur, é sòl maréz ar Brière...

Me oui éh eus tud hag a gred penaoz an emgann-sé a zo dégoézhnet é kosté morlenn Kiberén, pé adal de Lokmaria-Kér pé gourinuz Rhuiz.

Mez kement-sé n'é ket gwirhanval, nag aveid ar Vénéted, nag aveid ar Roméned. Aveid ar Vénéted : perag lezel èl-sé o staladurioù (*établissements*) é beg al Liger, én o mesk o hérvamm ha Korbilo, étre daou-orn o éneberion ? Nag aveid ar Roméned : riskluz a vehé bet ruânad a-zebri beg al Liger betag kreiz bro o éneberion, rag ar Vénéted a oé ré-

nerion ar mor, hag é stad d'o distruj àr an hent, heb komz ag an diézemant o-dehé bet é treuzein embegadur ar Visnonia (*Vilaine*) ha divegadur kempér ar Morbihan (stériou an Alré ha Gwénéd)...

Me gred-mé enta éma dégouézhet an emgann é beg al Liger, pé ataù étre al Liger ha divegadur ar Visnonia, ha pas pelloh...



Arlerh an emgann-àr-vor, éh oé bet kaset diù lu de galon an Armorig, aveid torrein vennanté ar bobl de ziwenn o frankiz. Mez Kaezar ne lar gir erbed a-zivoud an hent keméret geté, nag a-zivoud o obéroù. Chom a hra mud eùé àr an dégemér reit dehé ér hérioù treuzet. Me gred-mé enta n'o-des ket gellat kerhed pell é kalon ar vro hag émant bet arrestet kent treuzein ar Visnonia. Kuiteit o-des péchanj an Armorig kent devé ar blé 56, goudé un tammig

foèterezh, marsé, é kosté Roazhon, éneb d'o énebour brasan é kreiznoz ar vro, Viridorig tiern an Unelled...

Neuzé é kerhas éndro Kaezar de gornadoù ar Morined hag ar Ménaped, ér Gallia Beljika, é kosté ar Rhein. Sonj a hré hoazh, me gred, treuzein Mor-Breizh kentéh ma hellehé, ha douarein ged é soudarded é Breizh-Veur, an Eldorado hoanteit geton aveid lañein é yalh.

Ar Prokonsul ne lar ket nitra a-zivoud gelloud an Armorig,

giz, **goudé diskar o mor-lu**. Troeit é, sanset, de nitra, mez kement-sé ne hell ket boud ar wirioné, rag chom a hré d'ar Vénéted, àrlerh an emgann kollet dehé, an oll bagoù hag a oé neuzé é navial étre an Armorig ha Breizh-Veur. Me gred-mé éh oent oeit de guh é porzhioù-mor Breizh-Veur, ken-toh eid boud dalhet ged ar Roméned...

El-sé é komprenam ésoh perag Kaezar n'en-dé ket bis-koazh deit de benn a zivagein, hag a zerhel, én inizenn veur, ér bléioù 55 ha 54 kent H.S., deusto d'é volanté ha de nerzh-brezel é soudarded. Lared a hra-éan penaoz éma bet féahet diù wézh dré ar goal-amzér ha dré bouillard ar mor ; me gred-mé en-doé bet afér eùé doh bagoù an Armorigiz, stalet é Breizh-Veur goudé emgann ar blé 56. An inizenn veur ne goézho ket enta édan yaù Rom, nameid ér blé 43 goudé H.S., é gré an Empelaer Claudius, kant vlé devéhatoh...

Kriù mad a chomé enta nerzh-brezel an Armorig, goudé an emgann kollet dehé, penn-dé-gwir é kemérezant hoazh perzh é 3 emgann àr zouar éneb d'ar Roméned :

- **ér blé 54**, éneb de 13vet léjion Lucius Roscius é kosté Exmés (*étal Argentan*), àr un dro ged ar gKarnuted, ar Sénoned, an Trévired ;

- **ér blé 52**, pe oé bet kaset 20 mil anehé aveid ansé dilouein Verkingétorig, dalhet é Alésia (*Alise-Sainte-Reine*), alas ! red a oé bet kilein adal de varhegion ar Jermaned, deit de rein an dorn de soudarded Kaezar ;


- hag **ér blé 51**, p'o-doé um lakeit a-du ged Dumniacos, tiern an Andékaved, éneb de zDuratius, roué ar Piktaned kevredet ged ar Roméned...

Tri ansé enta aveid torrein gelloud Kaezar, mez chomet a oé ar maout ged ar Prokonsul àr ar bratell-brezel, èl

ma ve-hé bet an douéed a-du geton. Féahet a oé enta an

Armorigiz, àr un dro ged ar hGalled.

### Chetu breman an Armorig édan mestroni Rom.



Armêioù ar Roméned é aratkaad pé oé Kaezar é arriu ged an Armorig.

**Kér-vamm ar Vénéted**, diskaret goudé an emgann-àrvor, a zo dilézet ged an oll. Hé léh a zo keméret neuzé ged ur gér-vamm arall, pelloh doh tu ar hornog, Darioritum, de lared é, ar gériadenn léhiet étal ur rodoué (ritum) étre mottenn Sant-Patern hag ar Mené, é kartér Sant-Patern avreman. Ha chom a hrei azé betag treboulou ar 4vet kantvleád goudé H.S.

Rénerion Rom ér Gall, goudé disparti Kaezar, a oé bet avizet mad é rein ur seblant kentoh dous d'o mestroni. Chom a hré peb broad (*peuple, tribu*) kazimant dieub (*libre, indépendant*) ged é lézennoù ha gizioù, a-dal ma oé péet an taosoù ha drougkénig (*tribut de guerre*) deliet. Kempennet a oé ur melesttradur é peb kér-vamm èl ma oé an traou é Rom, ha seùel ha hrézant temploù ha saùadurioù (*bâtiments*) mein aveid lojein mélestradur ar véléan hag ar varnerion.

An Drouized heb kin a oé goallgaset, dré ma ne vennt ket plégein de lézennoù an estrén, ha dré ma um gavent, marsé, ker sévennet èl béléan Rom, ha sévennetoh eid soudarded Kaezar. Lared a hré ar Roméned éh oé rekiz o dis-

kar, rag ma oent fall gelennerion aveid ar vugalé...

Ar "Pax Romana" (Péah Rom) a zalhas èl-sé épad tost de 200 vlé heb kalz a dreboulou, ha pinüidigezh ar vro um lakas de greskein. Ar Vénéted hag an Ossismed a zalhé de gomersein ged o henderüed a Vreizh-Veur, hag o marhadourezh a hellé breman diskenn d'ar Gall abézh ha d'an Italia hab diézemant, dré stéριοù ar Gall, al Ligér, ar Saône, hag ar Rhodanos (*Rhône*). Obéroù ar Mor-Médidouarel (gwin, ivl, potéüaj...) a zé eüé dehé ésoh eid agent.

Ohpenn kement-sé, ar Roméned pinüig, hag an ofiserion é retred, a bréné tachennoù vraz, hag a gempenné énné manériou mein-bén (*villae romanae*) a-kosté de lojelloù pri ha mottad an Armorigiz. Boud a oé kandou anehé àr ar wellan douarou, hag é kosté ar mor (èl é Karnag hag én Arradon). Ha boud a oé geté an hevelep ézémantoù èl é paléziou Rom : salou vraz, kambrou tuemmet dré an dan

ha kognelloù ged deur-rid (tuemm, mingl, ha yein), aveid plijadur an dud...

**An dud é kér**, hag ar varhadizion pinüig, a viüé gozig èl ar Roméned, um wiské èldé, hag a gomzé latin èldé, kentoh eid yézh ar bobl, ar gallig...Deit a oé enta an Armorigiz hag ar hGalled de voud "Romano-Galled". An douéed gallig a stagé breman doh o hanù, hanù an douéed romén, aveid boud anaüet hag inouret ged an oll. An doué "Mullo" a oé deit èlsé de voud "Mars-Mullo", hag an Intron-Veur dougeréz a oé deit de voud Vénus-Génitrix, é bro Bélisa (ar Beauce)...

**Kériou-vamm** an oll broadou en-doé keméret eüé hanù ar boblans nivérusan : Condate a oé deit de voud Roazhon (broad ar Riedoned), Condevicium a oé deit de voud an Naoned (broad an Namnéted), ha Darioritum a oé deit de voud Vénétes (broad ar Vénéted)...

Ardro de achimant an eil kantvleád (180-190), éh oé bet neoazh treboulet ar Pax

Romana ged un *emsañadur* (*soulèvement*) *én Armorig*, én arbenn marsé ma oé an tao-soù deliet de Rom ré ihuél aveid yalhoù ar ré beur. Red a oé bet neuzé tennein ul léjion soudarded a Vreizh-Veur hag hé dégas d'an Armorig aveid lakad an Armorigiz de blé-gein. E penn al léjion-sé, éh oé un ofisour breton a rank ihuél, hanùet « Artorius Castus » (= Arthur, pé Arzhur), deit a Eburacum (= York breman). Dougein a hré enta, aveid ar wézh ketan, un hanù hag a zelié doned de voud forh brudet devéhatoh.

Moned a hrei goudé de Ipatium, ér hKroatia a-vreman, ha merùel a hrei du-hont ér blé 184.

Penn-kaoz an treboulou-sé a oé donedigezh bandennoù dilézenn hanùet ar « Bagao-ded » : ur meskaj a beurizion ha ne hellé ket péin an tao-soù, soudarded dizarterion kuhet ér hoedegi, ha dianvé-zerion jermanig, kollet dehé o liammoù ged o henbroizion, goudé boud treuzet al « limes ». Skrapein a hrent rah ar

pézh a gavent, boud ha peb tra arall a blijé dehé...ha lahein a hrent heb trué più bennag a glaské diwenn é zantùé.

E penn ketan an 3vet kantvleád, éh oé deit ar péah éndro, hag ar vro a zallhé de voud kentoh pinùig ged labour an dud hag abilted ar varhadizion. Reit a oé bet mem d'an oll Galled, hag Armorigiz, an heveleb droedoù èl ar Roméned, é gré Caracalla (211-217). Mez an traoù en-doé kroget de fallad a-houdé donedigezh an Empelaer Septimus-Severus : boud a oé muioh a duemder hag a hlaù, ha bleinienn ar mor endoé um lakeit de ihuélad. Goleit a oé a zeur an douarou izélan, hag ar broadou stallet é kosté ar mor um laké de ziskenn trema al léhioù séh. Lod anehé a glaské treuzein ar Rhein ha doned d'ar Gall. El-sé éh oé bet lahet an Empelaer Trajan, é tiwenn al « limes » éneb d'ar Gothed, ér blé 251.

Kilein a hré enta ar soudarded romén adal d'ar Jer-

maned, doh tu ar hornog, ha d'ar Persed, doh tu ar Retér. Koéh a hras mem an Empelaer Valerianus étre daou-orn ar ré-man, ér blé 260, ha dalhet prizonér geté. Doned a hras neuzé an dizurh, hag ar brezél-diabarzh (*guerre civile*), ér Gall abézh. Ken dihelloud a oé Rom ma oé bet sakret èl Empelaer ar Gall ar jénéral gallig Postumus (261-263), hag, àr é lerh, Victorinus (268-270) ha Tetricus (270-274).

Koéhel a hras éndro ar Gall, hag an Armorig eùé, édan damani Rom é gré an Empelaer Aurelianus, ér blé 274, mez derhel a hré ar Jermaned de dreuzein ar Rhein. Ar Franked hag ar Frisoned, stallet àr aodoù ar Mor-Kreiznoz, a ziskenné eùé betag porzhioù-mor ha staladurioù (*établissements*) ar Gall hag an Armorig, én ul laerad kement tra a hellent skrapein, hag é lazhein più bennag a venné o ar-restein. Ar pézh ne hellent ket kas geté, én o bagoù skañv, a oé losket pé diskaret...

Er bléioù-hont, étre 275 ha 285, éh oé bet enta **revinet an oll manériou** saüet ker braù épad ar 100 vlé kent, èl ar ré stréuet àr aodoù ar Morbihan, ohpenn 40 anehé, étre ribloù ar Blanoèh ha ré ar Visnonia. Neuzé éh oé bet kuhet én douar un nivér mad a drezolioù, èl ar ré kavet é Mané-Véchenn, é Pléhéneg : 14 000 pézh-moné ag an am-zér-hont. Neuzé eùé éh oé bet dilézet an deur-dougér (*aqueduc*) hag a oent é seüel étre ar Bonnoù ha Rosnarhoù, é kosté Krah, aveid kas an deur-rid betag kériadenn Lokmariakér, ér blé 285.

E penn devézh an 3vet kantvleád, éma enta ar spont é speredoù an dud, hag um lakad a hrant de guidad o zier hag o douarou, én oll kornadoù tost d'ar mor ha d'ar stériou. An « Arvor » a za èl-sé de voud un dézerh, hag ar vizér um stréu àr ar ouriniz abézh, kollet dehi ul lodenn vad ag é foblans...

*De genderhel*

## DARVOUDOÙ DE ZONED DRÉ AR VRO :

### Buhé Dihun

Diêsoh diêz éh a an traoù é-tre familloù Dihun ha tud é karg ar skolioù, de lared é, eskobtioù Breizh ha rénerion an deskadurezh. Ne vennant ket anehé digor klasoù, pé skolioù neùé, na stummein kelennerion èl ma faotehé aveid dégemér mad ar vugalé.

Chetu perag é vo un tolpe é Kemper d'ar sadorn 29 a viz meurzh de 3 eur d'enderù, àr Blasenn Tour d'Auvergne, àr-dran Ti ar Léz-Varn.

Ohpenn tra, goulennet a vé, adal breman, de beb unan ahanom de skriù dehé eid ma

vo digoret grons frankoh an dorioù d'ar brezhoneg ér skolioù katolik.

E Gwénéed é hellam skriù :

d'an **Aotrou Eskob**. E chom-léh a zo : **an Tohanic Bihan B.P. 3 56001 Gwénéed**  
**Pgz : 02 97 68 30 58**  
[eveche.vannes@wanadoo.fr](mailto:eveche.vannes@wanadoo.fr)

Skriù eùé d'an **Aotrou Limouzin**, Réneur an **DDEC Ar Vinsin BP 196, 56005 Gwénéed Cedex**.  
**Pgz : 02 97 46 60 61 Mail : ddec56@ecbretagne.org**

### Stajoù :

#### **Ged Stumdi**

Ur staj é Plañvour, ag ar hetan a viz gwenholon d'an tregont a viz kalan-gouiañv (tri miz enta) a zo kinniget

d'ar ré a garehé implé ar yézh : kelennerion, kazetennerion hag a vennehé doñaad anaùedigezh ar yézh, an dud

dilabour en-des hoant gwellaad o brezhoneg ha kaved ur post labour diùyézheg...

Goulenn ur folenn enskrivadur de :

**Stumdi** – B.P.311  
29 800 Landerne  
**Pgz : 02 98 21 39 94**  
Mail :  
[bzh.stumdi@wanadoo.fr](mailto:bzh.stumdi@wanadoo.fr)

#### **Ged Skol an Emsav**

Ur staj, ag al lun 21 d'ar gwénéer 25 a viz ebrel (imbrill), a zégeméro ar stajidi é Roazhon 25, straed Pierre Martin, é kartér an Ti-Gar. Epad ar suzhun é vo kinniget pemp euriad ½ a stummadur brezhoneg, ged kentelioù étre 9 eur mintin ha 5 eur ½ d'enderù. Daoù gelennour a ge-

méro ar strollad é karg. Ar stajidi a zesko diazéioù ar yézh. Skriù de :

**Skol an Emsav 25, straed Pierre Martin**  
**35 000 Roazhon**  
**Pgz : 02 99 38 75 83**  
Mail : [sae.bzh@wanadoo.fr](mailto:sae.bzh@wanadoo.fr)  
[www.skolanemsav.com](http://www.skolanemsav.com)

#### **Yaou an erminig ged Skol Uhel ar Vro** (Institut Culturel de Bretagne) :

Ur blé-so, d'an 19 a viz mae, en-des an ICB digoret ur médiaoueg neùé, ha kinnig a hra breman prezegennoù (*conférences*) de beb yaoù devezhan ag ar miz de 6 eur d'enderù. Lénnerion « An

Doéré » a zo kouviet. Aveid gouied an dañé ag ar brezegenn ketan goulenn ged :

**Skol Uhel ar Vro** – Titouroù (*renseignements*) pajenn 2 « An Doéré ».

## LITORIENN AN ERMINIG



*Pan an erminig a zo gwenn épad ar goustañv, nameid é lost a chom du.*

Hed a hed ged é réderezh àr géin é jao, unan ag ar rouañé a Vreizh, Konan Mériadeg, a spias émesk mor-gwinizh, ur riolenn hag a vééré dousig é kreiz fozelloù fangeg, ur lonig hag a yé hag a zé ag un tu d'an tu-rall.

Souézhet braz, Konan a zalhas kentézh é jao hag a chomas de selled doh an draig-sé : ul lonig bihan, ged ur foulinenn gwenn èl an erh, a ridé devatoñ, ha goudé a glaské éndro saill adrest ar fang du. Eh oé àr ur barrig koed, ré hoann aveitoñ. Haval mad a oé en-doé kollet é benn é selled doh ar fang hirisuz-sé.

Ar roué Konan a spias neu-zé é saùé ar lonig-sé é zaoù-lagad devatoñ, èl pe vehé doh er pédein de rein sekour dehoñ.

« Perag enta éma ker spon-tet ar lonig-sé, ul lonig ken kaer ha ken dous ? Ha perag ne achap ket éañ d'ar prontañ ma hell ? » a houlenn éañ ged an ofisour a oé getoñ.

« O roué ar Vreizhiz, un erminig é ! Nen dé na goallet, na bléset, met vennein a hra chomel glan, pur ha digousi. Doujein a hra, eun en-des a gousi é sae gwenn-kann, én ur ansé treuzein ar riolenn-man. »

-« O burzhud kaer ar burted, ar glanded ! »

*Troéit ag ar galleg ged Mériadeg*

## TROIOU-LAVAR – An araogenn (préposition) **ged** –

*Arlerh ar verboù (passif) :*

Karet é ged an oll  
Ean a zo bet skoeit ged é vreur.

*Arlerh ar verboù :* arriù, dégouézh, goulenn, kemér, reseù, en-devoud, turel, boutein...

Droug erbed ne zégouézho genein.  
Ar peur, ma ne reseù genoh, n'en-devo mérenn erbed.  
Ar paotr a houlennas diù seienn ged é hoér eid brañad lost é jao kent eid moned d'ar foér.

*Arlerh an anùoù-gwann (adjectifs) :* un, mem.

Ema ag ar mem tu genoh.

*Ged eleih a droioù-lavar :*

Mar plij genoh  
Ne gav ket genein  
Kaset ho koutell genoh  
Lézet é vara geton  
Kerzhét ged ho hent  
Gwell a vehé genein kaved an diaoul àr me hent eid ur voéz mèuéz.  
Oeit é ar hignéz ged ar moalhi.  
Ged eun ne fariéhen a zor.  
Chetu arriù ur bleizh hantér varù ged an nan ; péh ur joé aveiton kaved un oén bihan !  
Kalz gwell `vehé genein gwéled bleu lann eid ar fréh kaer a zo é Rom ér gwé.



## DIVINADELL

Neijal a hrant, ha n'o-des ket diuaskell  
Rein a hrant amholoù, ha n'o-des ket korv erbed  
Skañv int pé ponnér, doujet pé hoanteit.

Lahein a hrant heb houarn na gléan  
Hag a saù a varù de viù an hani a zo marù.

Più int ?.....



## AVEID FARSAL

"Kollet e hues un dra bennag, Bejeb ?  
Ma ya, me alhué.  
Aman e hues ean kollet ?  
Un tammig pelloh merhad.

A ! Perag er hlasket hwi a-mañ neuzé ?  
Eleih splannoh é an traoù a-mañ. !"



Nen dom euredet nameid a-houdé eizh dé, ha deija é tet ken devézhat d'ar gér !

Ya, plijuz e gavan displég d'an dud én davarn pégen euzuz on-mé ged me fried.....



Fidél é ho ki bihan ahoel ?  
O ya, tèr gwézh em-es éan gwerzhet, ha tèr gwézh éma deit éndro.



## SOÑENN AR GARANTÉ

Ar ar pradeùier  
boud a zo bokètoù ;  
D'ar cherr-noz o hleuer  
é strèuein o frondoù :  
Boud a zo ré gwenn, ha ré glaz  
ha ré ru  
pampillet o biüenn ha liüet  
é peb tu.

Unan anehé a zo me boket mi :  
ged luskou karanté  
hunéal 'ran énni.  
Ar ar pradeùier, boud a zo bo  
-kètoù,  
Med hañi éndro dein  
ne gompren me luskou.

Ar volzioù an néañv,  
boud a zo stérennoù  
a wélér lan a dan  
é kaerded an nozioù.  
El daoùlagad guiù  
o gwélér heb achiù  
é hoarhed doh an douar.  
Unan anehé

a zo me stérenn mi !  
Ged kañvoù karanté  
hunéal 'ran énni.  
Ar volzioù an néañv  
Boud a zo stérennoù,  
met hani a wélan  
Ne gleù ket me hañvoù.

En tiigoù plouz  
boud a zo merhed vraù  
hag a viù ken didrouz.  
Met hañi n'o anaù.  
Hag o halon flour  
a ziviz solitoù;  
o spered frèu a vourr  
é hirrad o sonjoù.


Unan anehé  
a zo me flahig mi.  
Ged daroù karanté  
hunéal 'ran énni.  
Én tiigoù plouz  
boud a zo plahézed,  
met hañi ne valbouz  
é hoantad m'eurusted.

*Eflamm Koed Skau*

## GIRIOÙ-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

- 1-Lemel ar brankoù.
- 2-Kalon Roman.- A laras.
- 3-Amoedaj.- Dug dibennet
- 4-Dichal.- Permission.
- 5-Iran mesket, pé glaù é Londrez.- Intron Varia én Hen-Bont.
- 6-A greñva ar galon.-Let-trad an ostaleri.
- 7-Hantér évet.- Edan ar yar.-Stér Bro Brézil.
- 8-Azé en em dolo, beb sul, ar gristénion greduz. Lenn mañeioù Piréné.
- 9-Neué-hañv, kerklouz.



### A-dreuz

- 1.-Retornein.- 2-Liez éraog "Pro nobis".- Blé pe vé daoù.- 3-Boéh-ein.- Diù vogalenn kavet é "biù".-4- Un nebeud a amoedaj.- Hama ?
- 5.-Kranaj dibennet ha dilostet.- Magadur ar Japoniz.- 6-A réd ér hoedoù braz.-Klub football é Marseille.- 7-Vogalennoù ar héré.- Komans a hra toein.- Bokedoù kaer an hañv.- 8.-Peb unan en-des é hann, fall mar-a-wéh.- Mab ar yondr.- 9-An imur fall a zo geton..

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed :** 1- DIVARREIN.- 2- OMA.- EME.- 3.- SOTONI.- UG.- 4.- TRE.- AOTRE.- 5- RAIN.- RO.- 6- NERH.- NN.- 7- EV.- UL.- RIO.- 8.- ILIZ.- OO.- 9- NEUE-AMZER.

**A-dreuz :** 1- DISTROEIN.- 2- ORA.- VLE.- 3.- VOTEIN.- IU.- 4.- AMO.- NEUZE 5.- RANA.- RI.- 6.- IORH.- OM.- 7.- EE.- TO.-ROZ.- 8.- IMUR.- NI.- 9.- NEGENNOUR.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
degemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, boulhadurezh...



### KOPIADENNOU EN HO UNAN

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhoù  
Entreprizioù  
Ne vern plù...

### ENEZ GROE - Kambrou-ostiz (chambres d'hôtes) Digor a-hed ar blez.



3, Ar Leurc'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévræoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E (chèques libelles  
à l'ordre de Kevredigeh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herriéu - Jobig Le Guludeg

Alfons Samson - P M Jéhanno

## ROÑSEÐ-MOR

Lokoal-Mendon



07/05 GOBER E BREZHONEG  
evit ar vugale

07/05 FILAJ E BREZHONEG  
20H30 - 3€

08/05 CONCERT EGLISE  
TROUZERION  
ENSEMBLE BOMBARDE  
20H30 - 5€

09/05 SOIREE CABARET  
21H A 2H - GRATUIT

10/05 APERO CONCERT  
MADEO  
Bagadig LOKOAL-MENDON  
18H30 - GRATUIT

10/05 FEST-NOZ  
MADEO - BIG STAL  
BOTUHA GUINGO QUILLAY  
YUDAL COMBO - KARMA  
WIPIDOU  
21H30 - 6€

10/05 TROPHEE RONSED-MOR  
Soliste batterie - Biniou bombarde  
Pipe Bands - Ens. bombardes  
Danse Terroir vannetais  
TOUTE LA JOURNEE  
GRATUIT

AN DOERE : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépot légal 1<sup>er</sup> trimestre 2008

INTERNET : <http://perso.libertysurf.fr/andoere> E-MAIL : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)

N° 105

an

# DOÉRIÉ

Priz:4€

## DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED

### Écomusée de St-Dégan en Pays d'Auray





SKOL-UEHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, stradae an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)

Pays de Galles

1 au 10 août  
2008

Emvod Ar Geltae

Festival  
INTER CELTIQUE  
Lorient

Crédit  Mutuel  
de Bretagne

**LA** banque à qui parler

## ROLL AR PENNADOÙ

UR SPLANNADENN AVEID AR BREZHONEG	P. 4
DIWENN AN DOUAR, MAGEREZ AN DUD	P. 5 - 6
EKO-MUZEOM SANT-DEGAN	P. 7 - 8
UN DEUEZH KAER E MELRAND	P. 9
MARÙ HERRI MAHEÙ	P. 10 - 11
DARVOUDOÙ DE ZONED	P. 12
ISTOÉR AN ARMORIG	P. 13 - 21
MARVAILH AR ROUE GRADLON	P. 22 - 24
TROIOÙ-LAVAR - AN ARAOGENN : DOH	P. 25
GIRIOÙ - KROEZ	P. 26



Spilhennig « Ofis ar Brezhoneg »

Kirieg é peb skrivagner aveid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéré

## UR SPLANNADENN AVEID AR BREZHONEG ?

E ta an députeed de zigor al « **Lézenn-diazé** » (*Constitution*) d'ar yézhoù arall : ar brezhoneg, an euskareg, an okitaneg ha d'ar ré hanùet « yézhoù bihan, pé minorel » ! èl ma vehé, dré ar bed, yézhoù brasoh ha gweloh eid ar ré rall ...Deusto ma ne vo ket hoazh ar yézhoù-sé par d'ar galleg, revé al « Lézenn-diazé », èsoh vo breman, marsé, ma vo ar yézh :

- desket é rah ar skolioù, ar brezhoneg par d'ar galleg, Neuzé, an oll ahanom er gouï, éma èsoh deskein ur yézh arall, pé diù, pé tèr...épad ar bléioù skolaj a zo de heul.

- dégeméret, kalz muioh eid breman, àr ar radio, ha drestoll àr an télé. El é broioù én Europa é teliehé Breizh en-devoud ur chadenn télé penn-der-benn é brezhoneg.

- Impléet bamdé ér vuhé publik, én entreprizioù eùé. Grès de « Ofis ar Brezhoneg » éma, a nebeudigoù, ar

yézh lakeit breman àr ar panneloù, é meur a léh, él én tiér-kér.

- Komzet éndro étre an dud, àr ar mézoù, èl ér hérioù. E peb léh é teliam biùein heb poén ged hon diù yézh-vamm (*brezhoneg ha galleg*), ha deskein ur yézh a-rall, ahoél unan, ar saozneg, an alamaneg pé ar spagnoleg ...El-sé éma ged lod kaer a dud én Europa, èl ged ar Beljianeid pé an Néerlandiz.

Gouïed a hram breman endes ar Sénat bouéhet éneb kemmadur (*chanjemant*) al « Lézenn-Diazé ».

Red a vo hoazh péchanj lakad bézh aveid moned pelloh. Ne gollam ket kalon. Ar ré en-des saùet ar Skolioù Diwan, tregont vlé-so, a zo deit de benn. Più en-dehé kredet o-devehé bet 3.000 a vugalé hiriù, ha lakeit ar skolioù publik ha katolik moned àr o lerh ?.....

An Doéré

## DIWENN AN DOUAR, MAGERÉZ AN DUD



City of London. A vezul men dé ar hérioù é ledañad é tigresk an douar labouret.

Goudé an hantér-hant vlé devézh an en-des an douar labouret digresket a vezul men dé bet ar hérioù é ledañad, hag àr un dro éma bet an nivér ag al labourizion-douar deit de voud distéroh distér.

Epad an amzér-sé é vé an douar é kilein pasabl dirag lédanded an dézerh, drestoll én Afrika.



Koèdoù braz distrujet

Chetu chifroù hag a zisko splann penaoz éma an douar é tigreskad dré ar bed.

E 1 982 éh oé ér bed 10 % muioh a zouar labouret eid breman, épad ma oé poblans ar bed é kreskad.

Ne vo ket gwel an traoù a vezul ma arriùo ar bléioù de zoned : 25 % ag an douaroù labouret a vo diskaret.

Neoazh é kresko dré 60 % diovér an ed ér bléioù 2 020.

Présiuset an douar ! Eid grouinnad ha kreskad éma red d'ar plantennoù kaved 30 cm. édan o grouiad... En em vagein a hrant neuzé a vrennennoù organeg niveruz dé-gaset dré an deur.

Pe vé distrujet an douar-sé éma rekiz gortoz 50 vlé éraog kaved 1 cm. éndro, de lared é, 1 500 vlé eid adkaved 30 cm. Komans a hra an dud é karg ag afèrioù ar bed é sonjal éma mall braz dehé gobér àrdro ar gudenn-sé.



*Kempenn an Natur ged doujans.*

Petra a zo bet grocit betag breman ?

E 1 972 : ketan tolpe é Stokholm. Krouéet é roll-labour (*programme*) ar Broioù-Unañet

(*Nations-Unies*) a-zivoud an éndro (*environnement*).

E 1 992 : Eil tolpe braz é Rio de Janeiro. Azé é sin ar Broioù Unañet ul lézenn-diazé ar an adtoemmadur (*réchauffement*).

E 1 997 : sinadur ar « Reizhoù Kyoto (*Protocole Kyoto*) » aveid digreskad ar gaz-mougér (*gaz à effet de serre*).

E 2 007 : éh a Priz Nobel ar Peah ged Al Gore, hag ar ré en-des labouret geton, a-ziar « Kemmadur an Amzér ».

Prezégenn Bali en-des spi-seit petra gobér éneb d'an adtoemmadur.

Petra a hrém-ni ?

Jean-Louis Borloo, Ministr é karg an Ekoloji, a garehé chanj ar sell on-es ar vodell ékonomik, ha seùel un ékonomiezh hir-baduz, én ur respétein an "Natur".

An Doéré a gennigo deoh diù pé tèr pajenn én nivérennoù getan aveid ansé komprén ar hudennoù a zo doh or gortoz épad ar bléioù de zoned ha de ouied petra a hellam-ni gobér.

## EKO-MUZEOM SANT-DEGAN 56 400 BREC'H

### Ecomusée Saint-Dégan



Mar n'anaüet ket hoazh an «Eko-Muzéom Sant-Degan», étal Brec'h – 10 km. bennag a-zoh an Alré – gouarnet un enderù ag ho amzér ha kerzhet du-sé épad an hañv. Ni zo sur é plijo deoh ar valéadenn.

E kreiz ur pennhêr tiér-plouz é viueët buhé ar beizanted, èl ma oé gwézharrall, de lared é, betag àrdro ar bléioù 1950. Dré o labour pamdéieg é wéleët penaoz é viuent én o ziegezhioù, ar ar mêzoù, ha pe-

naoz é lakent bourrapted étrézé dré ar gouélioù hag o gizioù...

Chetu, évit skwér, ar pézh a gavéët :

- ar vuhé é korn an tan
- an dillad, ar pamdé hag él labour, ar ré aveid un euredenn, ar pardoñioù...
- penaoz gobér chistr, po-bein bara ér forn...



Malein avaloù

- ar benùigér impléet, én ti hag ér mēz
- glustraj : gwéléioù-kloz..
- ar poazhadur, èl penaoz dariù youd gwinizh-du...



Ha kant tra arall : kandennein panerioù, hoari boullou, killoù...ha koroll.

Emesk an dud a zo é toned éma ar vugalé ar ré souéz-

hetan. Pen dint ged o zadoù ha mammoù kozh nag a houlennoù a strimp geté !

Mad é enta de beb unan moned àr é hoar, ha gwell hoazh, mar bé tu, moned ged rah ar familh, ar ré vraz hag ar ré vihan.

An Eko-Muzéom a zo digor :

- épad miz Gourhelén ha miz Est a 10 eur de 7 eur de noz. De 2 eur ½ ha de 5 eur ½ d'enderù é vé kin-niget un dro-balé ged un dén ag an Eko-Muzéom.
- Epad miz Gwenholon ha Gouél-Mikêl (*Héré*) : bam-dé, nameid d'ar sadorn, a 2 eur betag 5 eur ½ d'enderù.

Aveid gouied muioh :

**Ecomusée de Saint-Dégan**  
56 400 Brec'h  
Tél : 02 97 57 66 00  
[www.ecomusee-st-degan](http://www.ecomusee-st-degan).

## UN DEUEZH KAER E MELRAND

- d'an dé ketan a viz Mé -

E kreiz borh Melrand, én ti-pred "La Tourelle" éh oé dé-geméret, ar blé-man, tolp-blé **Kevredigezh Bro-Ereg**. Abred mad aveid dé ur gouil, de 9 eur ¼, éma deit fidél an izili, koumananterion An Doéré, ha labouret o-des betag ma en em laké ar hléhiér de goui, a hlohadoù, ar Velrandiz de lañein an iliz-parréz. Deit zo bet eùe tud a barréziou arall, euruz de heuli an overenn-bred penn-der-benn é brez-honeg. Ged "**Bouéh Santéz Anna**", harpet ged kañerion Bubri ha Melrand, é saùé mélodiuiz kañennoù Bro-Gwéné.

Goudé an overenn éma deit, én ur heuli ur biniaouér é soñein, ur hantad a dud de bredein, oll àr un dro, ér "Salle Polyvalente", tost d'an iliz ag un tri hant metr ben-nag.

Na kaer ar pred ! ged soñennoù kaset ur wézh ged "**Bouéh Santéz Anna**", Adrien Collet, person braz An Alré, ér penn anehé, ur wézh arall ged unan ag an dud kouviet.



Kentézh arlerh ar pred endes kroget ar "**Fest Deiz**" a zeverrans, ged muzik de goroll, hag akordéon Pier Jéhanno, mēz eùe kañerion deit a Silfie. Bourrapted a zo bet tro an enderù.

Trugaré d'an oll a zo bet dijabl, a galon vad, èl berped, eid kas de benn an deùézh kaer-sé, én o mesk Josée ha Daniel Tanguy a Velrand.....



## MARU HERRI MAHEU



d'an 8/5/2 008 én é di, é Baod.

Deit é ar marù de glah Herri Maheù d'ar yaoù 12 a viz Méhuenn (*Even*) én é di é Pont Malo é Baod. Nivéruz a oé é vignoned éndro dehoñ hag é familh é heuli an overenn-intermant lidet én iliz Intron Varia ar Sklérdér.

Gañet é Gwenin d'an 31/7/1921 desket en-des ar galleg ér skol hag, èl de lod brasan ar skolaerion én amzér-sé, éma bet diwennet dohton a gomz é yézh-vamm, ar brezhoneg.

Deusto d'an dra-sé en em lakad a hrei de zeskein lénn ha skriù ar brezhoneg ha, goudé, de seùel kentélioù é brezhoneg :

- é 1942 é Logonéh
- kentéh àrlérh ar bléioù 1950, é Begnén
- hag éndro é Logonéh

A pe ouiér pegen diéz a oé d'ar ré en em laké de ziwenn sévenadur Breizh d'ar prantad-sé éma un dra splann éh oé Herri Maheù un dén kaloneg hag ur brogarour dreistpar.

Herri Maheù a zo bet ag ar ré getan a du de seùel or gevredigezh Bro-Ereg ha de genlabourad én hé dastumadenn « An Doéré ».

Saüet en-des ur « Priz Herri Maheù » eid ma vehé bugalé skolioù Diwan, hag ar ré diù-yézeg, desket de skriù barzhonegoù é brezhoneg ged sekour o mistri. Liéz a wézh en-des « An Doéré » emban-

net barzhonegoù kaer tennet ag ar ré a oé bet dibabet.

A-fed é vichér éma bet de getan mestr-skol én Alré hag é Begnén. Mèz kentéz àrlérh ar brezél, é 1945, é saüas un entrepriz-masonerezh é Baod deit de voud brudet dré ar vro. E ampertiz a zo neuzé anaüet ged tud a vichér, ha galvet a vo de gemér ul léh ér « Gambr a Gomerz » ag ar Morbihan, èl dileuriad konsul (*délégué consulaire*). Ean a vo eüé ézel ér "Burev Masonerezh ar Morbihan", ha mélestrouer an "Unvaniezh an entreprizioù" ag ar Morbihan.

Un dén a sport a oé hoazh. Saüet, pé kenlabouret en-des de seùel meur a gevredigezh sport : Klub Sport Baod, Unvaniezh marh-houarnour, kevredigezhoù hoari boullou, paletou, Vélo-Klub-Pondi,... ..hag all...

El Penn-Rénour « Ti an Douristed » (*Syndicat d'Initiative*) en-des éan diwennet ar glad é peb féson : tiér ag ar ré garran de reneüééin, chapé-

lioù, fetañioù...Dré é « Haier Bro-Baod » é ré harp de sévenadur or bro é korn Bro-Baod.

El ézel « Skol Uhel ar Vro » (*Institut Culturel de Bretagne*) hag èl Penn-Rénour « Breizh Santél », épad bléiadoù, éma deit Herri un dén a bouiz dré ar vro abézh.

Reseüet en-des èlsé « Tro-Goug an Erminig » (*Collier de l'Hermine*) é 1998 hag hanüet « Marhégour an Arzoù ha Lihérioù » (*Chevalier des Arts et des Lettres*).

Betag achimant é vuhé, deusto d'an diézemantou krogget énonn - ne welé ket mui kalz a dra, ha klañv braz a oé é galon - éma chomet eüézhuz de zarvoudou tré de verchein buhé é genvroiz .

D'é familh ér glahar éh a or sonjoù karantéuz. Kendalh a hreem ged al labour a hré Herri Maheù a galon aveid ma en em gavo ar Vretoned sévenet hag euruz én o bro.

A. Samson

## DARVOUDOU DE ZONED

### Perhinded Santéz Anna d'an 26 a viz Gourhelén :

El beb blé breman, de 9 eur é vo kañet un overenn é brezhoneg. Deusto men dé ken a-bred é plij braz d'ar vrezho-

negerion en em gaved oll àr un dro én inour de Santéz Anna, én o mesk, surwalh, tud an Doéré.....

### Gouélioù étrékeltieg én Oriant (an 38 vet) :

Ar blé-man é vo tro Bro-Gembré de voud inouret épad ar Festival. Komans a hrei ar Gouélioù d'ar gwénér ketan a viz est hag é achiùo an deversansoù d'ar sul 10. Un overenn é brezhoneg a vo lidet an dé-sé é iliz Sant-Loeiz.

Eleih a draoù plijuz a vo de wéled, de chelaoù, de dañoad. Aveid gouied petra a vé kinniget, goulenn ged :

**ar Festival Etrékeltiek  
8, ru Nayel 56 100 An  
Oriant. Pgz : 02 97 64 03 20.**

### Stajoù : “Gobér é brezhoneg” ged Gevred :

Etré an 28 a viz gourhelén (*gouere*) hag ar hetan dé a viz est é vo dalhet an 8vet staj-hañv Gevred é Bi(z)hui-an Deur.

Pal ar suhuniad-sé a zo gobér ha biùein é brezhoneg én ur darempredein tud ar hornad, brezhonegerion a-vihan : prezennoù de vitin, labourioù a beb sort d'enderv, èl

kañein, netad lenn ur vilin, pobein, keginin, seùel murioù mein séh..., filaj ha festnoz de noz.

Dégemér é ti “Rondplume”, é Bi(z)hui, étal ar Blañoeh.

Priz ar staj : 170 euros – Tud dilabour ha studierion : 140 euros.

Ged Gevred : 02 97 02 17 73

Postel : [gevred@laposte.net](mailto:gevred@laposte.net).

## ISTOÉR AN ARMORIG (*kendalh*)



(tennet a livr *La Bretagne et les Bretons* J. Cornette p. 89)

Gwellad a hra neoazh an traoù, un tammig, ged done-digezh ar gelloud é Rom étré daoùorn an Empelaer Diokletianus (285–305). Diskar a hra ar “Rouantelezh Breizh” hag a oé bet saùet ged Karausius aveid unañein ha diwenn an inizenn veur éneb d'ar Franked ha d'ar Saozoned. Komprenn a hra éh oé an Empelaerezh abézh ré lédan aveid boud diwennet a-féson

diàr ur gér-vamm heb kén. Rannein a hra enta an oll én dro de ziù rann-vro, Rom d'un tu, ha Byzans d'an turrall, peb unan aneché édan bili un Augustus hag ur hKaezar.

Kempennet é eùe ur post mestroni heb kén aveid rénein diwenn an oll aodoù, é Breizh-Veur hag ér Gall, a-zebri porzhioù-mor ar Belgig betag ré ar Armorig, an “Tractus Armoricanus et Nervicanus”.

Ha lakeit é Carausius ér penn anehon, èl “Dux Britanniae” (Ofisour jénéral Breizh-Veur) édan bili ar “Prefectus Galliarum” (Prefed ar broadoù gallig).

Neuzen eùé éma bet saùet mangoériou ihuél én dro d’ar hériou vrasan, èl é Venetis (an hanù reit breman de zDarioritum), de Roazhon (an hanù reit de gCondate), d’an Naoned (an hanù reit de gCondevicnum), de Alet, de vMoutroulez, de vBrest, de Yaudet...

Ar Roméned a za èl-sé de benn, é gré an Empelaered Constantius-Chlore (303-306) hag é vab Constantin-Meur (306-337), a zégas éndro ar péah ér vro, ur péah hag a zall heb ré a zroug betag kreiz ar 4vet kantvleád.

Mez chetu éndro an dispéah hag an disurh, - é gré an Empelaer Maxentius (350-353) - ged distro an alouberion, a vandennoù nivéruz. Diskaret é dehé porzh-mor Brest, ha rekiz é mad d’ar Roméned

dégemér lod anehé èl pobloù kevrédet (*associés, alliés*), hag um chervij anehé aveid tãlein doh ar ré danjerusan. Rekiz é eùé dégas d’ar Gall al léjionnoù soudarded stalet neuzé é Breizh-Veur.

El-sé éma dégaset àr ribloù ar Rhein an “**Dux Britanniae**” **Maximus**, groeit Empelaer dré é soudarded ér blé 381. Lakad a hra é gér-vamm é Trèves, ha féahein a hra an Empelaer gwirion Gratianus é kosté Lutetia (Pariz, breman) ér blé 383. Ar chonj a za neuzé dehon d’um gemér eùé doh an Empelaer a gKonstantinopl, Théodosius, mez féahet a vo é Aquilia ér blé 388, ha lakeit d’ar marù. E soudarded breton (a Vreizh-Veur) a chomas ér Gall àr é lerh, revé Jordanès ha Sant Geltaz. Stalet àr ribloù al Ligér, - hag é mar a gornadoù arall, ér Gall -, ind é, péchanj, a zo bet «germen plantationis» ar Vretoned én Armorig, revé komzou Sant Geltaz...Kronig Sant Brieg a lar dem eùé pe-

naoz éh oé deit, ged Maximus, un ofisour breton a rank ihuél hanùet Kynan-Murdoch (Conan-Mériadeg, é brezhoneg), ur brezélour karget, aberzh Maximus, de zerhel an Armorig é péah. Ean é ’zo bet, sanset, ketan roué an Domnonéa én Armorig. An hanù-sé a oé bet reit dehi én arbenn ma zé Conan a gornadoù an Devon, é Breizh-Veur...

’En atretan, stad ar vro a zé de voud gwazhoh-gwazh. E Nendeleg ar blé 405, an amzér a oé bet ker yein, ma endoé skornet an deur é stér ar Rhein, ha ma en-doé gellat ar Jermaned (ar Suéved, an Alaned, ar Vandaled) treuzein al “**Limes**” (*de lared é : harzou an Empelaerezh, é latin*) heb poén erbed... “*Ar Gall abézh a zo intanet èl ur oleüenn rousin*”, a laras ar skrivagnér Orientus. Ar bandennoù alouberion a dreuzé douarou ar Gall èl ma karent, hag um stalein a hrent é ne vern péh kornad-bro.

Ar jénéral romén Stilichon, - hag a oé bet gwézh-arall un ofisour é paléz Attila -, a oulenn neuzé ged an Dux breton Konstantin dégas rah é soudarded d’ar Gall aveid sekour geton salvein an Empelaerezh. Konstantin a ziskenn enta, ged é eil ofisour Gerontius, de embegadur ar Rhein, hag a za de benn - ged sekour ar Frank Edobinc - a lakad ar Vandaled hag an Alaned de gilein. Seùel a hra èl-sé ur rouantelezh dieub ; ar gér-vam a zo én Arles (ér blé 408). An Empelaer a gKonstantinopl, bourdet é lu adal d’ar Slaved ér manéiou Balkan, a chom digas, de getan. Mez doned a hra nerzh dehon é kourz un herrad, ha tapein a hra Konstantin ér blé 411. Achiù a oé istoér an 3vet Empelaer breton...

Epad hantérad ketan ar 5vet kantvleád, ar Gall en-doé um gavet rannet é pemp lodenn : pedèr anehé étré daouorn ar Franked, ar Burgonded, an

Alamaned hag ar Vizigothed; ar 5vet, tro-ha-tro d'an Armorig, a chomé sanset édan bili Prefed ar Gall, rag ma oé lan a soudarded romén é porzhioù-mor hag ér hérioù vrasan. Ar soudarded-sé a oé, liéz mad, tennet ag ar poblansoù jermanig; "Léted" a oé groeit anehé. Mez an Armorig, èl Breizh-Veur, ne oé ket mui sentuz de helloud politig Rom, ha kempennet hi-doé un emrénerezh\* (*autonomie*) gwirion, èl an Domnonéa a-houdé donedigezh Konan Mériadeg... Atàù éh oé koézhnet Rom eùé édan mes-troni ar bandennoù jermanig.

Devézhan soudarded Rom a oé, én amzér-hont, ar ré deit a Vreizh-Veur ha stalet én Armorig, hag a stourmé édan bili ar Préfed Aëtius (408-454). Hennen en-doé klasket kastiein ar gérioù emsaüet (*soulevées*) én Armorig ha kaset en-doé éneb dehé ar Vandal Eokarig, mez arrestet a oent bet ged Germanus, un

ofisour braz deit de voud eskob é Auxerre. Diskenn a hré an dén-sé a Vreizh-Veur, goudé boud diskaret goall-gredennoù\* (*hérésies*) ar menah breton Pélagius hag a bredégé penaoz frankiz mab-dén en-doé muioh a bouiz eid ar hrès, aveid gounid ar salvédigezh.

E kreiz ar 5vet kantvléad, éh arriù neuzé Attila, roué an Huned, ér Gall. Anaüet a oé èl "flagellum Dei"; de lared é, "freil Doué" é latin. Aëtius a zo hoazh kriù awalh neuzé aveid kevrédein an oll soudarded strèuet ér Gall – roménéed ha barbareed – hag aveid o has de risklein o buhé éneb de Attila. Kerzhed a hrant enta, oll àr un dro, ged ar Vretoned hag an Armorigiz, àr pratell-brezél ar Champ-Katalaunig (ér blé 454), ha lakad a hrant ar Huned de guitad ar Gall, én ur lezel, àr o lerh, un nivér divent a soudarded marù.

E toned éndro d'an Armorig, goudé an emgann, tiern

braz an Domnonéed, Aldroen, ar 4vet goudé Konan Mériadeg, a gav soudarded Eokarig àr é hent é kosté flandrenn al Ligér. Um daolein a hra àrnehé ged é dud, hag o lakad a hra de blégein dehon. En arbenn a gement-sé é vo hanüet goudé « Roué ar Vretoned hag an Alaned »...

Goudé marù Aëtius, ér blé 454, gelloud Rom a ya de Aegidius (454-464). Hennen a za de benn, ged sekour lu ar Vretoned hag an Armorigiz, a lakad Franked Childérik de gilein éndro a flandrenn al Ligér betag ar Somme. Azé é chomeint bourdet, betag ma varüo Childérik, ér blé 481.

Stad Breizh-Veur ne oé ket kalz gwelloh, én héveleb prantad. Arlerh disparti an devézhan léjionoù romén, ér blé 407, deit a oé an inizenn veur de voud dieub grons azoh Rom, mez afér hi-doé doh danjérioù braz. Soudarded an Empelaerezh n'endoé ket biskoazh féahet a-

grén, nag ar Briganted ha Piktéd (é kreiznoz ar vro), nag ar Skoted (doh tu an Iwerzhon), stalet é meur a gornad a vro-Gembré. Fardein a hrent rah, breman, àr peurkeih poblansoù an inizenn, dijablet ag hé diwennerion.

Ar rouantelezh neüé diazéet é kreisté ar vro - én Devon hag é Kernow -, a oé édan mestroni Vortigern (*Vor+tiern de lared é « Roué Meur »*). Goulennet en-doé ged Empelaer Rom, Honorius (395-423), doned hoazh de sekour geté skarzhein ar Piktéd hag ar Skoted ér méz ag an inizenn. O goulenn a zo anaüet èl ar « Gemitus Britanniae » (*Huañadenn Breizh-Veur*) mez Rom, hantér taget dija, ne hellé ket mui rantein sekour de hañi.

Vortigern en-des bet neuzé, ér blé 430, me gred, ar chonj a enrollein ur vandennad Saozon aveid sekour geton skarzhein an éneberion. Eneb d'al labour-sé é ré dehé an droed

d'um stalein én un inizenn vihan, é kosté aodoù ar hKent.

De getan é sentas mad ar Saozoned de hourhemenoù ar Vretoned mez komprenn a hrezant fonnabl éh oent kriùoh eid o mistr ha doned a hras enta dehé ar sonj a vestroniein an inizenn veur abézh aveité o unan.

Lod ag ar Vretoned, ar ré hag a chomé hoazh fidél de lézennoù Rom, a demallas neuzé de Vortigern en-devoud treiset é dud, hag um seùel a hrezant éneb dehon ; é penn an emsaùadur (*soulèvement*) éh oé un dén a noblans ihuél hanùet Ambrosius-Aurélianus. Epad un herrad é chomas Vortigern ar mestr, ha red a oé bet de Ambrosius-Aurélianus kuitad é vro ha treuzein ar mor betag an Armorig. Neuzé en-doé, me gred, um dennet de bPlaoдрén (*Ploe-Aldroen*), àr ur votenn anaùet breman èl Mangolérian (= *mangoér-Aurélian*). Aldroen a oé neuzé tiern-braz

an Domnonéa, ha saùet endoé ar gériadenn hanùet Kastell-Aldroen (*Chatelaudren*). Kaset en-doé é vab Kontantin de Vreizh-Veur aveid stourmein éneb de Vortigern.

Neuzé é tégouézh afér Attila, hag emgann braz ar Champ-Katalaunig, ér blé 451. Un nebeud bléioù goudé, éma Ambrosius-Aurélianus éndro é Breizh-Veur, hag éma féahet Vortigern. Ambrosius-Aurélianus a gemér é léh a dTiern-Meur, hag a grog éndro de vrezélad éneb d'ar Saozoned. Ar ré-man a zo enta palforset de gilein adal d'ar Vretoned, ha brud an Tiern-Meur a ya betag Rom.

Pédet é neuzé ged ar jénéral romén Stilichon, é gré an Empelaer Anthémios (467-473), de ziskenn d'ar Gall aveid stourmein éneb d'ar Visigothed, àr un dro ged ar Roménéed. Diskenn a hra enta d'an armorig, hag heuli a hra al Ligér trema kornad ar Bituriged (*ar Berry, breman*), ged ar sonj a ortoz azé done-

digezh ar Roménéed éraog fardein àr lu ar Visigothed.

Alas ! ar soudarded Visigoth um daol abenn-kaer àr ar Vretoned é Déols (ér blé 459), hag ar ré-man a zo red dehé kilein, hag um dennein de zouaroù ar Burgonded, kevrédet èl-dé ged Rom.

Istoér an Tiern-Meur-sé, hanùet Riothamus, a zo anaùet dem dré skridoù Sidoine-Apollinaire, eskob Clermont ; ha gouied a hram breman penaoz Ambrosius-Aurélianus ha Riothamus a zo an héveleb dén. Trugéré de Léon Fleuriot (*Les Origines de la Bretagne*)...

Neuzé éh es ur gogusenn tioél àr istoér an Domnonéa : moned a hra kuit an tiern Aldroen, heb ne ouiér perag na pegourz, hag un dianvézour hanùet Eusébius a gemér é léh é Gwénéed...kent boud didronet, éan eùé, devézhatoh, ged Riwal, mab Aldroen...

Mez arriù a oé neuzé ar blé 476, ha keméret a oé bet ar

gér a Rom ged Odoakr, a ouenn jermanig ar Skyred (476-493), ha didronet a oé bet Romulus-Augustus, devézhan Empelaer Rom. Achiù a oé Empelaerezh Rom aveid mad, ha dieub a oé enta éndro ar Gall hag an Armorig, goudé 5 kantvléad treménet édan bili ar Roménéed...

Aveid klozein istoér an Armorig édan bili ar Roménéed, é telian eùé lared ur gir azivoud donedigezh ar gristeniezh d'ar vro. Deit a oé ar gristéniezh d'ar Gall kentézh èl an eilvet kantvléad, é gré an eskob Pothin ha santéz Blandine, martiret é Lugdunum (*Lyon*) ér blé 177. Boud a oé eùé kristénion én Armorig épad an 3vet kantvléad, rag martiret a oé bet an daoù vrér Donatien ha Rogatien én Naoned, ér blé 299, é gré an Empelaer Diokletianus (284-305).

Hennen en-doé rannet an Empelaerezh abézh é pedèr lodenn, èl ma ouiér, ha peb

unan anehé é 2 pé 3 « Diocésis » én dro d'ar hérioù vrasan. Unan anehé a oé Tours, an 3vet « diocésis » é rann-veur Lugdunum (*Lyon*). Ar fé um strèuas èl-sé a-zebri Lugdunum betag Tours, é gré sant Martin deit de voud ketan eskob Tours, ér blé 371, hag a-zebri Tours betag kornadoù an Naoned, Gwénéed ha pelloh én Armorig.



Fetan Sant Patern é Gwénéed

Sant Klaer a oé bet, sanset, ketan eskob an Naoned, ha merùel a hras é parréz Réguiny, tost de Bondi. Ketan eskob Gwénéed a zo bet, pechanj, sant Patern, eskobet épad kenvod\* (*Concilium*)

Gwénéed, ér blé 465. Emesk ar gristénion brudet ag an amzér-hont, é teliér hanùein eùé sant Albin, genedig a gornad Gwennrann, ha sant Melaine, genedig a gosté Gwénéed, ha deit de voud ketan eskob Roazhon.

Ar gristéniezh en-doé um strèuet eùé é Breizh-Veur a-houdé ar 4vet kantvleád, rag gouied a hram penaoz éh oé bet azé ur vandennad tud dédenet de gredennoù direizh Priscillien (300-385) ha de ré ar Breton Pelagius (360-422).

Iliz Rom en-doé kaset duhont Germanus, eskob Auxerre, ha Loup eskob Troyes, aveid dijablein Breizh-Veur ag ar fall-gredennoù-sé (ér blé 429). Geté éh oé eùé, me gred, ur helennér brudet, sant Ildut, kempennér ur skol-meneh é Llantwit (=Lanildut), ur skol hag a zelié deskein ketan eskobed breton an Armorig, ar sent Samson, Paul-Aurélien ha Geltaz...

A-fed, ar gristéniezh é Breizh-Veur, en-doé heuliet

daoù hent : de getan, an hent sentuz de iliz Rom, ha d'an tu-rall, hent an navierion ha marhadourion britannig, hag en-doé darempredoù, a-houdé gwerso, ged o ostizion én Azia-Tostan, drest-oll é Alexandria. Dégeméret a oé bet èl-sé, é Breizh-Veur, krédennoù ha lidoù tennet a gristéniezh ar broioù-hont, dishanval un tammig doh ar ré strèuet ged eskobed Rom.

Ha lod ag ar Vretoned deit d'an Armorig, goudé brezeliou Maximus, Constantinus hag Ambrosius-Aurelianus-Riothemus, en-doé dégaset geté ar hredennoù ha lidoù-hont. Dégeméret a oent bet eùé, merhad, é menatioù Landévenneg ha Rhuys.

Ne oé ket braz an diforh étre an diù stedad kristénion, rag eskob breton ar soudarded én Armorig a geméré perzh, heb droug-kalon erbed, é kenvodoù (*congrès, conciles*) ketan an eskobti é Angers (453), é Tours (461), hag é Gwénéed (465).

Mez, goudé ar blé 465, éh eus bet un nebeudig treboul ha disent étre an iliz « keltieg » hag eskobed Tours, rag ne wélér ket mui eskob erbed a vroioù an Ossismed hag ar Vénéted (deit neuzé de voud an Domnonéa), é kenvodoù Orléans (511 ha 533), nag é Tours (567).

Gwir é penaoz an eskobed Melaine (a Roazhon) ha, heb arvar, Patern (a Wénéed), en-doé kaset ul lihér, àrdro d'ar bléioù 510-515, de zaoù véleg pé menah, Louocat ha Catihern, aveid goulenn geté dilézel ar gizioù kozh, ha plégein d'ar ré gourhemennet ged iliz Rom...

El-sé enta éh oé an traoù é penn devézhian ar 5vet kantvleád hag é bléioù ketan an 6vet kantvleád. Hadet a oé bet ar fé én Armorig neùé, ha deit a oé dija de voud ur wéenn vraz. Diskaret a oé bet sévenadur Rom, mez ur sévenadur arall a oé prest de seùel ha de vleùein...

*Loeiz ar Mouël (de genderhel)*

## MARVAILH AR ROUE GRADLON

A pe oé hoazh floc'h you-ankig, é manér an Aotrou meur Witor, éma bet tennet Gradlon a gosté, rag m'endoé kavet ré vraù ar gasteliadéz. El ma kavé joé ha konfort é jiboésad, éma bet kaset betag ur feutan sklér. Ur gorrigañéz en em guhé azé ! En em ziskoein a hra d'ar floc'hig youank.

Ker koant a oé èl ur gorrigañéz ! Ez eroalh en em laoskas ar floc'hig d'hé heuli èr hoed braz, ha beb noz de gemér é blijadur ged ar sorse-rión ! Mez diwennet grons a oé bet dehoñ dizolein ar sekred ! Neoazh éma bet vré, largantéuz ar gorrigañéz aveitoñ : reit hé-des dehoñ ur jao burhuduz, armaj argant filimet. Hag èl-sé en-des digoret divréh ha kalon Witor !

Un nozeh, goudé treboulezur ur chervad a bouéz, Witor a zisko d'an oll, àr ur leurrenn, braùité hé vouéz, én ur zifiein an oll de lakad dirag an daoulagad ur vouéz ker

koant. Mèu èl ma oé, Gradlon en-doé ankouéhet é bromès d'ar gorrigañéz : diskléiein a hra é anaù ur vouéz hag a saù adreist an oll groagé dré hé braùité ! Gourhemennein a hrér dehoñ hé diskoein ! Ha éan de rédeg d'ar feutan, ha éan de halùein kriù, aveid ket ha nitra ! Diwennet a oé bet dohtoñ a lared hanù ar gorrigañéz : kollet é hi aveitoñ !

En ur wéled Gradlon é toned éndro én é unan, ér sâl vraz, éma kounnaret an dud a oé doh taol, ha tennein a hrant o gléañoù... Lan a druhé, ar gorrigañéz a zizouar Gradlon aveid er lakad én ur Harr-Meur, tennet ged errouanted (*dragons*) : med chetu azé an devéhan merch a garanté a ziskoei-hi dehoñ, ha dohtu éh a kuit : biruikén ne vo mui gwélet, biskoazh kén !...

Aveid ankouéhad é nozèzhioù hudur (*sordide, obscène*) poéniuz, martezé ataù, Gradlon a za de voud ur moraér (*pirate*), ha setu eañ é penn un

tolpad kensorted taer ha dispont. Moned a hra de skrapein ha de laereh, àr aodoù ar hreiznoz. Hir amzér é vé é treuzein ar morioù, revé é faltazi...Met, un dé, dirag ur hastell kriù, hag a zo groñet hag arsaillet heb disoh erbed, soudarded Gradlon a goll kalon agrén. Sonjal a hrant én o bro, én o ziegeh dilézet, én o bugalé, ha sterdein a hra o halonou...Fallein a hra dehé kuitad, arsaù ar vuhé-sé ha distrocin d'ar gér. Med o mestr brezél, intanet ged oll darvoudou herruz (*impétueux*) ar vuhéegzh-sé, a fall dehon chomel ataù. Neuzé en en dilézant.

A pen da d'ar bagad bagoù a voud kollet d'an daoulagad é kreiz ur vrumenn tiù, é penn pellan an dremwél, ur vouéz en em zisko é blein ar vangoér-diwenn. Hé fennad blèu, liù eur, dispak, a hadé flami-chennoù tan ; hé daoulagad en-doé liù ar mor-braz, ged ur vraùité sorselleg. Kentéh éma Gradlon lañet a garanté aveiti, ha de viruikén é teli hé ha-

rein...Kénnigein a hra-hi téhein pell, pell getoñ ; mèz nen-des mui bag vraz erbed...Kalz ne vern ! Hi hédes ur marheg-rid hag a hell galoupein kerklouz àr gribennoù an houlennoù evel àr ur blénenn, hag an Norvak du o has getoñ.



Ar varhègadenn boémuz àr ar mor a bad mizioù ! Gañein a hra ur verh étré diù houlen : Dahut, med èl men dé delé de Norvak lakad é dreid àr aodoù an Armorig, goulenn a hra ar Mor-Braz ur preizh, hag an diougañeréz a riskl divuhé ér mor.

...Gradlon en-des en em den- net én é gastell é Kemper. E verh a hra hé hresk, a zo de voud koant èl hé mamm. Med

ar roué a chom diskonfort grons.

Neoazh éma lan kalon Dahut ag un hiraeh braz ha don é kevér ar mor-braz. Hé dad a zakor rein dehi an droed de seüel ur gér àr an aod, ken tost d'ar mor ma vo red goulenn o harp ged diaouled an iwern !...Med ur baganéz é, hi, merh an diougañerezh-veur. Kàs hé-des doh ar Hrist azeulet neoazh ged hé zad, a veid é serviterion Gwénolé, Kaourintin, Pol, sent braz an amzér-sé.

En un noz hebkén en-des an Ozegañed saüet ar mor-vein sonn ha divent ged harp an doriou-houarn tiù ha ponnér. Grès dehé é hellér reneüéin, a pen dé izél ar mor, deur al lennoù-porz, léh ma ta Dahut de gas bouid de loned,

gloèu ha souézhuz, gañet èl ti a zoned ar mor.

Kér-Is, ar gér heb hé far, a zo breman saüet ahont. Kér dibar, chomléh Dahut, lan bar a aour, a binüidigezh hag a zirollerezh...

Ar ré youank, dédenet ged lorhaj ar paléz, brasted divalaù ar predoù ha braüité Dahut, a réd d'al léh-sé, peb unan é klask boud dégeméret ged ar plah, med kalon Dahut a gemm ag un dé d'un all. Un nozezh diroll 'zo trawalh a veid hé chuéhein (*skuizhein*), ha beb mitin, de holoù-dé, ur marhegour a gas ur horv marù àr é jao, an hani dibabet an noz kent, hag a vo lonket d'an donded, étal rehiér Plogoff, léh ma krén ar beskerterion é kleüed klemmoù, deit ag an islonk (*abîme*) a-houde kantvléadoù...

Soñenn :

*Ys, ar gér villiget  
En-doé én hé iliz (bis)  
Ur hloh braz benniget  
A ouilé hé féhed  
Ding dong don denn, ding dong don dé !*

### Implé (*implij*) an araogenn DOH :

- 1/ Arlerh ar verboù, an anùoù-gwann, hag a dosta pé a bella :  
- stagein – joentein – lakad é pign – distroein – tostad – pellad diforh – disparti...
- 2/ Arlerh ar verboù, an anùoù gwann, hag a laka un haval ded pé un dishaval ded :  
- havalein – jaojein..., haval – jaojabl – kounaret...
- 3/ Arlerh ar verboù a zarempred :  
- selled – chelaoù – sentein – harzein – mired – diwenn – diwall – kuhein – hoarhein...  
- en-devoud joé, karanté, donjér...

### TROIOÛ-LAVAR, ged an araogenn doh :

Doh ar pézh em-es kleüet lared...  
Gouarn an ti doh ar laeron.  
Ne skuizhan (*chuéhan*) ket é chelaoù dohti !...  
Doh ho kwéled, doh ho klewed...  
Ma ne sent ket doh ar hentroù (*éperons*), doh é gestad jao a hra gaoù (gobér gaoù : *faire tort*).  
Kanderù é doh an héol, med nitra doh an daol ! (de lared é : *ne goui ket anehon*).

### AVEID FARSAL :


« Morised, ar wéh getan a reët ur bok d'ho kensort, ne chomet ket just édan ar fe- | nestr, èl an nihour !  
O, difariet, ne oen ket mé ér | gér an nihour !”



## GIRIOÙ-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

- 1-A-du-rall.
- 2-An deur pé an aùél hé laka de droein.
- 3-Komans a hra embann.-Stér Bro-Suis.-Sant é Normandi.
- 4-Houarn kaletait.-Staget doh ar bobl é Pondi.
- 5-Rouanéz ar Saozon.
- 6-Brasoh eid ar gounifl.-Tiér diskaret àrdran.
- 7-Un tammig a onestiz.-Té évet d'ar Saozon.-Anar divogalennet.
- 8-Staget mad.
- 9-Kañein a hrant oll, é Bro-Gwened, d'an Neùé-amzér (tri gir).



### A-dreuz

- 1-Kleùet d'ar sul én iliz.- 2-Kér Italia.- 3-Tennet ag an atom.-Hantér ridet.-Bah dibennet.-4- Unan én Intell.-Ged un ni é ta devoud nitra.
- 5.-Kér Lybia brudet goudé ar brezél devézh.- 6-Saùet én ér ag an amzér é Rusi.-Vogalennou an amezeg.- 7-Ur gir-mell.-Nitra.-Ton skar(z)het én é greiz.- 8.-Yézh skar(z)het ag an ilizioù.- 9-Doujet braz a oé é Jérusalem én amzér-hont.

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed** : 1- PETREMANT.- 2- MILIN.- 3.- EM.- AAR.- LO.- 4.- DIR.- KAN.- 5-ELISABETH.-6-GAD.-TIE.-7-ON.-TEA.-NR.- 8.- ARIET.- 9- RAH/AN/ENED.

**A-dreuz** : 1- PREDEGOUR.- 2.- MILAN.- 3.- TM.- RID.- AH.- 4.- RIA.- TRA.- 5.- EL/ALAMEIN.- 6.- MIR.- AEE.- 7.- AN.- KET.-TN.- 8.- LATIN.- 9.- TRON/HEROD.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
degemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, bouhadurezh...



### KOPIADENNOU EN HO UNAN

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhou  
Entreprizioù  
Ne vern più...

### ENEZ GROE - Kambrou-ostiz(chambres d'hôtes) Digor a-hed ar blez



3, Ar Leurc'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

### AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévraoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :


**Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR**

N° CCP de l'Association : **NANTES 4 287 62 E** (chèques libelles  
à l'ordre de Kevredigezh Bro-Breg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herrieù - Jobig Le Gall

Alfons Samson - P M Jéhanno



**Photo *Lucien Pouédras* « get  
aotré an Eko-Muzéom »**



**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = **16 €**

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982) N° ISSN. 0750.3326.

Dépot légal 2<sup>ème</sup> trimestre 2008

**INTERNET** : <http://perso.libertysurf.fr/andoere> **E-MAIL** : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)


N° 106

an

Priz: 4€

# DOÉRIÉ

## DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED





SKOL-UEHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)



Année de la Galice

31 juillet - 9 août

**2009**

*Année de la Galice*

Festival  
INTER CELTIQUE  
Lorient



KAMPING AR VEITERI VRAZ  
E KARNAG  
ho tigemer

Digoret a viz Ebrel de greiz miz Gwenholon  
Brezhoneg, galleg, alamaneg, saozneg komzet  
Pgz : 02 97 52 24 01 - Fax : 02 97 52 83 58.

## ROLL AR PENNADOÙ

KENTSKRID : <i>UN AUEL KONTREL</i>	P. 4
DIWENN AN DOUAR	P. 5-6
FESTIVAL ÉTRÉ KELTIÉK 2 008	P. 7-9
PLIJADUR É LÉNN É BUBRI	P. 10
ISTOÉR AN ARMORIG	P. 11-18
DARVOUDOÙ DE ZONED	P. 19
AN ARAOGENNOÙ A HA D	P. 20
AR BLEI HAG AN HUIBON	P. 21
AVEID FARSAL : <i>GAST A URZIATAÉR</i>	P. 22
<i>PENAOZ GOBÉR KRAMPOÉZH</i>	P. 23
SONENN : HUNVRÉIOÙ KOLLET	P. 24-25
GIRIOÙ - KROEZ	P. 26



*Spilhennig « Ofis ar Brezhoneg »*

Kirieg é peb skrivagner a veid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajentoù an doéret

### Kentskrid

Un aùél kontrél a oé é toned àr or pennoù ha seblant a fall amzér éneb d'or sévenadur.

Abenn ar blé é vehé bet kinniget d'ar Parlamant é Pariz seùel ul lézenn neùé, ha revé al lézenn-sé, palforset goprad rah an dud a volanté vad (*bénévoles*) épad ar gouélioù ha festoù saùet dré ar vro.

Hama, an hantér ag an dud a volanté vad a zo é chom é Breizh. Meur a gevredigezh, ha geté an darvoudoù èl ar festivalioù braz ha bihan, ar gouélioù, festoù-noz, sonadegoù, arvestoù... a vehé èl-sé diskaret.



Bagad An Naoned heuliet ged 10 000 a dud dré gér.

Ohpenn 10 000 a dud en-des em dolpet é Naoned d'ar sador 20 a viz Gwenholon devézhan aveid rein de ouied d'ar gouarnamant éh oent éneb grons de ragtrès (*projet*) al lézenn-sé.

E gwirioné, daoù pé tri dé kent, en-des Ministrez ar Sévenadur Albanel disklériet ne vehé ket, abenn ar blé, kinniget al lézenn d'an députéed.

Lakam.

Med, red a vo diwall épad ar mizioù hag épad ar bléioù de zoned ma ne vo ket adlakeit én o sonj en em vellein éndro ag an dra-sé....

### IWENN AN DOUAR

Ar wézh devézhan on-es gwélet penaoz é tigrské an **douar labouret** dré ar bed a-bézh. Ar wézh-man é taolam ur sell àr ur digreskans arall, hani an danùéioù tennet ag an douar.

1 – Emesk an danùéioù-sé é kavam al **loskadurioù** : an éoul-douar (*pé ar pétrol*), an éhenn (*pé gaz*), ar glaoù...



Uzin-Purerezh (Raffinerie) é Donges

Ged an éoul-douar, hanùet eùé an « eur du », éma ar gudenn vrasan. Epad ma vé ar huzhiadoù (*réserves* : gir tennet a *guzhein*) é vihannaad é kreska paodmad dobérioù pikol broioù èl China hag

India. Én arbenn ag an dra-sé on-es gwélet priz ar varilhad pétrol dalhet, de getan, d'ar chifr a 50 dollar betag ar blé 2007 é krapein a-drest de 150 dollar é berr-amzér. El ma n'hellam ket chom én diovér ag an ésans en em lakad a hra ar prizioù de grapein hag ar greskans dré ar bed de zifonnad.


2 – An éoul-douar a zo un dra. Dober on-es eùé a zanùéioù arall hanùet « **madoudiazé** » (*matières premières*), de lared é, mantalioù èl houarn, aluminium, nikel.....ha hoazh, uraniom, stibiom (*antimoine*), argant, hafniom impléet ér greizennoù nukléel, pé aveid kempenn « hwiled élektronig » (*puces électroniques*), indiom, platinenn. Ar mantalioù gloeù (*métaux rares*) a zo impléet é teknolojioù neùé, èl ar galliom a gavér én an helligoù-héol (*cellules solaires*) neùé-rummad.

Kreskans priz ar mantaliou a laka lod ag an dud disonest de glask an argant, êz kaer, é laerezh plom, dir, kouivr, mantaliou a beb sort, kavet én dro d'an uziniou, pé mem a-barzh, hag àr an tachennoù-labour. O frizioù en-des tri-doublet (*kresket tèr gwézh*) é korv ar pemp blé devézhan.

An Amérikaned, hag an Européaniz eùé, a zo impléerion spontuz a vadoù tennet ag an douar. Epad é vuhé é implé peb Amérikane 349 kg. a zing, 410 kg. a blom, 630 kg. a gouivr, 1 576 kg. ag an aluminium...Mar hrehé èl-té peb unan ag an dud hag a viù àr an douar ne chomehé ket mui krom nameid aveid 40 vlé, kouivr aveid 38 vlé, stén aveid 17 vlé, ha plom aveid 8 vlé. En despet men dé bet di-wennet implé ar plom é meur a dra priz ar mantal-sé en-des kresket dré 700 % épad ar péar blé devézhan. Perag-ta ? Abalamor d'an nivér a girritan hag a zo rekiz breman de

varhadoù neùé, ré ar broiou èl China hag India...

D'ar « podoù-brammér » éh a ar plom ; mem tra aveid al li-thiom, pé ar blatinenn kavet ér podoù katalitig.



Ur pod katalitig : mar vehé displéget é framm (*structure*) é zigorded (*surface*) en-dehé 4 500 m<sup>2</sup>, de lared é, hani un da-chenn-football.

Photo © Rhodia Electronics & Catalysis

Ma ne vo ket chanjet an emzalhioù (*comportements*) é krapo ihuéloh ihuél prizioù an danuéioù-fons-sé.

Red é sonjal erhad ha fon-nabl penaoz gobér aveid rein an tu de viùein gwell hag àr an dro gouarn pinuidigezhioù an douar de rummadoù tud de zoned àr or lerh.

A. Samson

## FESTIVAL ETREKELTIEG AN ORIENT 2008

Ar blé man éh oé **Bro Kembre** én inour. El ar bléou kent, Emvod ar Gelted en des kaset d'**An Orient** un nivér braz a dud : étré 600.000 ha 700.000, Bretoned ha Kelted a vostad, ha tud a bep kornad ag ar bed, lod anehé staget doh sévenadur ar Gelted, lod arall hebkin kuriuz d'hé anaouid ha de gavouid ar brasan plijadur én devveransoù kenniget dehé a zevri.



Koban Bro-Gembre

Ar Valéadenn-Veur, deusto d'ar fall amzér, en des tolpet un nivér braz a sellerion bir-

villet (*enthusiastes*) deit de wélet an 3500 a gorollerion ha sonerion ag oll ar herlennoù hag ar bagadoù nivéruz, deit a Vreizh hag ar broiou arall en em gavé ér Festival.

A-dal ar sadorn 2 a viz-est betag an 10, ar sul ma dé bet klozet an Emvod, éh oé lan ruioù ar gér a festivalerion tro an dé, d'anderù-noz ha d'an noz. Red é lared eùé ne vanké ket dehé arvestoù a beb sort, lod vad anehé ne gousté ket kir (ha mem nitraliès), ér méz, én tavarnioù, pé é kobanenoù ar broiou kelt. Rekiz a vezé, el rézon, péein aveid gwéled an arvestoù kaerañ, pére en em zisplégé ér salioù vraz pé é sportva (*stade*) ar Voustoér. E-mesk an arvestoù, an arzerion, ar bagadoù hag an tolpadou brudetan, menégam (*citons*), kéj-méj: kevérérezh (*concours*) ar bagadoù (ar maout a zo oeit ged Cap Caval, just

dirag An Alré), sonadegoù ged Nolwenn Korbell ha Soig Sibérial (kan ha gitar), Loreena Mc Kennit, Meinir Heulyn (telenn), Dominique Dupuis (violon), Soldat Louis (kan ha muzik), Ode à l'Acadie (kan ha muzik), baré kanerion goazed bro Gembre... ha kement arall a ne hellan hanùein aman deusto an hoant em behé de gomz anehé, rag talvouduz ind eùé !



Polig Montjarret àr ar bank

E korb ar sul ketan ag ar Festival, ur hantad a sone-  
rion, deit ag ar bagadoù bru-  
detan a Vreizh, en des sonet a

greiz kalon, édan bili Dédé Ar Meut, én inour de Polig Montjarret, dirag é zèr merh ha pennoù braz ar gér hag ar rann-vro, aveid digoradur (*inauguration*) ar gaer a ze-  
lùenn arem, lakeit àr ar bla-  
senn a zoug é hanù. Delé erhoalh a oé rantein ar brasan inour d'un dén ag en des groeit, ged kement a galon hag a nerzh, ur labour ken talvouduz, àr gement a zachennoù, aveid Breizh, é vro karet.

Ar sul devézhan, aveid ar gaer a overenn-bred, lidet é brezhoneg Bro Gwened, dré René Ar Ruyet, person Pons-  
korv (duzé é larér Pouskorù), lan-barr a oé iliz Sant Loeiz. Chetu hoah azé un tolp ag e laka toemmdér é kalon ar vrezhonegerion ! A-durall, é korb an dé devézhan-sé, peb arvest, peb tolp, peb sonadeg a seblanté klozein àr ur memès gir : KENAVO ! An devézhan « Kénavo an dis-  
tro » a zo bet sonet ged bagad Brieg...

Revé ar penn-rénerion : Lisardo Lombardi ha Noël Couédel, ar Festival 2008 en des kaset ér yalh un tammig muiekoh (pas kalz) a argant eid àrlané, deusto d'ar beur a alézon dakoret ged ar Stad (10.000 euro) : un dristé !...

Drest d'an argand, digoll an oll en des labouret stert aveid kas de benn an deg dé-sé, a zo ar blijadur o des gelllet hrein d'an dud deit d'ar festival brasañ saùet dré ar Gelted.



Ur ré a Gerlenn Pondi épad ér Festival

Breman, digemér vad d'ar Galisia abenn ar blé :  
« **Bienvenida Galicia** » !

Lushkeudennoù Yves Le Guludec

Jobig ar Guludeg

## Plijadur é lénn é Bubri

De beb trivet sadorn ag ar miz en em gavam é « Ti-Ar-Barréz » é Bubri, a 5 eur de 7 eur d'enderù.



Ur ré ahanom d'an tolpad a zo bet dalhet d'ar sadorn 19 a viz Gourhelen 2 008

Ur blijadur é dizolein pennadoù-skrid a beb sort, kavet én niverennoù « An Doéré » hag él lévroù arall, deskein giriou neùé... Etré diù bennad é ta Gérard de rein sekour dem aveid kânein ur sonenn neùé pé diù, heb dilézel ar sonennoù poblek anaùetoh.

An nor a zo digor d'an oll, ha doned a hra tud, dégeméret èl mignoned, a Vubri, a Velrand, Lignol ha mem a Bondi...

Genem é vo dalhet mad ged ar brezhoneg biù.

A. Samson

## ISTOÉR AN ARMORIG (kendalh)

5 – **Goudé diskar an Empelaerezh : Ganedigezh Breizh-Izel**  
(étré ar 5vet hag an 10vet kantvléad : Ald-Roen...Konomor...Waroc'h...-  
Nominoë...Alan-Meur...)

N.B. – Aveid kempenn ar pennad-man a-zivoud **Istoér an Armorig** goudé diskar Rom (ér blé 476) betag an 10vet kantvléad, éma bet rekiz dein turel ur sell réziz àr un nivér braz a skridoù diféret(exposés, expliqués) é "Les Origines de la Bretagne", dré Léon Fleuriot. Én o mesk :

- skridoù skrivagnerion diàr "Istoér ar Franked", èl Sant-Grégoire, eskob Tours (aveid ar 5vet hag an 6vet kantvléad), hag Ernold-an-Du (aveid an 9vet kantvléad);
- skridoù skrivagnerion arall hag a viùé épad an amzér-hont, èl Sidoine-Apollinaire, eskob Clermont (430-487), Fortunat, eskob Poitiers (530-609), an istoérouk grek Procope (marù ér blé 565), an istoérouk Alan Jornandès (6vet kantvléad), Sant-Geltas, diazéour menati Rhuiz (510-570)...
- obéroù istoérik arall a beb sort, èl skridoù-blé Bro-Gembré, ré Metz, ré Sant-Brieg, ré an Touraine; kronikoù an Anglo-Saozoned, ha ré an istoérouk Angléz Bède (672-735)...
- obéroù barzhed Bro-Gembré, èl Breuddwyd Maxen (= Huné Maximus), Trioedd Ynys Prydein (= Triadoù Inizenn Breizh-Veur), ha Livr Moliachou (moliach : exploit, merveille) Arthur...
- kartulériou Landévenneg, Kemperlé, ha Redon.
- ha skridoù diar Buhé ar Sent, adskriuet oll arlerh dismantrou (destructions) an Normanned, àrdro an 13vet pé ar 14vet kantvléad, ha lan a fariadennoù...

Heijet em-es ha keijet, an oll skridoù-sé, é klask ar wirioné kuzhet énné. El-sé é hellan displeg, ér pajennoù-man, ar pézh a gennigan deoh èl un **istoér gwirhanval** (vraisemblable)...Ne gredan ket lared « ar Wirioné », rag groeit em-es, mé eùé, heb arvar, un nivér mad a fariadennoù !!!



E gré an devézh an Empe-  
laered (é Rom), dégaset a oé  
bet d'ar Gall an oll léjionoù  
hag a oé stalet agent é Breizh-  
Veur :

- ré **Maximus** (383-388) :  
neuzé, marsé, éh oé deit eùé  
**Konan Mériadeg** d'an  
Armorig, revé kartu-lér  
Kemperlé ha sorbien-noù  
Santéz Ursula. Ha chomet en-  
doé é soudar-ded ér Gall,  
goudé marù an Empelaer  
(388) : ind é a zo bet ar  
« Gran plantet él liorz »,  
revé skrid Sant-Geltas, de  
lared é, ar Vretoned ketan  
deit a Vreizh-Veur d'an  
Armo-rig. Maximus a zo  
hanùet « Maxen » é  
lennegezh Bro-Gembré.

- Ré **Constantinus** ha **Gé-  
rontius** (406-411) : hanùet  
int « Kustennin » ha « Ge-  
reint » é lennegezh Bro-  
Gembré.

- Ha ré **Ambrosius-Auré-  
lianus-Riothamus** (468-  
490), penn-tiern an Devon  
ha Cornow, goudé boud

kaset kuit Vortigern.  
Galùet a oé bet d'ar Gall  
aveid diwenn ar vro éneb  
d'ar Wisigothed, ha deit a  
oé ged 12 000 soudard  
breton. Féahet dré ar  
Wisigothed, sekouret en-  
doé ged ar préfed Syagrius  
forsein ar Franked de  
gilein a flondrenn al Ligér  
de flondrenn ar Somme.  
Hanùet é Amréis ér len-  
negezh kembraeg.

Klasket o-doé, peb unan d'é  
dro, dégas ar péah éndro ér  
Gall én ur vrezélad éneb d'an  
alouberion (*envahisseurs*) jer-  
manig, mez an traou en-doé  
kerzhed a-dreuz, seul gwézh,  
dré ma oé bet marsé ré zispi-  
gnet nerzh-brezél ar soudar-  
ded é tiwenn ar gouronenn  
Empelaer lakeit dehé àr penn  
o « dug », adal de soudarded  
an Empelaered gwirion, ken-  
toid eid éneb d'ar Jermaned !

Goudé disparti an devézh an  
léjionoù, ér blé 407, Breizh-  
Veur hag an Armorig a oé  
chomet dieub é kevér méles-  
tradur Rom, ha diazéet o-doé

gelloudoù politig neué, édan  
mestroni o ziemed, hanùet  
« ri » ( pé « roué ») . Hag,  
adrest pennoù an tierned, éh  
oé ur « penn-tiern » (ur roué-  
meur), hanùet « Rigotha-  
mus » é brezhoneg Breizh-  
Veur, ha « Alt-Roen » é yézh  
romano-gallig an Armorig.

Boud a oé darempredoù a  
beb sort étre ar Vretoned, é  
Breizh-Veur, hag an Armo-  
rigiz...ha gelled a hrér lared  
éh oé ur **rouantelezh unig**  
étrézé, èl ma oé un « dux  
classis » unig ( = amiral ar  
mor-lu) é Breizh-Veur hag én  
Armorig, éneb d'al laeron-  
mor Saozoned ha Frisoned.  
Boud a oé bézh é Breizh-  
Veur én amzér-hont, ged ar  
Piktéd hag ar Skotéd hag a  
glaské mestroniein ar vro a-  
houde disparti al léjionoù (ér  
blé 407). Lod ag an dud  
treboulet geté en-doé neuzé  
um lakeit de guitad o bro ha  
de ziskenn d'an Armorig, léh  
ma oé dija kalz a Vretoned  
stalet a-houde gwerso. En o  
mesk éh oé, me gred, tud èl

Frakan, hag en-doé divaget é  
kosté Kintin : é vab Gwen-  
nolé, gānet én Armorig, a  
saùo devéhatoh ur ménati  
brudet, é Landévenneg.



Dismantroù Abati kozh Landévenneg

Reit a oé an hanù a « **Lé-  
taviéd** » d'ar Vretoned hag a  
viùé én Armorig, dré ma oent  
stalet àr an douar-léd, al  
« Lledaw » ér yézh kem-  
braeg, é kornog ar Gall.  
Diforhet a oent enta, de getan  
ataù, azoh an Armo-rigiz (pé  
an Alboryked), ketan poblans  
ar gouriniez : an Ossisméd,  
Vénéted, Koriosolited, Unel-  
led, Rédoniz ha Naonediz.  
Deit a oent, a nebeudigoù, de  
voud nivéruz meurbet, nivé-  
rusoh paodmad é kosté ar  
mor, eid an hen-poblans, dré

ma oé-hi bet draillet, àr an aodoù, ged obéroù al laeron-mor a-houdé bléioù devézhan an 3vet kantvléad. Lazhet a oé bet grons, pé kaset kuit, poblans an Ossismed hag a viué étal ar mor hag àr ribloù ar stéριοù...

Emesk ar boblans neué éh oé soudarded an « Tractus Armoricanus et Nervicanus », deit a Vreizh-Veur doh galv Préfeded ar Gall, hag un nivér braz a serviterion ha miché-rizion deit àr un dro ged al léjionoù, ohpenn ar pézh a chomé a soudarded Maximus, Constantinus hag Ambrosius, goudé marù o Empelaered.

Komzet a oé neuzé tèr yézh én Armorig. Ar **brezhoneg**, yézh ar Vretoned a Vreizh-Veur, a oé impléet é kosté ar mor ; ér hornadoù forhet ag o hen-poblans ossismig. E kalon ar vro, éh oé komzet yézh **romano-gallig** an Ossismed, ur yézh hantér latin hag hantér gallig, forh dishanval d'ar gallig hag a oé komzet é gré Kaezar, pemp kant vlé

kent. Er héριοù éh oé komzet **latin** heb kin, yézh an ofiserion romén ha yézh ar velestreion, yézh an dud desket ha, drest-oll, yézh an dud a iliz : deli a hré-hi chom yézh ar velestradur betag ar 15vet kantvléad, ha yézh an iliz betag an 20vet kantvléad...

Pe oé bet diskaret an Empelaerezh, ér blé 476, éh oé ar Gall abézh én ur stad trueg. Rannet a oé é pemp lodenn, ha péar anehé um gavé édan yaù an **Alamanned** (én tuman d'ar Rhein), ar **Burgonned** ( é flondrennoù ar Saône hag ar Rhône), ar **Wisigothed** (étré al Ligér hag ar mané Piréné), hag ar **Franked** (étré ar Rhein hag ar Somme). Ar **bempvet lodenn** heb kin, étre stéριοù al Ligér hag ar Somme, a chomé édan bili Préfed ar Gall, Syagrius, ged harp ar Vretoned diskennet a Vreizh-Veur, soudarded Ambrosius-Aurélianus, sekouret, ind eùé, ged an Armorigiz, ambruget neuzé ged tiern an Domno-

néa. Aléjet a oé bet un emgleù étre Préfeded ar Gall ha tierned an Armorig a-houdé ar bléioù 420-430, dré venanté Germanus, eskob Auxerre.

Ar bempvet lodenn-sé a oé deit de voud ur menestrein rouantelezh romén, emrénet de getan édan gourhemannoù Préfeded ar Gall :

- **Aëtius** (428-454) : brezéleit en-doé, par ma hellé, éneb d'ar Wisigothed ged sekour ar Franked, éneb d'an Armorigiz ged harp an Alaned, hag éneb d'ar Franked ged harp ar Vretoned. Ean-é, aliet dré Sant-Germanus, en-doé dégeméret ar Vretoned hag an Armorigiz èl gel-loudoù kevredet ged Rom. Koll a hras é vuhé ér blé 454, goudé boud féahet Attila ér Pradoù-Katalaunig (451).
- **Aegidius** (460-464) : brezéleit en-doé, éan eùé, heb arsaù éneb d'ar Wisigothed

ha d'ar Franked, ged sekour ar breton Paol-Aurélianus, ha lazhet a oé bet ér blé 464 dré Franked Childebert (436-481), revé skridoù-blé an Anjou.

- Ha **Syagrius** (464-486) : devézhan « dug » ar Gall goudé marù é dad Aegidius, dilézet en-doé kreisté ar vro étre daoùorn ar Wisigothed, hag um daolet àr ar Franked, palforset de déhein a-zebri flondrenn al Ligér betag ar Somme. Klaskein a hras goudé um gemér eùé doh ar Wisigothed, ged sekour soudarded Ambrosius-Aurélianus, diskennet a Vreizh-Veur, mez an afér a oé bet manket (469). Tapet dré ar Wisigothed, ér blé 486, ha gwerzhet dehé d'ar Franked, éh oé bet lakeit d'ar marù heb trué, doh gourhemannoù Chlodowig (Klovis) (481-511), deit de voud roué ar

Franked goudé marù é dad Childebert, ér blé 481.

Achiù grons a oé neuzé « Rouantelezh Syagrius », deg vlé goudé diskar an Empelaerezh é Rom. Ne chomé mui én o saù nameid ar Vretoned, kevredet ged al Léta-vied hag an Armorigiz, a-dal de Franked Klovis, deit de voud ar gelloud kriüan ér Gall abézh.

✱

Kalonekeit ged o viktoér àr Romano-Bretoned Syagrius é Soissons, ar Franked a ziskennas éndro de flondrenn al Ligér, hag um daolas abenn àr an Armorig. Ar Vretoned a ziwennas o bro ar gwellan ma hellent, mez red a oé bet dehé lezel o éneberion d'um stalein ér hastelloù dalhet ged ar stagadoù (*détachements militaires*) jermanig hag a oé azé ged kousant an devézhan Préfeded. El-sé éh oent chomet ar vistr é kérioù Roazhon, Gwénéed hag an Naoned.

Ar brezél étre ar Vretoned hag ar Franked a gendalhas é-

pad pemp pé huéh vlé, heb kalz a hounid aveid hāni anehé...ha red a oé bet d'ar Franked pellad azoh an Armorig, dré ma o-doé d'um ziwenn, ind eùé, doh éneberion arall danjerusoh, an Alamanned hag ar Wisigothed.

Intānet a oé enta ar brezél ér Gall abézh : peurkeizh Romano-Galled ! Ha penaoz dégas ar péah éndro ? Méles-tradur (*administration*) Rom a oé kouézhet a-grén, ha ne oé ket deit urzh erbed én hé léh...nameid marsé **gelloud an eskobed**, streüet èl ma oent é pèb « diocésis » (eskobti) hag é pèb kër vraz, ha dégeméret mad ged an oll, èl diwennerion gredusan ar bobl... Ha ne sonjé ket mui hāni é vehé gellat kas éndro ar Jermanned d'o bro, én turrall d'ar Rhein ! Mez, de biù neuzé rein ar gelloud, a berzh an iliz, aveid bihānad gloéz an dud ? Pas, a dra sur, d'an Alamanned na d'ar Wisigothed, rag ma o-doé dégeméret goal-gredennoù an Arianed,

ha ma oent enta disentuz grons de lézennoù Rom ha de hourhemenoù an eskobed. Skarzhet o-doé mem Sidoine-Apollinaire, eskob Clermont, ér méz ag é eskobti...Klovis, é kontrél, a blijé mad de Rémy, eskob Reims, hag é bried Chlotilde a oé anaüet èl ur gristenéz greduz ha sentuz de iliz Rom : ne vanké dehon enta nameid ar Vadéent aveid boud dégeméret èl héritour ar Roméned ! Ar Vretoned a oé kristénion reizh, ind eùé, mez ré staget de lidoù ha gizioù an **iliz keltieg**, dishanval de ré ar Romano-Galled...



Sant Rémy ha Klovis, Roué ketan ar Franked

Aliet ged Sant-Rémy, Klovis a gousantas reseu ar Va-

déent, àrdro ar blé 497. Gounid a hré èl-sé, heb poén erbed, harp an iliz romano-gallig én é obéroù éneb d'an oll alouberion (*envahisseurs*) arall...én o mesk, ar Vretoned ! Nitra ésoh neuzé, aveid Melaine, eskob Roazhon, (ha marsé Padern, eskob Gwénéed), eid aléjein un emgleù étre ar Franked hag ar Vretoned, un emgleù spleituz (*avantageux*) aveid pèb unan anehé. Ar Vretoned a anzaüé damani (*autorité, suzeraineté*) Klovis èl héritour de Empelaerezh Rom, mez chom a hrent emrénerion dieub én o « Britannia-Minor » (*Breizh Vihan = Breizh Izél*), é kornadoù an Ossismed, ar gKoriosolited, hag ul lodenn a vro ar Vénéted, heb péein na taos na droug-kennig (*tribut*) erbed d'ar Franked. Ar ré-man o sellé neoazh èl « komted », ha pas èl « rouāné » revé skridoù Grégoire, eskob Tours. Mez kement-sé ne hré diforh erbed aveid ar Vretoned, penn-dé-gwir ne oent na

komted na rouané, mez « tierned »...

Ged an emgleù-sé ataù, kempennet dré an eskobed, éh oé gānet ur rouantelezh neùé én Armorig, rouantelezh ar **Britannia-Minor**, de lared é, Breizh-Izél. Ha ne oé ket mui afér a vrezél, aveid un herrad, étré Franked Klovis hag ar Vretoned. Ar ré-man a rei mem an dorn d'ar Franked aveid féahein an Alamanned (é Tolbiac, ér blé 506), hag ar Wisigothed (éVouillé, ér blé 507).

An traoù a zalhas èl-sé, heb treboul erbed, betag marù Klovis, ér blé 511. Rannet a oé bet neuzé rouantelezh ar Franked é pedèr lodenn étré Theuderich (Thierry), Clodomir, Childebart ha Clotaire, ha krogein a hras abenn ar brezél étrézé. Chom a hras neoazh Breizh-Izél ér méz ag ar chikan, dré ma hi-doé bet afér doh Childebart heb kin, sentuz d'an emgleù étré Klovis hag ar Vretoned, betag é

varù ér blé 558. Un nebeud bléioù kent, éh oé saùet bézh eùé étré Chlotaire hag é vab Chramme, ha deit a oé hennen de gemér repu (*se réfugié*) àr douarou ar Vretoned.

✱

Epad an amzér-sé, stad ar Vretoned é Breizh-Veur endoé gwelleit eùé, hag ar Saozoned a seblanté breman bourdet, goudé an emgann kollet dehé ér « **Mons-Badonnicus** » (*Mané-Badon*), àrdro ar blé 495. Penn-tiern an Devon ha Cornow (arlerh Ambrosius-Aurelianus) endoé o draillet ker spontuz ma oent chomet dinerzh épad 44 blé, revé skridoù Sant-Geltaz...Hennen ne lar ket neoazh più oé ar penn-tiern, Arthur marsé, rag ne hellé ket é galon distagein hanù an dén hag en-doé lazhet un né dehon, pe oé bet digadoéret (*détrôné*) Vortigern ! Ne vern, ataù éh oé bet féahet a-grén ar Saozoned milliget !.....

**Loeiz Ar Mouël** (*de genderhel*)

## DARVOUDOU DE ZONED :

**D'an 11/11 kentañ é vo tud é Santéz Anna**, é koun (souvenir) or soudarded marù épad ar brezél braz 14/18.

Ar blé paset en-doé « Santéz Anna Gwéné » kempennet ur haer a enderüiad é Iliz Sant-Geltaz an Alré.

« An Doéré » en-doé displéget deoh, én niverenn 103, braùité al lid én inour d'or soudarded marù ér brezél ken éahuz-sé étré 1914 ha 1918.

Ar blé-man éh arriüam d'an 90 blé ma achiüé ar brezél. Alas ! Pégement a soudarded a zo chomet àr an dalbenn !. Eraog kuitad ar vro éh oé ocit

al lod muian anehé de Santéz Anna d'en em hloestrein d'o Mamm karet, én ur sonjal doned éndro, fonnabl, étal o ré kar.

Mar dé bet gwir aveid lod anehé, ar rérall, étré 200 000 ha 250 000 revé an istoérierion, en-des kollet o buhé.

Surwalh é vo ar Vretoned fidél dehé hag é teint niveruz de Santéz Anna an dé-sé....

## Celti-Vannes :

Ne vo ket mui a "Celti-Vannes" ar blé-man é Gwéné. Ar gouél-sé a vezé dalhet beb blé épad miz Gwenholon hag un overenn a oé kañet é brezhoneg é ilizvamm Gwéné.

Person braz ar barréz, an Tad Lanco, en-des kinniget de « Santéz Anna Gwéné » gouarn an overenn, adal ma vehé lidet devéhatoh, hag éma bet choéjet lakad d'ar sul 9 a viz kalan-gouiañv.....

### An araogenn A :

- 1- Arlerh ar verboù a belldér :
  - E tan a Wened
  - Ne gomzet mui dein a blijadur ar bed.
  - Ne geméret ket ag an drammoù-sé...
- 2- Arlerh ar verboù : arsaù, ankouézhad, en-devoud eun, diwall, parraad, diwenn, en em servijein a, kargein a...

### An araogenn DE :

- 1- Arlerh ar verboù a zisko penn an hent : éh an de Wened...
- 2- Arlerh ar verboù : derhel, lakad poén, plijein...
- 3- Arlerh un anù, un anù-goann èl : an hoant de wêled, diêz de obér, par de..., kontrél de...

### Troioù-lavar :

**Ged a :** Lod vad a dud a lar...- Komzam a Santéz Anna...- Miret dohton a obér droug...- En-devoud sonj a...- Ne hues ket dober a argant mar n'um servijet ket anehé.- Deit é de benn a cherreh ur yalhad vraù a argant.

**Ged de :** Lakeit éan de lénn...- Deit é de voud ar gwellan dén...- Tud lizidant ha didalvé zo diméet d'ar beuranté...- Ar wirioné zo diêz de gleüed.- Ean en-des reskondet dein.- D'em diskouam éma flour ar ganenn.

### AR BLEI HAG AN HWIBON (CIGOGNE)

Ar blei a zèbr ged skloufoni, peb unan er goui !  
Ur blei enta én ur pred braz  
Ker buan é lodenn a lonkas  
Ma kredas éh é de dalpein,  
Ha de verüel àr an dachenn :  
Chomet a oé, én é houg, un tamm askorn !  
Ha ne hellé mui enta hopal.  
Dré voneur aveitoñ, é treménas  
Tostig tra dehoñ, un hwibon.  
Ha éan d'obér gwign dehi...  
Kentéh é ta de sekour getoñ  
Ha de dennein an tamm askorn ;  
Ged hé bég hir ha moén  
Éh oé bet forh éz dehi  
Tennein ér méz an tamm askorn ;  
Hag aveid ul labour ken talvouduz  
É houlennas hé gopr ged ar blei.  
"Ho kopr ! a huchas al lon gouiù,  
éh oh é farsal, kommèr !  
Ha nen dé ket dija traoalh  
Ma hwes gellèt tennein ho pég  
A me gourlanchenn  
Heb n' em-es éan chaket, ged men dent hir ha luemm ?  
Hama, kerhet araog ! Nen doh nameid ul lon digalon !  
Ha mar chom genoh ur grañg skiend vad  
Ne gouéhet jamés kén édan me hrabonoù !"

(La Fontaine, kemmet un tammig).

## AVEID FARSAL

### Gast a urzhiataér (ordinateur) :

**An ostiz (client)** : àr an urzhiataér éma merchet "adlans" (redémarrer). Petra faota dein gobér ?

**Hotline** : groeit éndro.

**An ostiz** a adkrog (raccroche) hag a galv éndro : « Démad deoh éndro, ha breman ? Petra a hran-mé ? »



**An ostiz** : ne gavan ket léh ho "Poellad" (logiciel) àr an urzhiatér.

**Hotline** : kliket diù wézh àr « Post-labour »

**An ostiz** : émenn-ta ?

**Hotline** : gwéled a hret un "ikon" : "Post-labour" ?

**An ostiz** : Ne gomprenan ket nitra. Perag é komzet-hwi a « Post-labour » ?

**Hotline** : Ne hues ket ur « Post-labour » ?

**An ostiz** : Dam nann Aotrou ! Me zo mé é retred !



**Emil** : démad deoh ! m'em-es bet un urzhiataér aveid an Nendeleg, mez ne gerh ket anehon.

**Hotline** : pe geméret al logodenn petra a arriù ?

**Emil** : Janet ! klask al logodenn !...



**An ostiz** : n'hellan ket mollein (imprimer). Seul gwézh é anséan an urzhiataér n'anaù ket ar skriveréz.

M'em-es hi lakeit a-dâl d'an urzhiataér, ha nitra d'obér, n'en anaù ket muioh.

### Penaos gobér krampoézh-whisky :

Kempennet an toéz,  
Evet ul lomm whisky,  
Lakeit ar baelon de doemmein,  
Evet hoazh daoù lonkad whisky,  
Lakeit un nebeud ivl ér baelon,  
Mesket ul loé ged an toéz,  
Evet hoazh tri whisky a lonkad,  
Lakeit un nebeud a baelon ba an toéz,  
Hoazh évet 4 whisky a lonkad,  
Touézé-iet mad al lédenad,  
Klasket ur woutailhad arall a vouisky,  
Gouliet ur-ur vouiskyad arall a vouisky,  
Krampoézhiet an trohad,  
Lakeit de verùein ar vouisky hoazh... ur vurvutenn vihan,  
Lammet ar baelonad, ar grampoézhien,  
Ar grampoézhien lamm-lammet eùé ag ar blancheris,  
Krampoézhiet ar sukr,  
Lonket hoazh vouisky arall klasket !  
Toh taol koublad pramkoézh chchtu !  
Yé, yé-hed mad toah !


**N.B.** : én or bro-ni é vé kempennet krampoézh ged chistr neùé :

Ean a zo goèd ar gwir Vretoned  
Hebton n'hellant biùein  
Chomam féal d'or chistr, paotred,  
Mez gouiam en ivein.

*Ar Barzh-Labourèr*

Hunvreoù kollet


Pierre-Marie JEHANNO



An dud, èl an é ned, d'ar hourz-man ag ar blé a



Hoan ta se ùel ti a veid o ha ran té a



Hoan ta se ùel ti a veid o ha ran té a veid o ha ran té

An dud, èl an éned, d'ar hourz-man ag ar blé,  
a hoanta seùel ti aveid o haranté, (diù wézh)  
aveid o haranté

Pell doh selloù an dud kempenn un néhig braù  
Eid an énedigoù a vo red de zesau, (d.w.)  
A vo red de zesau

O na sonennoù dous, na hunvreoù ténér  
A saù én dro d'un néh, ged an Neùé-Amzér (d.w.)  
Ged an Neùé-Amzér

Nen des nitra braùoh eid kleüed an éned  
Kanein o leuiné é kreiz barroù ar gwé (d.w.)  
É kreiz barroù ar gwé.

Avèl un druhunell hoanteit em-boé un dé  
Seùel un néhig klouar eidom un daoù eùé (d.w.)  
Eidom un daoù eùé.

Ar hoall ar fall vègoù un taol arnañv zo deit  
Diskaret me hoantoù, siwah, édan an treid (d.w.)  
Siwah, édan an treid.

Ha breman dilézet, pléget me fenn genein,  
D'em hunvreoù kollet ne hran meid hirvoudein (d.w.)  
Ne hran meid hirvoudein

Ar me hent o havan strèuet, trapikkellet  
El man flour un néh peur distoket d'un amoed (d.w.)  
Distoket d'un amoed.

Be zo tud digalon hag en-des fall vègoù  
'n-des brèuet al liam oé 'trézom-ni un daoù (d.w.)  
oé 'trézom-ni un daoù.

Rag men dous me haré, ha m'hé haré eùé  
Brèuet me haranté, mouget me leuiné (d.w.)  
Mouget me leuiné

Avèl un druhunell en-des kollet hé far  
Vé gwélet liéz mad é séhein àr ar barr (d.w.)  
E séhein àr ar barr

Me zo haval dehi, chetu mé me unan  
G'em hunvreoù kollet, glaharet me halon (d.w.)  
Glaharet me halon.

✠



## GIRIOÙ-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

1-Chadenn Télé 5.- Viva el... » kleuet é Roma.

2-Bihan a dra.

3-Kalon Léon.-Hani heb penn.-Mab me moéreb.

4-Chadenn Télé é Beljia.- Média pennfollet.


5-Kêr tost d'An Oriant.

6-Ar Vatikan en-des unan eùé.-Plant huek él liorh.

7-Penn an Amérikán.-E bézhioù a zo klasket.-Noé dibennet.

8-Ur houskér a zo liéz unan.

9-Breur Total.- Anù bihan kavet é Oran !



### A-dreuz

1.- Ar hetan nijour.- (a) grabouché.- 2-Tiern meur hanùet eùé Ambrosius-Aurélianus.- 3-Diù gensonenn kavet én Taos.-An douar abézh.-Komans a hra néhansein hag a achiù é néhans.-4-Armé é kuzh én Euskadi.-Dovein heb penn.- 5.-Anemiz.- 6-De getan (é latin).- Mestro-ni ur roué.- 7-Hantér a-dâl.-Dant divogalennet.-Lenn léhiet é mané-iou Piréné 8.-Ermít é Breizh gwézhharall.- 9-Aïda kemmesket.-Néruda, di-udet !

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed** : 1-ARTE.-PAPA.-2-DISTERDED.-3.-EO.-ANI.-NI.-4.-RTB.-EMDIA.-5-HENBONT.-6-RADIO.-TIN.-7-AM.-EUR.-OE.-8.-HUNVREOUR.-9-ESSO.-NORA.

**A-dreuz** : 1-ADER.-RAHE.-2.RIOTHAMUS.-3.-TS.-BED.-NS.-4.-ETA.-NIEVO.-5.-ENEBOUR.-6.-PRIMO.-REN.-7.AD.-DNT.-OO.8.-PENITIOUR.-9.-ADIA.-NERA.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
dégemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, boulhadurezh...



**KOPIADENNOU EN HO UNAN**

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhoù  
Entreprizioù  
Ne vern plù...

**ENEZ GROE - Kambrou-ostiz(chambres d'hôtes)**  
*Digor a-hed ar blez*



3, Ar Leur'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévræoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr



# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

**Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR**

**N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E** (chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigezh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herrièu - Jobig Le Guludeg

Alfons Samson - P M Jéhanno

## DALC'HAMP SOÑJ !

**Pa dav an drouz, e kan an enean  
Quand se tait le bruit, l'âme chante**

**Mardi 11 novembre 2008  
Basilique  
de Sainte-Anne d'Auray  
15h00**

Célébration - concert à l'occasion  
du 11 novembre

Avec la participation des chorales

**Boeh Santez-Anna  
Boeh er Mor, Bubri-Melrant  
Kaloneù Derv, Kanerion er Skorv**

des récitants ar lennerion

**Jorj Belz & Jean-Paul Rieux**

et de sonneurs du Pays d'Auray

ha sonerion Bro an Alre

**André Le Meut & Dominique Le Blay**

**Meurzh 11 a viz  
Kalan-Gouiañv 2008  
Iliz-veur Santez-Anna  
3eur g.m.**

Lid - sonadeg da-geñver  
an 11 a viz Kalan-Gouiañv

Get ar lazioù-kanñ

**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépot légal 3<sup>ème</sup> trimestre 2008

INTERNET : <http://perso.lib.arty surf.fr/andoere> E-MAIL : [andoere@liberty surf.fr](mailto:andoere@liberty surf.fr)

N° 108


an

DOÉRIÉ

Priz: 4€

DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED

AR FAOUED



UR MUZEON DE VELEZ (p. 22)



SKOL- UHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)



Année de la Galice

31 juillet - 9 août

2009

Emvod Ar Gallet

Festival  
INTER CELTIQUE  
Lorient

Crédit Mutuel  
de Bretagne

banque à qui parler

## ROLL AR PENNADOÙ

KENTSKRID : <i>UN AMZER NEÛÉ</i>	P. 4
KILADENN AN EKONOMIEZ	P. 5
NA PEGEMENT A WEZ ZO AR AN DOUAR	P. 6 - 9
ISTOÉR AN ARMORIG	P. 10 - 15
HANTER KOG	P. 16 - 17
UN AEL E LOKOAL	P. 18
FABLENN : <i>AR HAZH, AR GARELL</i>	
<i>HAG AR GOUNIFL VIHAN</i>	P. 19 - 20
DARVOUDOÙ DE ZONED	P. 21 - 22
AN ARAOGENN <i>DIAR PÉ A-ZIAR</i>	P. 23
AVEID FARSAL	P. 24
SONENN " <i>TRI AVALIG RU</i> "	P. 25
GIRIOÙ - KROEZ	P. 26



Spilhennig « Ofis ar Brezhoneg »

Kirieg é peb skrivagner a veid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennou an doéré

### Kentskrid

#### Un amzér neùé

Ged an neùé-amzér é kavam éndro an déioù kaer, toemmdér an héol, ar mézoù lan a hlazadur neùé hag an éned é richanal kentézh èl an dé.

Dihunet ha freù om-ni eùé deusto d'an dièzemantou skriùet é pajennoù a zo de heuli édan titl « Kiladenn an ékonomiezh » hag a laka kement a dud én dilabour. En niverenn-man é kaveët pennad-skrid Fañch Loeiz hag a houlenn genem ped wéenn a zo àr an douar.

Kenderhel a hra Loeiz ar Mouël, d'é du, ged « Istoér An Armorig ». E kantvleadoù

seizh kant éh arriùam geton ha surwalh é vo lénnet ged eùézh istoér tud a oé é karg én amzér-sé.

Arlerh é ta pajennoù skañvoh a zeliéhé plijein eùé d'an oll.

Lénnet a veint épad tolpa-dou An Doéré saùet aveid é houmananterior hag o mi-gnoned...

Tolp-blé ar gevredigezh a vo ar blé-man dé an Asansion, d'ar yaoù 21 a viz mae.

Kaset ar folenn distag, heb gortoz, eid ma helleem gouied pegement a dud a vo aveid ar pred. Trugaré én araog...

⊕

Aveid reneùécin ho koumanant kas ho chekenn a 16 pé 15 euro de : An Doéré 8, Avenue Jules Le Guen 56 260 An Arvor  
pgz : 06 63 55 30 39 Mail : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)  
Trugaré vraz d'ar ré a gav lénnierion pé koumananterior neùé.  
Grès dehé é hellam kenderhel, ha kenderhel a hram ged plijadur penn-dé-gwir éma aveid gouarn biù or yézh.

### KILADENN AN EKONOMIEZH

- An dilabour é kreskad -

De getan, laram ur blé-so, éh oé komzet ag ar « **subprimes** » amérian. « Danjér erbed aveidom-ni », a laré or ministred ; an dra-sé a sellé an Amérianed hag en-doé prestet argant d'ar ré a faoté dehé seùel o zier heb gounid a-walh. Pen dé deit dehé ar hourz de rantein an argant, kresket en-des ar sommoù dibé é meur a di-bank. Red é bet d'ar Gouarnamant U.S. prestein d'ar ré-man kandoù miliard a dollars.

Épad an amzér-sé on-es disket penaoz on tiér-bank-ni o-doé prénet titloù *subprimes* ha goulennet ma vehent bet sekouret ind eùé, kenevé-sé é vehent kollet, ha kollet argant o ostizion. Ar gouarnamantou ag an Europa en-des groeit èl én U.S.A. Reit o-des argant d'an tiér-bank. Med deit é breman ar ré-man de voud eùéhusoh, hag ar réolennoù aveid pres-tein an argant a zo strihoh. El-sé é vé bihan-

noh a argant aveid ar brénerion hag an entreprizioù.

Chetu perag éma ar ré-man é tigreskein nivér o fostoù-labour : 90 000 anehé kollet é miz genvér ha 80 000 é miz huavrér ! Hâni ne oui pegourz a achiùo ar fall amzér.

En hé niverennoù devézhan é laré « An Doéré » penaoz n'helleem ket implé trezolioù an douar heb sonjal erhad d'an efedoù é arriùo. Mall braz é d'an dud é karg mes-troniein ar greskans.

Ged an taol-goahad-man, pé taol-kriz, éma deit ar hourz de chanjein réolennoù an ékonomiezh, ha ré an argant, ha rein an tu d'an oll de viùein gwel heb fondein madoù an douar... Ar « *challenge* » a vo dièz de zerhel : eid diwenn al labour éma ar gouarnamantou é adlans an ékonomiezh, é tispignein muioh a argant hag é kreskad o deléioù...édan ar riskl vraz a rein dièsoh hoazh ar bléiadoù de zoned.....

## NA PEGEMENT A WEZ A ZO ÀR AN DOUAR ?

(Pennad-skrid François Louis)

Ha gouied a rit pegement a wez a zo àr ho pezhiaed douar, èr léh m'en-dé savet ho ti ?

Graet em eus un tammig esae da gontañ e ma fenn : di-aes eo lâret ar respont, rag petra eo ur wezenn ? Koad ivo a zo gwez ? Na koad kelenn, pa nend int ket c'hoazh en o ment – ha lod-kaer anezhe a chom bihan a-walc'h hir-hir amzer... ? Lâramp ne vo ket sellet èl gwez ar plantennoù n'o deus ket un troad teñv awalh, unan nebeutoc'h evit daou vetr bennak a uhelder awael.

Neuze, gelliñ a ran lâred eh eus teir gwezenn « arru » àr ma zamm douar-mé, hag un tregontad a re vihan, re plantet din a-c'houde ma hon eus eñ prenet.

Da lod, siwazh, e vo aes awalc'h kontiñ : ar re a viù èn ur ranndi n'o deus ket haññ, 'met ha vehe marse un tammig bonzai àr o balkoñ, ma nend eo ket act c'hoazh get ar

sec'hour (dañjer erbet a gement-mañ an hañvezhioù-mañ...), ar skom, pe ar c'hleñvedoù... Ar re a viù en ur c'harter nevez savet, tost d'ur gêr vras bennak a vo aes awalc'h dezhe kontiñ ivez : d'ar liesañ, ne vez ket lec'h da galz muioc'h evit ur wezenn pe ziv da greskiñ a-barzh... Met mem ar re-mañ a c'hell kontiñ pegement a wez a zo en o c'harter, rag bremañ, dre voneur, e vez plantet gwez get ar c'humunioù un tammig e pep lec'h er bourc'hioù hag e kêr. Get an traoù-mañ e kreska un tammig an niver a wez en-dro d'an den. Mad, erbat eo, ne ra ket c'hoazh kement-mañ kalz a wez dre zén...

Rak ar goulenn a faote din gober genoc'h a zo : pegement a wez a zo holl dré an holl àr an Douar (pas-ket àr ho touar-c'hwi, an Douar, get un D braz) ha pegement a wez, neuze, a zo dre zen àr an

Douar ? Petra a soñjet hwi ? Daousto an niver-mañ mand eo uhel : mil gwezenn, dek mil gwezenn dre zen ? Pe neuze izel : ur wezenn, pe marse mem nebeutoc'h, dre zen ?

Lod a lâro : nend eus ket moiand gouied ! Bo, moiand a zo... Un ugent vlez 'zo bennak he deus an NASA en em rantet kont eh oa brav awalc'h monet da vregoñsal àr ar Loar, d'ober troiadoù bale kostez ar blanetenn Meurzh pe mem pelloc'h, da gavout Pluto... Met he labour a oa ivez soursial un tammig doc'h hor planetenn-ni, an Douar. En em dapet o deus tud an NASA neuze da denniñ fotoioù a lein an Douar ag o satelitoù. En em avizet o deus ne vez ket dameuc'het gouloù an heol er mem feson hervez ma sko àr ar mor, àr an douar, àr ar jimbl... hag àr ar gwez. Get an traoù-se o deus gellet kartenniñ é-menn eh eus gwez àr an Douar. Lod a lâro nend eus ket netra nevez nag

estlammuz en tamm doere a zisplegan dirakte amañ : kartennoù sort-mañ hon eus rac'h gwelet a-c'houde gwerso... Petra a za hennañ d'hon lakaat da goll hon amzer – ha da zismantr paper, ha neuze gwez ! – get é sorc'hennoù bobion ! Gortozit un tammig, tud vad, laoskit-me èlkent da ziviz ma zraoù !

Hama, get ar fotoioù-mañ en-deus gellet tud an NASA kartenniñ e men eh eus koadoù bras ha bihan (« Ya, lâret hoc'h eus kement-mañ c'hoazh tuchant, begeg milliget ! ») ha gellet o deus ivez, get o fotoioù resis-resis, diskoueziñ é-menn, e kêr, en ho karter, en ho liorz-c'hwi, ha mem àr ho palkoñ, eh eus gwez ! Aaaa ! bremañ e chomit mud, hama ! Degaset em eus daou veg deoc'h, hama ?!!

Kement-mañ en deus roet c'hoant da Nalini Nadkarni, ur gelennerez a Evergreen State College e stad Washington, da welet ma oa tu ha moiand kontiñ pegement a

wez a zo ar an Douar. Kroaziet he deus studiadennoù diâr stankter ar gwez get ar pezh a lâr ar fotoioù-se graet get an NASA, ha kavet he deus eh eus 400 246 467 381 a wez ar an Douar ! Pas, eh on é farsal, me en deus ijinet ar sifroù diwezhañ en nivermañ : Nalini Nadkarni a lâr eh eus troioù 400 miliard a wez ar an Douar.

Ur bochad eo ? Bihan eo ? Pandeogwir nend on ket-me ur mad da galkuliñ em eus kemeret ma jederezig, ma c'halkulet mar karit. 400 miliard a wez ar an Douar, ni 'zo-ni 6,5 miliard a dud... Kavet em eus e ra kementmañ ar-dro da 61 gwezenn dre zen.

Ur bochad eo ? Bihan eo ? M'am behe bet-me lâret e vehe bet muioc'h... met nend eo ket re fall, ur sort. Nend eo ket re, rag ni 'ra ur bochad traoù get koad : hon treustier, hon tier memp, muioc'h-mui, hon gloestraj, hor paper, toemmet a raamp hon tier get koad... Ur bo-

chad gwez a zo rekis da bourveziñ d'hon doberioù. Lod a reka muioc'h evit ar re 'rall : an Amerikaned a reka 27 gwez muioc'h a baper evit ne ra tud India, dre skwer.. Tud Japan a ra get bazhigoù koad evit debriñ : 40 miliard a vazhigoù a daolant beb blez. E China emaint nive-rusoc'h c'hoazh : 900 miliard a vazhigoù koad a ya d'an toull streved gete bep blez, da lâret eo 25 milion a wez...

Lod a sponto : « Arsavamp a fondiñ koad evel-mañ ! Tuchant ne vo ket mui gwezenn erbed ar an Douar ! ». Marse 'walc'h... Ha neoazh : boëmet mat e vezen-me seul gwez ma sellan doc'h fotoioù ag ar vro tennet kant vlez 'zo pe oc'hpenn ; hama, un dra a daolan evezh dezhi seul gwez pe 'gozik eo pegen noazh e seblant ar vro bout bet neuze. Ha da ouiet ma nend eus ket muioc'h a wez bremañ evit ne oa gwezharall, daoustou d'an ad-

lodenniñ, pe d'ar *remañbre-mant*, a zo bet a-c'houde ?

Met gwir eo ema red gober ar pezh a c'hellamp evit armerzhiñ koad. An Alaman-ted, dre skwer, en-deus ijinet ur meni follenn elektronek, unan plastik ha plegapl, a anado armezhi bemdez an doereioù ag an deiz : ar re a ray geti n'o do ket ken afer a breniñ ar journal paper, enta. Mar disoc'h ar gompagnunezh alamant-mañ get he fennad e vo arboellet milio-noù a wez evel-se en amzer da zonet... adal ma vo c'hoazh petrol d'ober plastik ! Met un afer arall eo hounañ.

Doc'h an tu 'rall, koad nend é ket evel petrol : un danvez é renevezapl. Petra a barra doc'homp a lakaat ar sifr 61 da greskiñ da 62 pe da 70 en ur blantiñ gwez ? Netra nemet ha vehe marse ar lure (*la flemme*) en-des an dén da vonet er maez get an amzer fall a ra deomp d'an termen



*Brawité ar wezenn bêw*

-mañ ag ar blez, d'ober un toull evit lakaat ur wezenn vihan a-barzh. Lâret 'vez penaos toemmed an ti get koad a zegas gwrez d'an den dre ziv wezh : ar wezh gentañ a pa vez an den ar-dro koad, an eil gwez a pa vez ar c'hoad é loskiñ én oaled. Evit lâret mad e teléehé boud kresket un deirvet gwez : a pa vez an den é plantiñ ar wezenn ivez, rak d'ar liesañ e serrer un c'hwezenn éc'h ober an toull ! Ha graet mat eo an natur, pa soñjer mat : pegoulz e vez plantet gwez ? D'ar gouiañv, a p'en-des dober an dud en em doemmed. Bec'h arnehi, paotred (ha merc'hed ivez) !

## ISTOER AN ARMORIG

**Judual** a hellas neuzé ad-kemér kadoér é dad Iona, èl penn-tiern an Domnonéa, mez deli a hré anzaù mestroni ar Franked ! E Bro-Wéned, ar vestroni a oé deit de vMéliàù, ur brér de gKanao-Konomor. Téhet en-doé a-dal d'è vrér, aveid salvein é vuhé, ha deit a oé de voud kloéreg é Gwéned; ret a oé bet mem dehon ar garg a eskob, ged bennoh Félix, eskob an Naoned. Mez kentéh marù é vrér Kanao, keméret en-doé éndro, àr un dro, é bried ha kadoér-veur é dad, én ur zilézal é vroh hag é

### Waroch

E vab Waroch en-doé neuzé keméret é léh, èl rénour bro-Wéned, hag um ziskoeit en-doé abenn èl un énebour d'ar Franked, én ur rahuizein de Chilpérik an droug-kennig deliet dehon. Arriù a hras enta lu ar Franked àr ribloù ar Visnonia (*Vilaine*), mez Waroch a zas de benn ag o breù-

vah-eskob...deusto de glemmoù an dud a iliz, é Gwéned hag én Naoned !

Rekiz a oé bet de vMéliàù um ziwenn grons doh soudarded Chilpérik, roué ar Franked é Soissons (561 – 584), mez deit a oé de benn, ursort, a vired emrenerezh ar vro, é kornad bro-Gwéned, a-dal d'ar honted stalet é Gwéned, é Roazhon hag én Naoned...betag ma en-doé koézh-het, éan eùé, édan taol gléan ur multrér, heb ne ouiér ma oé bet lahet dré ur Frank, pé dré ur Breton èldon !.....

ein ! Hag, aveid distañein o houmar, um ziskléri a hras féal dehé...kent um seùel éndro éneb d'o mestroni, én ur voned de zismantrein kornadoù a vro-Roazhon, hag a oé édan o bili. Neuzé en um geméras eùé doh ar Franked hag a zallhé ar gér a Wéned hag a lakas ar gér édan mestroni ar

Vretoned, aveid ar wézh ketan (ér blé 577 pé 578).

Ar Franked a gemenn neuzé de Beppolen, kont an Naoned, kerhed éneb dehon, àr douarou bro-Wéned, épad ma um gemér Waroch doh kériadennou ha kér an Naoned, deusto d'an doujans braz endes é kevér an eskob Félix (579).

Félix a oé neuzé eskob an Naoned, ha kempennet en-doé pikol labouriou aveid ésad buhé pamdéieg an dud, ha brauad ar gér. Diléhiet en-doé mem réd al Ligér, ha saùet milinioù àrmehi. Saùet en-doé eùé un iliz-vamm forh brudet ér Gall abézh : an doenn a oé bet goleit a stén tennet a gCornow, é Breizh-Veur, ha splannein a hré kement, édan térennou an héol hag al loér, ma seblanté boud groeit é folennoù argand... Ker brudet a oé Félix, ma en-doé gellet parrad doh lu Chlotaire a obér troiad-laeroni erbed, p'o-doé treuzet ar gér, àr o hent trema an Domnonéa...

Ardro an heveleb prantad, Judual um geméré, éan eùé, doh ar Franked é bro-Roazhon, ha diskennet en-doé mem àr douarou an Naoned, én ur laerad dehé ar vendem hag a oé bet lakeit ér fustou ! Bro-Roazhon ha bro an Naoned a oé deit de voud dañué ar brezél étre ar Vretoned hag ar Franked !

Ar roué Gontran (561 – 592) a oé forh kounaret. Kas a hras enta ul létenant de Roazhon aveid ad-kemér ar gelloud ér gér-sé, ér blé 586, mez heb goumid...dré ma oé Frédégond, pried Chilpérik, a du ged ar Vretoned. An emgann dégouézhet étre lu Gontran ha soudarded Waroch a oé bet ker kri ha spontuz ma ne oé ket chomet hañi biù é neb tu !

Neuzé éh oé bet kaset diù lu neùé éneb de Waroch, édan kemennou Beppolen, kont Roazhon, hag Ebraher, kont an Naoned. Bourdet é maréziou ar Visnonia, Beppolen hag é dud a oé bet lahet, heb diézemant. Ebraher a arriué

neuzé ér gér a Wénéed, ha dégeméret a oé bet dré an eskob Régalis, hag um glemmas dehon a fallanté ar Vretoned, a p'o-doé skrapet ar gér d'ar Franked ! Waroch a oé neuzé ar an diwenn : goulenn a hras enta ar péah, én ur hennig rein dehé un né dehon, èl ostiz...épad ma dolpé é soudarded, hag o laké de fardein ar Franked, chomet é kosté ar Visnonia (*Vilaine*).

Chom a hré enta Waroch ar mestr é Gwénéed, ér blé 590, ha Bro-Wénéed abézh a oé breman édan mestroni ar Vretoned, aveid ar getan gwézh ! Bro-Wénéed a zas neuzé de voud hanüet Bro-Waroch (Bro-Ereg).

E penn devézhan an 6vet kantvleád, Hoël IIIvet, mab Judual, a rénas én Domnonéa goudé é dad (594). Ansaüet a oé bet èl "Roué-Meur Breizh-Izél". Chom a hras ar é gadoér-veur\* épad 18 vlé heb boud kalz treboulet, deusto d'ar brezél saüet neuzé dré Waroch (Guéreg) hag intañet, taol ha taol, étre an tierned

breton hag ar honted frank, aveid kemér, diwenn ha kemér éndro, kériou Roazhon hag an Naoned. Chom a hré d'al liésan, me gred, ar gériou-sé étre daouorn ar Vretoned, rag ar Franked en-doé neuzé kollet kalon, épad degvleádoù devézhan ar rouañé tennet a ouenn Mérovée.

Merüel a hras Hoël IIIvet ér blé 612, ha seüel a hras neuzé brezél étre é 22 a vugalé. An hanni kozhan anehé, Judikaël, a oas digadoéret dré é vrér Salomon, deit enta de voud rénouer an Domnonéa (ha kontelezh Roazhon), betag é varü, ér blé 632. Judikaël, hag a oé deit de voud menah én atretan, a azéas éndro neuzé ar gadoér-veur é dad, hag a ziwennas é droèdoù éneb d'ar Franked. Galüet de Bariz dré Dagobert (629-639), kousantein a hras kempenn ur feur\* neüé étre an Domnonéa ha rouantelezh ar Franked...Deit de voud kozh, kemér a hras éndro an hent de vénati Gaël, hag azé é variás èl ur sant, ér blé 658.

E vab Alan II-an-Hir a geméras neuzé é léh, èl roué an Domnonéa (ha Breizh-Izél), mez chom a hré dizurh ha treboulou braz étre an oll tierned...an héveleb tra èl ged devezhan rouañé ar Franked a ouenn Mérovée ! Hag an traou a chomas èl-sé betag donedigezh ar Peppined, é kreiz an 8vet kantvleád. Ar ré-man, én o mesk Peppin-ar-Berr (741-768) hag é vab Karl-Meur (768-814), a venas abenn diskar gelloud ar Vretoned, ha lakad ar vro a bézh édan o mestroni, én o forsein de béein an droug-kennig deliet. Peppin-ar-Berr a ziskennas enta de Vreizh-Izél, ér blé 753, hag a skarzhaz éndro ar Vretoned ag ar gér a Wénéed, hag a gontelezhioù Roazhon hag an Naoned.

Geté é saüas ur rann-vro neüé hanüet « Marca-Britanniae », de lared é « Harzou-Breizh », aveid tâlein de hoask ar Vretoned, édan bili ur préfed. An hani brudetan anehé a oé bet Roland, an

hanni a goézhaz é Roncevaux, édan biroù ar Was-koned (ér blé 778).

Hag, èl ma ne oé ket péet atau an droug-kennig deliet, Karl-Meur a gasas éan eüé, ul lu édan kemenn Audulph, ér blé 786, aveid forsein hoazh ar Vretoned de béein an tao-soù deliet.

Ar ré-man a chomé atau én disurh : èl-sé Rivod, kont ar Pohér ha Bro-Kerneü, en-doé lahet é vrér Méliäu (792), hag anséet diskar eüé Mélar, mab Méliäu, é obér trohein dehon é vréh dehoü hag é har glei...hag an tierned a zalhé de rahuizein an droug-kennig deliet de gKarl-Meur !

Arriü a hras neuzé é Breizh-Izél Guido (Guy), ér blé 799, ged ur pikol lu, aveid spon-tein ar Vretoned, hag o forsein de blégein, ha treuzein a hrézant an oll kontelezhioù ér vro, én ur zismantrein kement tra, par ma hellent. An tierned breton a seblantas plégein, én ur voned de dTours aveid diskléri o féalded d'ar Roué-Meur...



Ar mem tra a zégouézhas hoazh ér blé 811...ha rah ar vro a oas, hoazh ur wézh, dismantret édan treid ar soudarded frank, ha breùet : peurkeih Bretoned !

Karl-Meur a oé bet kouronnet Empelaer ar Hornog ér blé 800. Pe variás ér blé 814, é rouantelezh a goézhaz étre daouorn Loeiz-an-Dévol, kouronnet, éan eùé, Empelaer. Neuzé tierned Breizh-

### Murman

Um glemm a hré an Aotrou Kont ag an Naoned, Lantbert, gouarnour Harzoù-Breizh, a obéroù-distruj ar Vretoned àr douarou ar Franked, é broiou Rouazhon hag an Naoned.

An Empelaer a gasas enta an abad Witchar de gaved Murman, aveid ansé er lakad de blégein. Mez, aliet dré é bried, Murman a lasas d'an abad penaoz ne labouré ket douarou ar Franked, ha ne gousanté ket enta dégemér o lézenou" !

Izél um dolpas, hag a glaskas penaoz diwenn ar vro doh goask ar Franked. O disunaniezh a oé, a daol sur, ur merch ag o goannedigezh : um emgleùed a hrézant enta aveid hanùein ur penn-tiern éan o mesk, ha rein dehon ar gelloud. Dibabein a hrézant neuzé Jarnitin, mac-tiern é Bro-Waroch, èl penn-tiern Breizh abézh, ha goudé Jarnitin, Murman (*Morvan*).

Kounaret é reseù ar reskond-sé, Loeiz-an-Dévol a gerzhas neuzé ged é lu vraz, aveid um gemér doh ar Breton disentuz. An emgann a zégouézhas é Priziag, é kosté an Ellé, étre lu dinivér an Empelaer, ha stagadenou goann marhegerion Murman, ha Murman ér penn anehé...

Alas ! un taol bohal-daoùdu\* a vreùas penn Murman épad ar foèterezh, hag èl-sé é variás penn-tiern ar Vretoned, dibennet dré ar Frank Coslus. Ar soudarded breton

a déhas kuit neuzé, àr gein o ronsed, tréma koèdou don kreiz ar Vro...hag ar bratell-brezél a chomas édan gelloud ar Franked (818).

Ar ré-man, goudé an emgann, um lakas, hoazh ur wézh, de zismantrein ha flas-trein ar vro abézh. Neoazh, deusto d'ar gloéz gouzañvet ged an dud, dalhet a vo sonj, pell amzér, a vMurman èl ag

### Wiomarch

Arlerh Murman, lazhet é Priziag, éh oé bet dibabet ur penn-tiern arall, **Wiomarch**, hag a rahuizas, éan eùé, pécin an droug-kennig deliet. Rekiz a oé bet enta, hoazh ur wézh, dégas de Vreizh-Izél ul lu neùé, aveid hé lakad de blégein (825). Féahet a oé bet Wiomarch, èl rézon, mez chom a hré ataù ar vro éan hé saù, ged ar vennanté de ziwenn hé frankiz, deusto d'ar gloéz gouzañvet. Chom a hré hoazh Wiomarch é buhé, ha vennein a hras mem Loeiz-an-Dévol en inouerein, deusto

ur penn-tiern doujet ha karet. Inouret a vo èl **Léz-Breizh** éan ur werzenn a Livr ar Barzaz Breizh.

Neuzé é tas eùé Matmonok, abad Landévenneg, de wéled an Empelaer àr riblou an Ellé. Ha kousantein a hras, doh goulenn Loeiz-an-Dévol, dilézel gizioù ha lidoù an iliz keltieg, ha dégemér ré an iliz gallig...

d'ar vrazanté en-doé diskoeit é kevér ar Franked...Lazhet a vo neoazh, éan é zevézhan kastell, dré an aotrou Kont Lantbert...Neuzé é sonjas an Empelaer é hellé dégas ar péah étre Breizh ha rouantelezh ar Franked, ged hanùein ur **Breton èl Gouarnour an Empelaerezh** é Breizh. Ha choéj a hras un dén a noblans a vro gKerneù aveid derhel ar post-sé, **Nominoé** (826).....

(de genderhel.....)

*Loeiz Ar Mouël*

## HANTER KOG (sorbienn Raf Pondi)

Chetu hirù ur sorbienn em-es kleüet ged ur vouéz gozh a zé gwéhavé de serrein koed sêh én harz d'ar gerhiér de gaved ti me zud.



Boud a oé én ur pennhér ur hogig bihan, ken bihan ma vezé leshanüet « Hantér Kog ». Med spered en-devoé èl kant yar, hag en diskoein a hras emberr d'é vestr. Hennen a brestas un dé kant skouid d'ar Roué péhani, èl kalz a rouéed arall, a ankoézhas o rantein.

-« Kerhet hwi de glask me argant, Hantér Kog, a huchas an dén d'al

loñig, ha surwalh ne gollèet ket genein.»

-« Dohtu éh on àr an hent, ha doned a hrein de benn, pé trohet me goug dein» a reskond ar hogig.

Ne oé ket hoazh pell pe gavas al louarn a vord un toull-boh.

-« Emenn éh et hwi èl-sé, Hantér Kog ?»

-« De di ar Roué de glask kant skouid me mestr.»

-« Kaset mé genoh».

-« Mar karet abenn : frammet é me goug ha m'ho kaso.»

Kentéh groeit ha chetu ind o daoù ged an hent. Un tammig pelloh chetu eañ é kaved ar bleiz a oé é obér lonsoù àr drezoù é loñj.

-«Emenn éh et Hantér Kog ?» a houlenn al lon du.

-«De di ar Roué de glask kant skouid me mestr ! »

-« Kaset mé genoh ! »

-« Ged plijadur, kanderù, frammet é me goug ha m'ho kaso. »

El-sé groeit ha chetu ind àr an hent betag en em gaved ged ur hoèh deur sklér.

-« Emenn éh et hwi Hantér Kog èl-sé ?» emé ar hoèh.

-« De di ar Roué de glask kant skouid me mestr ! »

-« Kaset mé genoh ! »

-« Sammet mad on dija, med deit atao, frammet é me goug mar gellet.»

Chetu enta ar hoèh é obér èl al louarn hag ar bleiz, hag é tigoézh Hantér Kog ged é gorvad doh dor ar Roué. Skoein a hra : Tok ! Tok ! Tok ! Tok !

-« Più a zo azé ? » a huch ar portéour hantér kousket àr an trezoù. « Ha ! hwi é, Hantér Kog, gwell a vehé deoh pellad rag ar Roué a zo doh taol é mérennein ged é duchentil; ne houlenn ket boud distroeit ag é friko.»

- «Kant skouid a zeli d'em mestr, ha deit on d'o hlask.»

Ar Roué a gleüas an trouz : «Digoret an nor d'an Hantér Kog, emé éan én ur skrignal, ha boutet éan ér gludell ged ar yér arall.»

An neb a oui penaoz ar yér ne garant ket un estrén : chetu ind é fardein àr ar peurkêh lon a daolou pigos hag a daolou krabon.

- «Louarn ! Louarn ! deit d'em sekour, a huch Hantér Kog, petremant éh on marù !»

Al louarn a strimp dohtu ér mêz, a saill àr ar yér fall, hag emberr émant kempennet dehon én é gov. Ar Roué, é kleüed an

Doéré, a déras ru ha éañ de hour-hemennein :

- « Boutet éañ ér hraoù, émesk an deved, ar ré-man a zeï de benn aneohon ! »

E kraoù an deved ne oé ket a harz : émant rah é voned dehon de glask er flastrein.

-« Bleiz ! Bleiz ! deit d'em sekour, a huch Hantér Kog, petremant éh on marù.»

Ar bleiz a strimp dohtu ér mêz, a blomm àr an deved fall, hag emberr émant kempennet dehon én é gov.

Goahoh pé goah éma kou-naret ar Roué é kleüed éma taget é chetal. Gobér a hra kempenn un tantad blaoazhuz aveid restein al loñig. Hennen a zo tapet ged ar Roué; éma dirag an tan.

- «Goéhig ! Goéhig ! deit d'em sekour, a huch Hantér Kog, petremant éh on marù !»

Ar hoéhig a strimp dohtu ér mêz, en em laka de skuill, de skuill, ken ne oé bet béet emberr an tantad, ar Roué hag an oll duchentiled frikoterion.

El ma ne oé ket mui roué erbed dré ar vro, Hantér Kog en-des galvet é vestr péhani a zas neuzé de voud roué. Kavet a oé bet sahadoù argant...ha geton groeit jilori épád ar suhun...

## AN AEL É LOKOAL :

Eh oén neuzé é Lokoal-Mendon. Porzh ar person a zo tostig tra d'ar vèred ha d'an iliz. Un hent goudronet a ya adal ar vorh betag « *La Forêt* ». Emesk ar gwé, just étal ar mor, éh es un manér, hag un « Aotrou Braz » ged spered Pariz én é benn. Disprizein a hra ar Vretoned !

Unan ag é vugalé a zo douget d'an taolennoù liüet ha éan a garehé ma vehé trèset (*peint*) aveitõn un daolenn gaer hag a zisko un ael. "Oll ar sent, a lar éan, en-des delüennoù kaer, é mein pé é koèd, perag ne vehé ket groeit un delüenn aveid diskoein unan ag ar hantoù mil aeled ag ar Baradouiz ?"

"Ema ar wirioné genoh !... med, an Aeled n'o-des ket korvoù, penaoz gobér ur foto anehé ?"

"Ém lévr katekiz éh es un daolenn a Zoué an Tad, perag pas ag un ael ?" „Gwir é !... « Hwi a anaù ur liüour (*peintre*) mad ? »

« Ya, surwalh, Xavier de Langlais ! »

« Hama, laret dehoñ gobér un ael ! »

Tri miz goudé éh oé groeit, ha kaset de berson Lokoal. Langleiz a anaüé mad Loeiz Herriü, tad Mériadeg.

De getan, éh oé lakeit an delüenn é kreiz ar vèred, é kosté ur groéz vraz, hag oll an dud a dreméné ar an hent a yé de wéled an ael braz, liüet fiskal ar an daolenn-hont...

Ar liüour a zé beb sul de Lokoal d'an overenn, hag a yé goudé de wéled an Ael braz. Ha ged plijadur é che-laoué doh komzoù ha doh sonjoù an dud. Eleih ag an dud abil a laré :

« Med, perag e hwes-hwi lakeit botoù lér d'an ael braz-sé ??? Ha gwélet e hwes-hwi biskoazh un ael ged botoù lér ???! « Na hwi !! Ha gwélet e hwes-hwi jaméz un ael heb botoù lér ??? »

Hag an oll dud a hoarhé a végad. *Mériadeg*

## AR HAZH, AR GARELL HAG AR GOUNIFL VIHAN

Ur gaer a baléz en-doé ar gounifl  
Mez, un dé, an intron garell,  
Dré un dro kamm, er heméras aveiti ;  
Ne oé ket ar vestréz én ti,  
Na êz neuzé er lemél geti !  
Kas a hras hé madoù kaerañ  
D'ar paléz-sé, prontan gwellañ !  
Yannig bihan a zistro  
D'an toullou don ha tioél,  
Léh ma viüé a-houdé gwerso.  
Ar garell en-doé lakeit hé fri ér mêz,  
Ha seüel a hra hé bouéh :  
« Petra é wélan-mé é toned ! »  
"Hola ! Intron ar garell ! Skarzhet oll ho madoù,  
pé éh an de velzein oll ar razhed ag ar vro !"  
Hag an intron beg-hir a eilgiras :  
Reit é bet an douar d'an hani ketañ a ya abarzh  
ha, nag é vehé ur rouantelezh ;  
« me garehé gouied pé lézenn en-des hi reit,  
« De Baol, de Bièr pé de Jojob  
« Kentoh eid dein-mé.  
Lézenn ar vro en-des hi reit dein-mé !  
Ha neuzé, de betra huchal hirroh,  
Dam de houlennged kazh-meur ar vro ;  
Ya, ur hazh braz ha kriü a oé,  
Disket mad, kaloneg, spered digor,  
Ha Yann Kounifl zo akord d'er hemér, èl barnour.  
Ha chetu ind o daouig dirag an tad-gazh.  
Ged doustér é lar hennen dehé : ⇒

⇒ Mem bugalé, tosteit dohein,  
 Ya, tosteit, rag koll a hran me hleüed,  
 én arbenn ag ar gozhoni. Hag an diù gounifl a dosta, a dosta,  
 heb doujans, heb doujans erbed.  
 Ha kentézh ma oent arriù, étal ar hazh barnour,  
 Hennen a saù é zaoù baù àr un dro,  
 A skrap, a denn, a chak, a lonk an diù gounifled-hont  
 A glaské de voud barnet.  
 A ziar de La Fontaine – ged Mériadeg.

Petra é ur garell ? Diù sort anehi a zo :



belette



- ar garell (*belette*, é galleg) :  
 ul lonig bronneg, debrouer  
 kig, pan mélen-rouz àr é  
 gein, kov gwenn...Ardro  
 17 santimetr a vuzul.  
 Biüein a hra én Azia,  
 Europa hag Afrika.

- ar garell-vraz (*fouine*, é  
 galleg) : lonig bronneg, pan  
 griz-rouz, berr àr é baùoù....  
 Muzulein a hra 50 sm., heb é  
 lost.  
 De noz éh a ér mēz ha fardein  
 a hra àr ar yér én o hludoù.

Boud a zo hoazh loned tost dehé : an erminig, ar pudask (*putois*),  
 ar sebelines, ar martr...

## AN DARVOUDOU DRE AR VRO

### 2 – Kan Ar Bobl :

D'an 4, 5 ha 6 a viz ebrel  
 (*imbrill*) en-des achiüet é Pon-  
 di an abadennoù heuliet dré  
 Vreizh épad ar suhunioù hag  
 ar mizioù devézhan.

800 a gañerion, soñerion ha  
 korollerion...a zo deit de Bon-

di, hag én o mesk tud yaou-  
 ank, èl ré ar 27 skol a zo bet é  
 kenstrivein (*concourir*)...

Meur a briz a zo bet reit  
 d'ar hañerion ha soñerion ag  
 an dibab.

Buhé hir de "Kan Ar Bobl"...

### 3 – Perhinded ar Vrezhonegerion é Santéz Anna d'ar sul 26 a viz ebrel (*imbrill*).

Ged an overenn de 11 eur é  
 komanso ar perhinded. An  
 tad Méliau Guillaume a vo al  
 lidour ha predégour. "**Boèh  
 Santéz Anna**" ged an Tad  
 Adrien Collet, ha "**Boèh ar  
 Mor**" a Bléhéneg" a sekouro  
 geton aveid ar hañennoù.

D'enderù, de 3 eur, é vo  
 kinniget ar chapeled d'ar ber-  
 hinderion, ha kentézh arlerh,  
 de 3 eur ½, ar gospéroù.

Kousteléam é vo hoazh ni-  
 veruz ar Vretoned fidél d'al  
 lidoù é brezhoneg é Santéz  
 Anna.

### 4 – Tri hant vlé Iliz Parréz Sant-Loeiz én Oriant :

- d'ar gwénér 8/5 é tei  
 « Kañerion Pleuignér » de 9  
 eur de noz. O hleüed kañein a  
 zo dalbéh ur blijadur vraz.

- d'ar sul 10, daoù zé arlerh,  
 é veint eüé én overenn-bred  
 kañet de 11 eur ¼, lidein tri  
 hant vlé an iliz-parréz.

## 1 – Genom-ni, Dé An Asansion é Bubri, d'ar yaou 21/5

El beb blé é vo dalhet Tolp-Blé “An Doéré”, de 9 eur ½ ér sâl « Ti-Parréz ».

Lidet a vo un overenn é brezhoneg de 11 eur é iliz parréz ged an Tad Méliou Guillaume, person Melrand, ged sekour « Kañerion Bubri/Melrand. »

Kentéh arlerh an overenn é vo servijet ur pred é « Ti-Ar-Goualleg ». Kañennoù, soñennoù ged muzik, sorbiennoù, fablennoù... a hrei plijadur d'an oll.

Kaset abenn ar folenn dis-tag, mar plij genoh.....

## 5 – Gouél Sant-Iwan d'ar sul 24/5 é Sant Iwan-Bubri.

Un overenn a vo lidet é brezhoneg, de 10 eur ½, én inour de Sant-Iwan. Lidet a vo àr un dro an 420 ved blé ag an iliz. Baniéloù chapélioù Bubri ha Melrand a zigoro ar bréhésion.

Goudé an overenn é hello an dud tañoad ar « Rost ar Forn » aléjet aveité, àrdro kreité ½. ; ha tro-an-enderù é helleint kemér perzh ér ur Fest Braz kempennet ged tud ha soñerion ar vro.....

### E Muzéom ar Faoued :

Étré ar 5/4 hag ar 24/5 éma kinniget dem ur haer a ziskouézhadeg (*exposition*) ged liùajou, trésadennou, stampou...ohpenn kant anehé hag a zisko buhé ar Faouédiz gwézarall. Nag un dro-balé dudiuz ! Ohpenn tra é hellér kas an dro-balé de chapel Santéz Barba, ul léh ag ar haerrañ !

Ar Muzéom a zo léhiet 1, straed Kemper (étal plasenn ar Hovu).

Pgz : 02 97 23 15 27 - [www.museedufaouet.fr](http://www.museedufaouet.fr) -

Mail : [info@museedufaouet.fr](mailto:info@museedufaouet.fr)

## TROIOÛ-LAVAR

### An araogenn DIAR, pé A-ZIAR :

- 1 – a zo impléet (*implijet*) pe senefi « kemér pé doned a... »
- kemér diar an daol
  - seùel taosou diar an dud
  - diskenn diar ar jao (marh)
- Laret a vé eùé : pear diar gant (4 sur 100), ha : pear dré gant (4%)

### 2 – Impléioù arall :

- biùein diar an alézon
- komz (kojal) diar ar yézh
- hwi ho-po gran diar ho had
- é kerzhed diar toenn an ti

### Troioù lavar ged diar, a-ziar :

- Gwélet a hrér liéz a-ziar ar grouiad, pé doh treid ar skodoù, gwé yaouank é kreskad.
- Etal ur béh ponnér, taolet diar é skoé, ur hêh koédour a huanadé..

### An araogenn dré, dré hir, dré forh (*à force de*) :

- « Ar chignan a foèué, a dermé heb dischuéh (*diskuizh*) ; mez, o glahar ! dré fin astennein é grohenn ar foèouur a chomas ramblet àr an dachenn. »
- Dré forh er hleüed doh en em glemm en-doé fallet dein er houtantein.

### AVEID FARSAL HOAZH :

#### Pesk ru Pierig :

Ema Pierig el liorh, ardran an ti, é kargein un toull. An dén hag a viù én ti a-gosté er gwell, a-drest ar glud, hag a houlenn geton :

- « Hama, Pierig, petra a hret-hwi azé ? »

Heb seüel é benn é reskond ar paotrig éma marù é besk ru

hag éma doh el lakad én douar.

- « Med, perag e hwes-hwi groeit un toull ker braz aveid ur pesk bihan ? »

Pierig a daol é bâlad devézhan én ur reskond :

« Hama ! Ar pesk a zo én ho kast a gazh..... »

#### Toto ha Nini :

Toto, pemp blé, a zo é hoari ged é hoér Nini, daoù vlé. Ha chetu Toto é arriù, én ur grial, ged an ti-tan, léh m'en-dé é vamm é kempenn mérenn.

- « Petra 'zo Toto ? »

- « Nini en-des tennet mem bléu ! »

- « Ne faot ket kemér kaz doh ho hoér, me faotr kêh a

garanté ; ne oui ket anehi é hra droug ! »

Ha chetu oeit éndro Toto de hoari.

Un herrad goudé éh oé kleüet é krial éndro. Ar wézh-man éh oé Nini.

Ar vamm a ya ér mêz ha kentézh é lar Toto dehi :

-“Gouied a hra-hi breman”.

#### LAREDOÛ

- Tad ha mamm dastumerion, bugalé fonderion,
- Mar fall deoh dastumein madoù Pe lamet unan, lakeit daoù.

### TRI AVALIG RU :

Tri / a- va- lig ru e hoar- nan, lu- ra, tri  
Me zri a- val 'mes ket dé- bret lu- ra, me

a- va- lig ru e hoar- nan, tri / a- va- lig ru e hoar- nan,  
zri a- val 'mes ket dé- bret, me / zri a- val 'mes ket dé- bret

d'o- bér el léz, é rou- lét, é rou lan, d'o- bér el léz p'a- riù- ei enhanù.  
(ha) ga- lan er- bet, é rou- lét é rou- lan (ha) ga- lan er- bet 'mes ket hoahka- vet.


Tri avalig ru a hoarnan, lura, tri avalig ru a hoarnan  
Tri avalig ru a hoarnan, d'obér al léz, é roulet, é roulan,  
d'obér al léz p'arriüei an hañv.

Me zri aval 'm'es ket débret lura, me zri aval 'm'es ket débret  
Me zri aval 'm'es ket débret, galant erbed, é roulet, é roulan,  
Galant erbed 'm'es ket hoah kavet.

## GIRIOÙ-KROEZ (ged Kermorvan)

### A-hed

- 1-Arlerh ar hoareiz.-Nag éraog, nag arlerh.
- 2-Doned de voud gouiekoh.- Ya, é Moskou.
- 3-Lonig prizet tennet ag ar mor.
- 4-E yalh ar Rouménéd.- Pas énnoh.
- 5-Néañ é Kemper.- Hantér tadig kozh.
- 6-Ur houad àr ar mor.- Pas hwi.
- 7-Lettrad EVEN.- Temze, ne vern penaoz.
- 8-Achiù Yalta.- Pred de noz an Nédeleg.
- 9-Ludu dré an dehoù.- Rédadeg heb achimant.



### A-dreuz

- 1.- Ged Pier é Roma.- Fasipl.- 2.-Ketan lettrad.- Breman, én é unan.- 3.-Pesk deit ag ar mor Sargas.- 4.-kleuz kentoh.-Ur vogalenn dré zù wézh. 5.-Ar un dro.- 6-Baradouiz Adam.-Kurz (alge verte) flastret.- 7-Strollad politik é Bro-Skos.-Vogalennoù EBOE.- 8.-Lakad éndro àr an tan.- 9-Lodenn.- Mané tan é Sisilia.

Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed :** 1-PASK.-EPAD.-2-ABILAD.-DA.-3.-LEGESTR.-4.-LEI.-ENNON.-5.-NENV.-PE.-6-PENNRU.-ME.-7-EVN.-EZEMT.-8.-TA.-ADKOEN.-9-UDUL.-REDA.

**A-dreuz :** 1-PAOL.-PETU.-2-AB.-ENEVAD.-3.-SILIENN.-4.-KLE.-NN.-AL.-5.-A/GEVRED.-6.-EDEN.-UZKR.-7.SNP.-EOE.-8.-ADTOEMMED.-9.-DARN.-ETNA.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
dégemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, bouhadurezh...



### KOPIADENNOU EN HO UNAN

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhoù  
Entreprizioù  
Ne vem più...

### ENEZ GROE - Kambrou-ostiz (chambres d'hôtes) Digor a-hed ar blez



3, Ar Leur'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

### AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévraoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

**Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR**

N° CCP de l'Association : **NANTES 4 287 62 E** (chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigeñ Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann

Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herrièu - Jobig Le Guludeg

Alfons Samson - P M Jehanno - François Louis

22<sup>ème</sup> TROPHÉE

## ROÑSED-MOR 06 » 10 MAI 09 - LOKOAL-MENDON

CONCERT  
DU BAGAD

FEST-NOZ

CONCOURS  
FEST-DEIZ

JEUX BRETONS  
APERO-CONCERT

CONCERT EN ÉGLISE

EN BRETON :  
WEBNOZ - TV sur la MEE en DIRECT  
SPECTACLE de MARIONNETTES



PLUS D'INFOS  
WWW.ROÑSEDMOR.ORG



APRÈS-MIDI SPECTACLE EN BRETON

"MAB AL LOAR" par Pirate Puppet C<sup>o</sup> 5€

Contes, musique, marionnettes pour les enfants à partir de 3 ans.

WEBNOZ **GRATUIT**

Emission TV en breton en direct sur internet et en public sur écran  
Lionel Buannic : les 40 ans du bagad Roñsed-Mor, le musicien qui nous  
aujourd'hui, débats/discussions, musique en live, invités...



CONCERT EN ÉGLISE 7€

Avec Nolwenn Le Buho/Régis Huiban, Bagad Kevrenn Alre, Familial Le  
Meut, Le Meut/Le Biny/Le Henanff, Bombardes Roñsed-Mor.

SUIVI D'UNE "SCÈNE OUVERTE" au bar Le Dundee.



CONCERT DU BAGAD<sup>o</sup>

"KEJAJ"

Le bagad fête ses 40 ans avec : Pascal Lamour, Louise Ebrel,  
Gilles Servat, Dom Duff, Pat O'may, Samuel Le Henanff, Sko L...



JEUX BRETONS 3€

APÉRO-CONCERT **GRATUIT**

Citapolino/Conq, Botuha/Guingol/Quillay, Bagadig Roñsed-Mor.

FEST-NOZ 7€

Kendriñ, Stoujehet, Brou Hamon/Quimbert, Bagad Saint Malo, Moad/Chaplain.



CHAMPIONNAT DE BRETAGNE

Batteurs solistes (open, -16 ans, -14 ans), Sonneurs (couple kozh/breiz).

CONCOURS de Danse Vannetaise, Pipe bands, Ensembles  
Batteries, Trophée Mac Grimmon, Duos Ilbres, Bombardes /  
Percussions, Fest-Deiz

**GRATUIT** (Possibilité de repas sur place l'après-midi en soirée (Tombola))

**Pass Week-end 25€**  
(Concert Eglise, Concert  
Bagad et Fest-Noz)

Toutes les manifestations auront  
lieu à la salle Émeraude de  
Lokoal-Mendon sauf précision

Points de vente : Dundee, Brezh Ma Bro, Coop Brezh, Lem ha Dilenn, Malile de Lokoal-Mendon  
Ne pas payer sur la voie publique N°5. Commerce participatif (Lionel Le Gall) - Carnac (Brest) - Bro-Ereg

**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépot légal 1<sup>er</sup> trimestre 2009

INTERNET : <http://perso.libertysurf.fr/andoere> E-MAIL : [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)



N° 109

an


DOÉRIÉ

Priz:4€

## DASTUMADENN É BREZHONEG BRO GWÉNED

« *La Cancalaise* » – Ur « bisquine » groeit a veid sañ-drivein (*draguer*) an istr hag a veid roued-stléjein (*chaluter*). Chetu perag é toug ur gouéliadur ken braz (betag 350 m<sup>2</sup> : ar gouéliadur (*voilure*) brasan ag ar bagoñ labour), rag nerzh a zo rekiz, a veid gelled gobér ar labourioù tenn-sé.

Hirded : 18.10 m (30 m. étre ar penn-ér-maez (*bout-dehors*) hag ar sañg (*tape-cul*) : ar houél àr-dran aros (*poupe*) ar vag. Digorded:4.50 m.



La Cancalaise



SKOL UHEL AR VRO  
INSTITUT CULTUREL  
DE BRETAGNE

E  
Kastell  
An Erminig

6, straed an Nor Bostern  
(rue porte poterne)  
56 000 GWENED  
Pzg : (Tél) 02 97 68 31 10  
Plr : (Fax) 02 97 68 31 18  
lcb.suav@wanadoo.fr

[www.skoluhelarvro.org](http://www.skoluhelarvro.org)



Année de la Galice

31 juillet - 9 août

2009

Emvod Ar Gelled

Festival  
INTER CELTIQUE  
Lorient

Crédit  Mutuel  
de Bretagne

**LA** banque à qui parler

## ROLL AR PENNADOÙ

KENTSKRID : <i>Ne chomam ket de soñjal</i>	P. 4
DIWENN AN DOUAR : <i>ar gwéren klañv</i>	P. 5
ISTOÉR AN ARMORIG	P. 6 - 13
BAGOÙ ÀR AR MOR BIHAN	P. 14 - 15
ON DEÛÉZH É BUBRI	P. 16
BAGAD LOKOAL MENDON	P. 17
DARVOUDOU DE ZONED	P. 18
MATAO BIHAN HA MATAO BRAZ	P. 19 - 20
KOMZAM BREZHONEG	P. 21 - 22
DIHUSTELLOÙ - DIVINADELLOÙ	P. 23
UR FABLENN : <i>Ar hog hag al louarn</i>	P. 24
SONENN : <i>M'em-es gwélet...</i>	P. 25
GIRIOÙ - KROEZ	P. 26



Spilhennig « Ofis ar Brezhoneg »

Kiriég é peb skrivagner aveid ar skridoù embannet,  
édan é hanu, é pajennoù an doéré

#### KENT-SKRID :

#### *Ne chomam ket de sonjal*

Arriù é an termén de zis-chuéh, arlerh ur bléad a labour, sanset ! N'hello ket rah an dud neoazh moned àr an aodoù de rouzein o hein pé o hov édan térennoù an héol. Al lod brasan a chomo sioul én o liorh hag é pourmén dré an hentoù tro-ha-tro. Aweid moned de valé nen dé ket red, é gwirioné, kantréal pell a zoh or hornad bro. A zégouù é hellér kaved léhiou bourruz é Bro Gwénéed. An Doéré endes kinniget deoh Eko-Muzéom Sant-Degan, Muzéom ar Faoued, Kêr ar Gasiliég.... Boud a zo ré-rall èl Kastell Kerguehenneg é Begnén, Pont-Skorv...Elsé, ged dischuéh ar horv é hellér eùé dischuéh, ha pinùikad, àr un dro, or spéréd.

Ar gwellan tra aweid pinùikad ar spéréd a zo al lénne-

géz (lecture). Ne vank ket a libroù ér staliou-livr, ré de zeskein ar brezhoneg pé Istoér Breizh, ré eùé skriüet é kevér ar politik, an ékonomiezh, an darvoudoù a-vreman...

Un doéré mad aweidom-ni Gwénéderion : embannet 'vo édan berr « **Ar Bont ar Velin** » en-des skriüet Loeiza ar Melinér, « *Védig an Evel* » hé hanù skrivagneréz... D'an déiouù ketan a viz Gouél-Mikêl é vo gwerhet. E skritur a vo é peurunvan troeit é galleg a-dál. Komz a hrei hoazh « An Doéré » ag al livr-sé én é niverenn ketan.

Termén ar vakansou a vo enta termén d'en em binùikad ar spéréd, adal ma ne « chomam ket ré de sonjal » èl ma lar ar sonenn.....

*An Doéré*

#### DIWENN AN DOUAR : AR GWÉRÉN KLANV



*Ur wérénenn (liestér : gwérén)*

Oll an dud a ouér éma al loñed gouü é tigreskad é peb tachad àr an douar; én o mesk, de getan rah, ar gwérén. Ne wellam ket mui meid unanigoù anehé é neijal adreist ar bleu hag ar bokedoù. Chonjam penaoz éh oé geté deg vlé-so; nameid bourbouteréh én ér ag an amzér, ken niveruz éh oent é puncin adreist or pennoù. Goudé digresket o-des dré :

- 60 % é retér ar Stadoù Unañet
- 70 % é kornog ar mem broioù
- 90 % é meur a léh én Europa.

Ne oui ket an dud àr ar vichér perag émant deit de voud ker gloëu. Ar garé a zo bet taolet àr an O.G.M.. Mez, ne vé ket mui kredet éma azé ar wirioné.

Kentoh é vé chonjet breman éma ar viruz, pé ur gor (*champignon*) a vehé penn-kaoz d'ar goalleur deit àrnehé..

Ar garé a zo taolet eùé àr an obérédoù Monsanto, èl ar « *Gaücho* », ar « *warroa* », ar « *Régent* », impléet àr ar parkoù maiz hag a hrehé koll kousians ar saü-héol d'ar gwérén.

Mall braz é d'en em néhansein ; ar gwérén a zo rekiz grons de 80 % ag ar bleu hag ar bokedoù, ha mem betag 100 % de éleih a wé, aweid gouarn o fréhusted.

Ar wérénenn a zo seblant yéhed ar bed ; red é dem derhel chonj anehi hag hé diwenn, koustet a gousto. Rein a hra dem, ohpenn tra, méh hweg ha yahuz.

*An Doéré.*

## ISTOÉR AN ARMORIG

### Nominoë :



Delüenn Nominoë è Bains S'Oust

Nominoë a zougas é garg a « hGouarnour Breizh-Izél » ged féalded é kevér ar Franked, tré ma oé chomet Locizan-Dévoit àr é gadoér-veur (trône), ha mem goudé, pe oé bet an Empelaer didronet dré é dri vab diléal (déloyal) (830). Um gemér a hras èl-sé de Lantbert, p'en-doé hennen um saüet éneb d'ar Roué. Ha, goudé marù an Empelaer, ér

blé 840, anzaù a hras eùé damani (suzeraineté) an héritour, Lothaire, heb kemér perzh, neoazh, ér brezél intañet neuzé étre bugalé an Empelaer marù.

E velestradur (administration) èl Gouarnour Breizh-Izél a oé avizet ha diskoein a hré doujans é kevér an iliz.

El-sé en-doé kousantet seüel un abati é Redon, ha lakeit ér penn anehi un abad santél, Konvoïon, hag a oé bet agent béleg-meur (archi-prêtre) é eskobti Gwénéed.

Klask a hras eùé dakor kontelezh an Naoned de Lantbert, é léh ar Pikton lakeit azé dré Karl-Mouel. Alas ! tud an Naoned n'en-doé ket vennet dégemér Lantbert éndro, ha cherret o-doé doriou ar gér a-dal dehon. Lantbert en-doé neuzé goulennet harp an Normaned hag a oé stalé é inizenn Hérió (Noirmoutier) ahoudé ar blé 830. Arriù a

hrézant enta, an dé 24 a viz Méheüenn 843, dé Gouil Sant-Iehann, ha diskar a hrezant ar gér abézh, hag an ilizvamm hi-mem, saüet ha kempennet ker braù gwézh-arall, dré Sant-Félix. Lahet a oé bet an eskob Gohard, éan eùé, doh treid an aotér, ged un nivér braz a gristénion tolpet én dro dehon.



Tachenn an Emgann (Bains S'Oust)

Diskenn a hras neuzé Karl-Mouel (mab Loeiz-an-Dévoit) de Vreizh-Izél ged é lu vraz, éneb de Vretoned Nominoë. Mez ne hounidas ket an emgann a-dal de soudarded Breizh, ha féahet a oé bet agrén é Ballon, é kosté Kistre-

berh (845). Téhet en-doé mem én ul lézel àr é lerh an oll darbar (approvisionnement) ha trezoliou a oé geton...ha kousant a hras eùé dilézel de Nominoë an droèdou en-doé agent àr kontelézhiou Roazhon hag an Naoned.

Vennein a hras neuzé Nominoë boud kouronet èl Roué Breizh-Izél ged an eskobed a Vreizh, mez péar anehé, ré Gwénéed, Alet, Kemper ha Kastell-Paol, a rahuizas (refusa) dehon an inour-sé... Konvoïon, abad Redon, a zizolas neuzé penaoz an eskobed-sé a oé « simoniaked », de lared é, é oent kabluz a werzhein ar sakramantou. Kaset a oé bet enta ul lizhér d'ar Pab, ha goulennet geton lemel o harg d'an eskobed kabluz. En a-tretan, éh oé bet tolpet un emvod-iliz (synode, concile) é Koetloù (?), ha digadoéret (détrônés) ar péar eskob, én ul lakad én o léh péar arall. An emvod-iliz a saüas eùé daoù eskobti neüé, é Sant-Brieg hag é Landregér, hag a hras é

bennoh d'ar Roué Nominoë, (heb eskob an Naoned), goudé boud diliammet (*détachée*) grons iliz Breizh-Izél azoh eskobti Tours.

### Erispoë :

E vab Erispoë a geméras a-benn é léh hag é gouronenn, deusto de vennanté Karl-Mouel de lakad éndro Breizh-Izél édan é vestroni.

Ha chetu Roué ar Franked é Breizh-Izél, hoazh ur wézh, ged é soudarded. Mez, é léh gounid an emgann, éh oé bet féahet, ur wézh ohpenn, éan eùé, ha forset dehon anzaù (*reconnaitre*) d'ar Vretoned an droed de voud hanüet "Rouañé", ha pas hebkén "Konted" èl a-gent. Anzaù a hré Feur (*traité*) Angers (851) penaoz ne oé ket mui liamm erbed étré Rouanteléz Breizh-Izél hag Empelaerezh ar Franked... nameid al lid-féalded (*hommage*) deliet aveid konte-

Merüel a hras Nominoë ér blé 851, épad ur rédadeg étré Vendôme hag ar Mans. Lared a hrér anehon penaoz éh oé bet « **Tad ar Vro** ».

lézhioù Roazhon hag an Naoned...

Alas ! Chom a hré hoazh an Normaned àr douarou àr gourinuz, ha derhel a hrent de zismantrein (*détruire*) ar vro, par ma hellent. Keméret o-doé éndro ar gér ag an Naoned, hag hi rivinet o-doé, hoazh ur wézh. Naviet o-doé eùé betag Redon (855), ha prest a oent d'hi revinein eùé, kenevé ur gohad goall-amzér blaodzuz...Ha moned a hrézant enta pelloh, trema douarou ar Franked...Ar Vretoned hag ar Franked en-doé ataù, ér prantad-hont, kement a hoant, ar ré-man hag ar ré-rall, de gempenn ar péah étrézé, a-dal d'an alouberion (*envahisseurs*) Normaned...

Neuzé é tas de gKarl-Mouel ar chonj de hounid ar péah

ged ar Vretoned é timécin é vab Loeiz de verh Erispoë...

Salomon, kenderü Erispoë, hag an oll dud a noblans én dro dehon, a oé bet chifet hag ankinet é kleüet an doéré-sé, rag ma oé kement-sé forh riskluz aveid frankiz ar Vro, én amzér de zoned. Temall a hrent eùé de Erispoë en-de-

### Salomon :

Karl-Mouel, kounaret, en-doé chonjet neuzé um deurel hoazh àr rouantelezh ar Vretoned, mez ne vennas ket disklériein brezél dehé, ar wézh-man, dré ma oé é vab Loeiz a-du ged Salomon. Goulenn a hras hebkén, ged an eskobed tolpet é Toul (859), gourhemennein (*commander*) de es-kobed Breizh-Izél um lakad éndro édan bili Tours. Mez eskobed Breizh-Izél a chomas fidél, èl rézon, de eskob Dol, revé gourhemennou an emvod é Koetloù.

Ar Vretoned, kounaret ind eùé, en-doé neuzé um daolet àr kornadoù diziüenn ar

voud dégeméret éndro Aktard àr é gadoér-veur, é eskobti an Naoned...

Um daolein a hrézant enta, oll àr un dro, àr ar peurkeizh Erispoë, hag er lakad a hrézant d'ar marü, a daolou glé-an... Ha chetu Salomon deit de voud Roué Breizh-Izél, goudé é genderü Erispoë !....

Maine hag an Anjou, ged se-kour ur vandennad Normaned, hag a oé deit, neuzé, de voud ar vistr én Neustria (*an Normandie, breman*). Mez komprenn a hrézant eùé penaoz éh oé riskluz aveité boud kevredet ged tud sort-sé hag en-doé destrujet Redon ér blé 869. Deit a oé ar hourz d'um ziskoein grons éneb dehé, nag é vehé aveid sekour ged ar Franked adkemér ar gér a Angers (875).

Salomon a reseüas neuzé, ér blé 868, ul lodenn ag an Neustria (*Bro-Avranches, ha gourinuz ar hKo-tentin*), hag an Anjou.

Deit enta de voud ami d'ar Franked – aveid skarhein an Normaned – chom a hré neoazh Salomon kabluz én é spered, a-zivoud marù é genderù Erispoë, hag aveid boud pardonet, é ras de vench Redon ar paléz en-doé saüet é Plélan, é kosté Roazhon. Prest a oé mem de voned de Rom aveid boud pardonet, ha kaset en-doé ul lihér d'ar Pab Adrien eid ma vehé inouret eskob Dol ged ar « Pallium »...

An dud a noblans a gavé kement-sé dijaoj, rag prest a oé mem Salomon de zakor o

#### Alan-Meur :

Arlerh Salomon, rouantelezh Breizh-Izél a oé bet én danjér, rag ma en-doé neuzé kollet é unañedigezh (*unité*) étre diù hantérad :

- hani Roazhon, édan bili Gurwan,
- hag hani Gwénéed hag an Naoned, édan bili Paskuitenn, heb komz ag al Léon ha

hargoù-eskob d'an eskobed digadoéret gwézh-arall, é gré Nominoë... Um dolpein a hrézant enta éneb d'ar Roué, én dro de bPaskuitenn, déan Salomon ha kont Gwénéed, ha de Gurwan, déan Erispoë ha kont Roazhon, ged harp Kourantgwenn, eskob Roazhon, ha lahein a hrézant Salomon, an dé 25 a viz Méheüenn 874, én é venati a bPlélan. Lahet a oé bet eüé, àr un dro geton, é vab Wigon. Merüel a hras ar Roué èl ur sant, ha reseüet a oé bet é rank ar sent, ér blé 910, doh gourhemenn ar Pab Anastase.

Kerneù, hag a chomé dieub (*libre, indépendant*), ha heb komz ag an Normaned, hag a glaské ledañad an Naustria (*Normandie*) betag flondrenn al Ligér...

Goudé 3 pé 4 blé a vrezél étre Paskuitenn ha Gurwan, - ged an Normaned étrézé hag én o mesk -, Gurvan a oé cho-

met klañv braz ér blé 877, ha Paskuitenn a oé bet lahet dré an Normaned.

Kenderhel a hras neoazh ar brezél étre ar rénerion neüé :

- Alan, brér Paskuitenn, ha kont Gwénéed,
- Judikaël, mab Gurvan, ha kont Roazhon,
- Konted al Léon ha Kerneù,
- ha Konted ar Poher...

An Normaned a hellas enta doned éndro d'an Naoned, hag hé distruj a hrézant hoazh, ged an oll komadoù én dro dehi, étre al Ligér hag ar Blañoeh (888).

Abenn ar fin, Alan ha Judikaël a gomprennas éh oé rezik dehé unañein an oll Vre-

toned én un heveleb lu, éneb d'an alouberion...hag um daolein a hrezant – oll àr un dro – àr ar Normaned milliget. Judikaël a gollas é vuhé àr ar bratell-brezél, é Trans, mez Alan a oé deit de benn a ziskarein grons nerzh ha gelloud an alouberion, én ul lahein 15 000 anehé é emgann vraz Kistreberh (890).

Neuzé é chomas an Normaned bourdet, ha digalonekeit, épad 17 vlé...betag marù Alan, ér blé 907.

Ha reit zo bet de Alan an hanù **Alan-Meur**, aveid derhel chonj anehon de virüikin, èl unan a rouanné kalonekan Breizh-Izél !

Ged Alan Meur é klozan me « Istoér an Armorig », étre ar 5vet hag an 10vet kantvléad. Chom a hra, a dra sur, de ziférein kalz a zégouézhiou arall, a-houdé an 10vet kantvléad, mez lezel a hran al labour-sé de biù bennag a garo er gobér.

Aveid achiù ar pennad-man, é vennis hebkin, turel ur sell àr stad ar yézh – ar brezhoneg – é devé an 9vet kantvléad.

Eraog Nominoë, ar brezhoneg a oé deit de voud ar yézh komun èl Léon, Kerneù, Landregér ha Gwénéed, mez chom a hré, a daol sur, komadoù

hag a gomzé hoazh romano-gallig (*gallo-romain*), é retér ar vro, léh ma oé niverusan ar poblansoù gallig.

Ar brezhoneg komun en-doé, me gred, an heveleb stumm, de getan, én oll kornadoù brezhonekeit, ged, marsé, un nebeud diforh étre ar yézh komzet él Léon (léh ma oé deit kalz a dud a Vro-Gembré), é Kerneù (léh ma oé stalet drest-oll tud a Vro-Cornow), é Landrégér (léh ma oé niverusan an dud deit a vro an Devon). E Bro-Ereg, ar yézh en-doé, heb arvar, gouarnet un bouchad giriou ha troiou-lavar tennet ag ar romano-gallig, dré ma oé bet brezhonekeit ar vro devézh-hatoh eid ar broiou arall, ha dré ma chomé nivérousouh énni, an dud a orin vénédig...

E kontrél, léh ma chomé ar romano-galled ar boblans nivérousan (é broiou Roazhon hag an Naoned), an dud endoé dalhet de gomz romano-gallig...hag o yézh a zelié doned de voud, ged an amzér

é tremén, ar galleù (*langue gal-lèze*) a anaüam breman.

E gré Waroch ha Nomoioë, Bro-Roazhon ha Bro an Naoned a oé bet staget doh rouantelezh Breizh-Izél. Ar brezhoneg um streüas neuzé un tammig doh tu ar retér, mez nivér ar « romano-gal-legerion » é Breizh a oé deit de voud ihuéloh eid hanni ar vrezhonegerion. Ar galleg a skouras (*prit*) enta, a nebeudigoù, àr ar brezhoneg, drest-oll ér hornadoù doh tu ar retér. Goudé an 10vet kantvleád, un nivér braz a Vretoned a oé bet eùé forset de guitad ar vro, én arbenn a zismantrou an Normaned : ha deit oé én o léh ur bouchad a Vretoned « gallekeit », heb komz ag ar hGalled tennet ag an Anjou, ar Maine, ar Poitou, ha kalz a gornadoù gallig arall. A-houde an amzér-sé, stad ar brezhoneg a zo bet enta àr an diwenn é retér ar vro, ha mem mar-a-wézh, é kalon ar vro, dré vennanté ar gelloud politig. Heb komz ag ar galleg,

hag en-des um streüet é peb léh dré ma oé yézh ar veles-tradur...ha heb komz ag al latin, hag a oé chomet yézh an iliz !

Ha penaoz é vo an amzér de zoned aveid ar brezhoneg ? Ne ouian ket, é gwirioné, mez me gred-mé an dra-man heb-

kin : ar brezhoneg a zo deit d'an Armorig gwézh-arall él yézh pamdieg ar bobl ; deli a hra enta chom é buhé, tré ma vo ar bobl kaloneg awalh aveid gobér anehon hé yézh pamdieg ! Azé éma an dalh...  
*An dé 31 a viz Meurzh 2 008.*

*Loeiz Ar Mouël.*

**N.B.** (*Notennoù berr*) :

**Ar Roué Arthur** : éan é, sanset, a oé, revé skridou gozh Bro-Gembré, mab Uther-Pendragon, ur brér de Ambrosius-Aurélianus. Keméret en-doé perzh é emgann Mané-Badon éneb d'ar Saozoned (495), àr un dro ged Riwall, penn-tiem an Domonéa. Lahet a oé bet é emgann Camlann (árdro de 540)...An istoér endes lakeit àr é gont, é gaou, péchanj, un nivér braz a voliahou dégouézhet é gré Maximus Konstantinus hag Ambrosius-Aurélianus.

**Kanao-Konomor** : éan zo ar mem dén él Marcus-Quonomorus, a gCornow, revé skrivagnér Buhé Sant Paol. Lared a hra neoazh Pitre-Chevalier, é "La Bretagne Ancienne et Moderne", penaoz éh oé mab de Riwall, penn-tiem an Domnonéa, hag ur brér eùé de vMéliàu hag Iona (Hoël Ilvet). Ean oé enta ur yondr de Waroch ?...Ne ouiam ket émenn éma ar wirioné ! Marsé eùé, él ma oé "Konomor" ur gir komun (kon, konan = brezélour ha roué + mor = meur, braz), an hanù-sé a hellé boud bet reit de vuioh eid un dén...



**« Oosterschelde »**

(Ar brasan lestr ar blé-man)

Porzh-stag: Rotterdam (Holland)  
 Sañet ér blé 1916  
 Gréaj: tèrgwern goelet  
 Hirded: 40.10 m (50 ged ar penn-  
 ér-maez)  
 Digorded: 7.50-Goueliadur: 891 m2


**SUHUN PLEG ar MOR BIHAN**

El bep zaoù vlé a-houdé 2001, tolp braz ar “gréajoù kozh” an des um zispléget ar Plég ar Mor Bihan, étre an 18 hag an 24 a viz Mae. Laket é des de zoned, ur miliérad benag a vagoù ha, de heul, sellerion a vostad d’ar horn bro. Nivérusoh hoah a oent merhad, én arbenn ma zigouéhé gouél an Asansion épad ar suhun-sé.

Seih strollad-lestri an des merdée (navigué) ha groeit riderezh-mor ar an Plég. Pemzeg porzh éhan (d’escale) o reseùé bep anderùnoz hag é vezé servijet dehé pred ar skipajoù. Kavouid e rent azé deverransoù a zevri, kempennet aveid an oll dud, deit eùé d’ar fest. Bamdé, ur hévelep tra n’um zisplégé é peb unan ag ar perzhér aral....

**« La Nébuleuse »**

Porzh-stag: Kameled (Camaret)  
 Groeit aveid pesketad an ton hag ar hregad  
 Hirded: 16.38 m-Digorded: 6.03 m  
 Goueliadur: 320 m2



**« Cap Sizun »**

Gréaj : sloop  
 Groeit aveid pesketad ar grill-mor  
 Hirded: 14.80 m(21.30 ged ar penn-  
 ér-maez)  
 Digorded: 4.80 m  
 Goueliadur: 175 m2

..... Ar blé-man, Bro Kembré a oé kouviet eid boud én inour, ha kaset en des geton 27 bag ag é vro. Displéget en des eùé, oll ar péh a vé groeit duhont, de getan penn, a zivoud ar moraj (choses de la mer) : staliou labour, diskoézhadegoù, hag eùé buhé sevenadurel ar Vro.

Ar Valéadenn Veur an des klozet Suhun ar Plég, d’ar sadorn 23, ha kenniget hé des d’ar sellerion nivéruz, un arvest heb par. Ar mil bag ag en devoé keméret perh ér Suhun, en des um gavet ér maez ag ar Plég aveid um dolpein. Geté eùé, un nivér braz a bagoù aral, deit a bep tu. Er penn ketan ag an andèrù, oll ar strolladoù lestri-sé a zo deit éndro a-barzh ar Plég, fonnabl tré, rag douget ar un dro ged an aùél ha ged deur-réd ar chal (flux, flot, marée montante), kalz kriù azé. Revé o rumm, ar bagoù en des douaret arlerh, ér perzhér léh ma oé delé dehé moned. Ar bagoù labour hag ar yoled hebkin a zo ocit betag Gwened.

Testenn : J. Le Galudec

Luhskudennoù(fotoioù) : Yves Le Galudec

**« Spered ar Mor »**

Yole hengounel (laret “de Bantry”) Impléet a oé dija ar vagoù-sé ged ar voraerion brezél a vro Frans a-dall ar blé 1796.  
 Kerhet a ra dré roan (betag 10) a gelled a ra doug 3 houél.  
 Hirded: 11.80 m- Digorded: 2.20 m.





## ON DEÛEH É BUBRI :

Arlerh an Tolp-Blé én Ti-Parréz, de 9 eur ½, é soñé kléhiér an iliz-parréz de goui an dud d'an overenn-bred. Ohpenn daoù gant anehé endes hi heuliet, curuz d'en em gaved oll àr un dro é pédein hag é kañein é lavar or bro. An Tad Méliàu Guillaume,

person Melrand, a zo bet al lidour hag ar predéour.

De greisté hantér éh oem tolpet é ti « Ar Goualleg » betag àrdro pemp eur. An tu a zo bet de gañein étrézom ged plijadur, pé de chelaoù Pier-Vari Jéhanno é hoari ged é a-kordéon...



Pier ar Padelleg



Louis Morvan

=

Kénavo ar hetan gwézh, de lared é, Dé an Asansion abenn ar blé, d'ar yaoù 13 a viz mae 2009.



Nicole ar Padelleg

≡

## BAGAD LOKOAL MENDON ÉN É 40 VLÉ, HA 22 VET MAOUT "TROPHÉE" RONSED MOR

An dé-ha-blé en-des padet 5 deùézh étré ar 6 hag an 10 a viz mae :



Ged aotré « An Tour Tan »

**Dimeurhér 6/5** : un deùézh drestoll a veid ar skolerion : 17,6 % anehé é Lokoal a zo é teskein ar brezhoneg.

**Diryaoù 7/5** : ur soñadeg é iliz Pleñùér, lan a dud, a zo bet ag ar wellan, hag en-des plijet braz d'an oll.

**Digwénér 8/5** : de noz éma bet kinniget un arvest neùé ged soñerion ha muzisianed en-des kenlabouret ér bagad : Louise Ebrel, Jil Servat, Pas-

kal Lamour, Sam Le Héanff, Pat O'May, Dom Duff, ar Strollad Sko... Enrollet vo é "live" a veid kempenn un albom hanùet « Kéjaj ». An arvest a vo hoariet éndro d'ar 5 a viz est épad ar Festival Etrékel-tieg én Oriant, hag eùé é Pempol, Pleuignér ha Gourin (kenstrivadeg ar soñerion).

**Disadorn 9/5** : programm an deùézh : hoarioù, ur soñadeg hag ur fest-noz...

**Disul 10/5** : be zo bet ur gentstrivadeg (*championnat*) Breizh, étré muzisianed ha soñerion, ha kenstrivadegoù arall (korolloù, pipe-bands...), ur Fest-Deiz tro an enderù.

**Gourhemenoù** d'ar ré endes kempennet ar 5 deùézh kaer-sé hag a zo bet heuliet bamdé ged ur bochad tud deit ag ar vro tro-ha-tro.

## DARVOUDOU DE ZONED :

Termén ar festivalioù é Bro-Breizh a zo é arriù. Marsé oh-penn kant, ar ré vraz anaët mad hag ar ré bihannoh, a vo kempennet aveid plijadur an oll. En o mesk on-es dibabet ar ré-man :

De getan é vo **Pardon Braz Santéz Anna** d' ar 26 a viz Gourhelén, ur sul ar blé-man. Un overenn a vo laret é brezhoneg de 9 eur de vitin.

**Festival Kerné** (*Festival de Cornouaille*) ag an 18 betag an 26 a viz Gourhelén.

**Celtival an Don** é Gwéméné-Penfao d' ar 1 ha 2 a viz est.

**Les Celtiques de Guérande** ag ar 4 d' an 9 a viz est.

**Festival Sant-Loup** é Gwengamp d' an 8 betag an 16 a viz est.

**Festival Etrékeltieg an Orient** ag ar 31/7 d' an 9/8. Bamdé é vo kinniget abadennoù ag an

dibab. Aveid gouied beb tra :  
pgz 02 97 21 45 85.



er Festival Etrékeltieg

**Festival Fisel** é Rostrén d' ar 27 betag an 30 a viz est.

**Emgavadennoù an Erdr** (*Les Rendez-Vous de l'Erdre*) 28/29 ha 30 a viz est....

N'hellam ket o lakad rah ; lakeit a veint én ho kaze-tennoù. Un dra zo sur : « ne chomeem ket de sonjal ».....

## MATAO BIHAN HA MATAO BRAZ

E flagenn an Dourig, é tiér Kerhaleg, é chomé daoù zén a zougé ar mem hanù : Matao. Unan anehé a oé pinüig, ur haer a di dehon ha péar jao de labourad é barkoù; **Matao braz** a oé henneh. An arall peur èl ur rah, a vezé groeit **Matao bihan** anehon. Hennen a viùé én un tiig distér ha nen devoé meid ur jao de zigor é damm douar.

Tro ar suhun, Matao bihan a oé daù dehon moned de benhér Matao braz d' é zeüeh. D' ar lun hebkin, dé foér Pondi, Matao bihan a gavé an tu de labourad aveiton ged roned é gilé prestet dehon.

An dé-sé, Matao bihan rondonuz ged é bemb jao a laké é foet de darhal. Ean o sellé èl é ré, hag an héol én èbr ag an amzér a seblanté hoarhein doh ar labourér. Paotred ha merhed a dreméné àr an hent braz é voned de gér. Ind a daolé un dramsell d' ar park. Ha Matao bihan ne hellé ket parraad a huchal àr ar pemp lon : « Hu ! Dia ! Me ronsed »

Just-awalh, chetu Matao braz é tremén hag é kleù ar youhadenn. « Ne huchet ket **Me ronsed**, mar plij ; nen des nameid unan hag a zo deoh. »

Matao bihan a ankouéhas buan ar gemenn hag é wéled hoazh ur bochad tud é tremén chetu é déad é tisklom arré : « Hu ! Dia ! **Me ronsed**. »

« Aveid ar wéh devéhan, emé Matao braz, ne vennan ket mui kleüed ho pegad. Mar da deoh en ankouéhad me vouto ged ho jao hwi un taol mell ken ponnér mar kouého marù-mik àr an dachenn. »

« Ne larein ket, né larein ket kin... » a vourbouté Matao bihan.

Siwah ! Aveid an derved gwéh, a pe wélas an dud hoah é tremén é sellé doh ar pemp jao, chetu hoah ar boulo mig é foëüein. Gobér a hras d' é foet tarhal ihuél : « Hu ! Dia ! **Me ronsed**. »

« Me ziskouei mé deoh **HU ! ME RONSÉD** a respond Matao braz, kuhet àrdran ar hleu. Ha éan é kemér ur mell pon-

nér, é skoein un taol kri àr benn jao Matao bihan. Ar peurkêh lon, ventet, a gouéhas marù-mik àr ar park. Kaer ouilein breman ! Ré zevéhad, Matao bihan ! »

Neoah ne gollas ket kalon. Deit dehon ar chonj de ziskrohennein é jao. Lakad a hra ar grohenn de séhein én aùél, hé boutas neuzé én ur sah, ha éan é moned de gér d'hé gwerhein "Atao, ne gollein ket tout !" emé-éan.

Mez an hent a zo hir, an amzér fall, ar sah ponnér. Nosad a hra a pe zigouéh é korn ur hoed, doh un ti cherret geti dor ha fenestr. Neoah, gouloù a splanné én diabarh :

"Marsé é hellein-mé obér un hun aman de hortoz an dé, a sonjé Matao bihan.

Skoein a hra àr an nor.

Un vouéz a za de zigor : "Più oh hwi ? Petra a faota deoh ? »

Pe gleùas ar respont ar plah a dér dohtu : « Kerhet ged ho hent ! Men goaz nen dé ket aman. Petra a vo laret ahanon

ma zigeméran paotred é me zi d'an noz me unan ? »

« Hama ! Dam pelloh neuzé, me gousko ér mêz, ne vo ket ar wéh ketan a vo... »

An nor é cherrein...klak ! a cherras é veg dehon ... Tost d'an ti éh oé ur harrdi plouz, ur samm mad a foén yohet a-barh. "Me zraoù, emé Matao, ar gulé a vo blod ha tuemm atao !" , ha éan de grapein, d'en em astenn...just adal de fenestr penn an ti a oé chomet un tarh digor àr ar gampr. Chom a hra bamet ! :

Ar an daol vraz éh oé kempennet hag aléjet un tamm mad a friko : kig rost, avaloù douar melénet én amonenn, katèu ha gwin aleuret ér gwérennoù. Doh taol é kerhé an hoarhereh étre ar plah...ha klohér ar vorh !

Matao bihan a astenné é houg hag a lipé é veg :

"An tamm ag ar friko-sé ne hrehé ket droug déin aman é me foéneg. Mez penaoz en tapein ? »...

(de genderhel) **Raf Pondi**

## KOMZAM BREZHONEG :

### De vintin :

"Saùet oh é kourz, ar mintin-man !,,"

„D'em oed-mé, ne vé ket kousket mad d'an noz. Fall gousked a ran a-houdé me zri-ugent vlé."

"Gellein a hret labourad, ur sord ?

« Ya, bamdé é labouran hag é kerhan dré ar vinotenn,

### Ema kreisté é toned :

« Mall a vo deoh tostad, tad-paeron (*s'adresse aux personnes âgées*) ! Kleùed a rér kloh ar chapél é son ! »

« Amzér em-es, rag hizüü é vo devéhatoh mérenn ! »

« Na perag enta Loeiz ? »

### Doh taol :

"Ronan ! En em zalhet mad doh taol ! Ne laket ket ho taoùlin (*coudes*) àr an daol ! alkent !"

"Ne gomzet nameid a pe larein deoh."

aveid gouarn me vegon, ha me yéhed. »

« De bed eur éh et hwi de gousked ? »

« De naù eur d'al liésan, ha de unneg eur é tereuan (*komansan*) hunvréal !

« Hunvréioù flour a hret ? Ré guriuz oh-hwi, me faotr ! »

"Losket é an tamm kig àr an tan ! ha red a vo d'ar vestréz gobér krampoèh àr ar baelon vihan."

"O gwell arzé ! Gwell é genein krampoèh eid kigmoh !".....

« Dèbret àr ho koar. Chaket mad ho pould ! »

"N'anséet ket komz pe vé lan ho pég."

Loeiza, mamm ar vugalé, a ouér o desau ged karanté, ged

doustér, mez eùé ged eùéh,  
ged sklérdér, ha zoken rus-

### D'enderù-noz :

"Goannad a hret, Job !"

"Ya, nerh me youankiz 'zo  
kouéhet àrdran ar hleu. Hag  
hiziù, éh on oeit ré fonnabl  
ged me labour, ha gaoù em-es  
bet ! Liéz éh es bet laret dein  
"Ur goall lon oh hwi. Ema ar  
berr anal genoh, ohpenn tra.  
Nag ur huizenn àr ho kein !

### Goudé koén :

"Brèuet é me horv paour  
d'al labour, Loeiza !"

Honnen a respond : « Goan-  
nad a hra men diùar eùé. E  
me saù, hed an dé, nitra falloh  
!"

"Al lomm kafé pedèr eur, nen  
des ket reit begon deoh ?"

"Vad en-des groeit, èl rézon,  
med ur flip, hag ar gwélé

### Boud pinùikoh :

Petra a vehé, p'ho pehé  
muioh a zañùé ? Hwi a ga-  
rehé ho pehé hoah muioh ha

toni, a pen dé rekiz ha tal-  
vouduz.

Hama, Job ! breman, a pen  
doh én ho saù, é wellan éma  
glub ar roched àr ho kein, ged  
an huiz ! Groam un arrest ha  
dam de éved ul lomm kafé é  
tavarn ar Vretoned, kant paz  
avaman. Ur volad chistr o-des  
lonket o daoù.....

goudé, chetu ar péh a horto-  
zan ged hirèh, aveid doned de  
blom !" a lar Maria.

Ha Pol Trémeur, ged ur  
vouéh "predégour" a zistill :

« Un tamm hag ul lomm a  
hra vad d'ar boulom,

Ul lomm hag un tamm a hra  
vad d'ar boufamm ! »

*Mériadeg*

ne vehéh ket ker koutant èl  
hiniù-an-dé ?

### DIHUSTELLOU - DIVINADENNOU :

1 - Chetu 2 saill ; én hani ke-  
tan (saill 1) é hellér lakad 3 li-  
trad deur, én arall (saill 2) 4  
litrad.

Ged an diù saill éh es tu de  
vuzuliein 2 litrad deur. Pe-  
naoz gobér ?.....

Respont : *Lañet de getan ar saill 1, diskarget neuzé an deur ér saill 2.  
Lañet éndro ar saill 1 ha diskarget ér saill 2. Digemèr a hra hoazh 1  
litrad, ha chom a hra 2 litrad ér saill 1.*

2 - Pégement a zouar a zo én  
un toull a 15 santimetr (sm.) a

zonded, 10 sm. a ledanded, ha  
10 sm. a hirded?.....

Respont : *én un toull, nen des nitra.*

3 - Daoù zén a zo kavet én  
un dézerh. Unan a zo marù, é  
sah-kein cherret. An arall a zo

biù, é sah digor. Petra a zo  
bet geté ?.....

Respont : *hama, daoù parachoutour int ; parachut an hani marù nen des  
digoret.*

### FARSADENNOU :

1 - Viktor a zimé arhoah (ar-  
c'hoazh). Sammet ged é  
labour, pell-gomz a hra d'an  
aotrou person : "Mar n'ar-

riùan ket d'an eur merchet ne  
lidet ket an euredenn éraog  
ma vein arriù....."

2 - "Ha ! Deit oh de vould  
yah éndro."


"O pas, falloh fall éh a an  
traoù genein. Pe zehé unan

bennag de lared dein "Chetu  
hwi marù" ne vehéh ket  
souéhet.

### AR HOG HAG AL LUHERN (LOUARN) (troeit ged Mériadeg)

Kludet ar ur barr iheuél, ur hog a houarné ar hornad bro-sé.  
Koh a oé, mez luemmet atañ a spered.  
Dégouéhet duhont un dé, ar luhern a lar d'ar hog, ged é vouéh tinéran  
"Nen des ket mui brezél étrézom !  
Deit é ar péah ha getoñ un emgleù karadeg.  
D'ar lared deoh én on deit, mem breur ar Hog.  
Mar karet, dichennet ag ho parr iheuél  
Hag em-bo mé ar misi, ar blijadur vrasañ, hiziù, de vokein deoh !  
Mar plij genoh, dichennet, abenn kaer, rag éma red dein moned heb dalé  
de wéled tri breur dein, én o zoullou luhern.  
Gellein a ret hwi biuein é peah, hiniù-an-dé,  
Balé èl ma karet, ged ho nasad yér griz,  
Ha ni, kog ha luhern akord, ne vem bremañ nameid breudér.  
Plijet enta genoh, diskoein kentéh, mar gellet,  
Éh om deit de voud kar, unañet a galon,  
Ha dichenn betagon, a veid ur bok a garanté."  
« Kensort kér, a lar ar hog, n'hellen ket mé  
kleüed hiniù, un doéré kaeroh eid doéré ar peah !  
hag euruz dreistoll d'er hleüed ag ho pég.  
Med béam dalbéh eùéhuz, ha sellam éndro dem.  
Sellet 'ta ! Me wél daoù levrar, daoù gi braz,  
Douget de rideg trema toullou al luherni.  
Na herr a zo geté ! Na buan éh arriueint !  
Dohtu enta, luhern, é tiskennan de vokein deoh,  
ha hwi dein, ged oil ho karanté !"  
"Kénavo ur wéh-rall, a zistilh al luhern,  
Ha ni a hello, hon daoù, bokein unan d'an all,  
Ér peah flouran, é kreiz al leüiné !"  
Ha kentéh é saill ar galand kuit, kounnaret braz  
M'en-doé afochet é dro kamm, ged an tamm kog-sé !  
Ha, doh an tu-rall, éh oé joé é kalon ar hog !  
Ha derhel a ré de hoarhed, rag ma oé deit de benn  
A feahein ul lon ker fin, èl m'en-dé ar luhern !  
E gwirioné, ur blijadur hantér vrasoh é, a pe hellér lorbein ar lorbour,  
Ha dreistoll luhernein al luhern eañ-mem.

### M'em-es gwélet én hur pardon



- 1 - M'em-es gwélet én hur pardon  
tra la la la de ri la la  
M'em-es gwélet én hur pardon  
Ar biniou ged ar person.
- 2 - Hag ar bombard ged ar huré  
hennéh a vod a hoarié
- 3 - Hag ar hlohér ged hé goupenn  
e tigas chistr d'ar soñerion
- 4 - Pedér léannéz ha péar abé  
A oé é kroll árdro dehé
- 5 - Ha lared hoah ar véleion  
Ne garant ket ar soñerion
- 6 - Ha koulskoudé, o ma Doué,  
Pli enta zo goah aveité ?
- 7 - Ar person ged é viniou  
Oé é kañein ar gopérou
- 8 - Ged é vombard 'n Aotrou Kuré  
D'ar person kozh a ziskañé.
- 9 - O zok geté doh kost(é) o fenn  
Eh ent d'ar gér, 'giz soñerion.

N.B. : «M'em es gwélet én ur pardon » a zo tennet a livr Jean-Louis Larboulette en-des embannet Dastum Bro Ereg péar blé-zo. Ul livr présiuz é. Tu a zo hoazh merhad d'er haved é Coop-Breizh...heb gortoz ré.

## GIRIOÙ-KROEZ (ged Kermoryan)

### A-hed

1-Komans a hrant ardoù.-Goulenata.	1									
2-Ne gleù ket.- ¼ réal.	2									
3-Panell skriüet.	3									
4-Sant bihanneit.- Heudoù	4									
5-Più anehé ?.- Keu, berroh.	5									
6-Liësaad, heb é lost-gir.- E vag a zo chomet àr ar mané Ararat.	6									
7-Gir-mell.- Lonig piñsour ar mor.	7									
8-Gouarnour ar skipailh Football.- Edan ar vuoh.	8									
9-Hantér nann.- Ur blé a-béh.	9									

### A-dreuz

1.- Hantér abil.- sklêr.- 2.-Krazein.- 3.-An Aotrou Yann a oé unan.- Ul lor ged an arall.- 4-Ihuelloh eid an eskob.-5.-Aria.-Ur mor kousiet 6-Ar lein me fenn.-Bier é Londrez.- 7-Diméenn.- 8.-Loér draillet.-An hantér a Oklahoma.- 9.-a)laré é hourhemenoù.-Estet é miz est..



Reskond : (ne sellet ket heb klask !)

**A-hed** : 1-ARD.-ATERS.-2-BOUAR.-REA.-3.-SKRITELL.-4.-ST.-HAODOU.-5-PERE.-KE.-6-LIESA.-NOE.-7-AN.-KRANK.-8.-GOAL.-LE.-9-NA.-BLEIAD.

**A-dreuz** : 1-AB.-SPLANN-2.ROSTEIN.-3.-DUK.-RE.- 4.-ARHESKOB.-5.-ARIA.- ARAL.- 6.-TOK.- ALE.- 7.EREDENN.-8.-RELO.- OKLA.-9.-SALUDE.-ED.

**A**tlantic  
**B**reizh  
**K**opiadennoù

Skritelloù, mailing, kartennoù-  
degemer, pik-fax, grouiennerezh,  
plastikerezh, boulhadurezh...



**KOPIADENNOU EN HO UNAN**

Jean-Michel MAHEVAS : 02 97 35 22 61  
abcopies56@wanadoo.fr  
10, avenue A. FRANCE 56100 LORIENT

Studierion  
Kevredigezhoù  
Entreprizioù  
Ne vern più...

**ENEZ GROE - Kambroù-ostiz**(chambres d'hôtes)  
*Digor a-hed ar blez*



3, Ar Leur'hae Enez Groe Pgz : 06 09 71 01 91

AMZER NEVEZ

Kentelioù ha stajoù sonerezh, dañs ha brezhoneg ;  
Lévraoueg keltieg, abadennoù sonerezh, festoù noz  
Degemer evit ar c'hevredigezhioù (saliou emvod...)

Amzer Nevez-Soe 56 270 Planvour Plg:02 97 86 32 08  
Fax : 02 97 86 39 77 e-mail amzervevez@wanadoo.fr

# ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie 56340 CARNAC

Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'association, pour les abonnements à la revue  
écrire à :

**Ao Alfons Samson : 8, Av. Jules Le Guen - 56260 AN ARVOR**  
N° CCP de l'Association : **NANTES 4 287 62 E** (chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigeñ Bro-Ereg)  
Kenlabourerion An Doéré en niverenn-mann  
Loeiz Ar Mouél - Mériadeg Herrièu - Jobig Le Guludeg  
Alfons Samson - P M Jéhanno - Yves Le Galudec

Daoù sinago (o hanù a zo tennet a « Séné », bro orin ar bagoù-sé: « *Les Trois Frères* » ha « *Joli Vent* » Ar hetan anehé a zo bet greoit é 1954, ha reneuet é 1988 hag é 1992. Saut é 1954 « *Joli Vent* » a zo bet reneuet adal 2007, érag doned éndro àr an deur é imbril ar blé-man. Goarnet en des. Edeñ breman, é gouelioù gwen, rag ré neùe ind hoah, aveid boud liuet, èl ar réall, é « ru cachou » (ocre), ar roumagnel (traditionnel).  
Larded : 10.50 m - Digorded : 3.15 m - Gouehadur : 65 m<sup>2</sup>



**AN DOERE** : Publication trimestrielle : prix du numéro : 4 €

Abonnement annuel (4 numéros) : 15 €

+ 1 € (adhésion à l'association) = 16 €

Gérant de la publication : Louis LE MOUËL

Directeur de la publication : Alfons Samson

27, rue de Ferdinand Le Dressay - 56000 GWENED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03 1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépot légal 2<sup>ème</sup> trimestre 2009

INTERNET: <http://perso.libertysurf.fr/andoere> E-MAIL: [andoere@libertysurf.fr](mailto:andoere@libertysurf.fr)